


2 Lennegedh
vrezhonek


DRE AN TESTENNOÙ

EIZ LEVRENN

GANT F. ELIES




SKOL
1962



oooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooo
Niverenn Miz ebrel
Numéro : 17/18 avril 1962.
oooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooo


Dastumadenn drimiziek a Gelenouriezh renet gant Armañs Ar C'halvez
Priz ar c'houmanant : 12 LN Priz an niverenn voutin : 3 LN
PRIZ AN NIVERENN-MAN : 8 LN



Revue Trimestrielle dirigée par l'Abbé Armand Le Galvez
publiée sous les auspices de l'Association Bretonne d'Education
Nouvelle.

Prix de l'Abonnement Annuel : 12 NF Prix du numéro : 3 NF
Prix de ce numéro spécial : 8 NF

C.C.P. " Revue SKOL, PLOUEZEC, C DU N; RENNES 1911 06
oooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooooo
Annual Subscription : 12 New Francs, about 18 shillings, to be sent
to Barclays Bank, LLANRWST, WALES.
Renew your subscription as soon as possible and give notice to the
Editor : Revue SKOL, PLOUEZEC, Côtes d'Armor, BRITTANY.



A L L E N N E G E Z H V R E Z H O N E K
D R E
A N T E S T E N N O U

gant

Fanch ELIES-ABEOZEN.

S k e u d e n n e t gant AN TIMEUR.

Eil Levrenn.

DASTUMAD "SKOL"

<u>Rummad kozh</u>	Niv. 1 : Ar C'hembraeg e skolioù Kembre	2 LN
	2 : Kelennadur ar Frizeg	2
	3 : Douaroniezh Vreizh, gant A. Guilcher	2
	4 : 300 Divinadell (diviet)	
	5 : Rimadelloù hag Unangomzoù	2
	6 : Kudennoù ar Skolioù er Slesvig	2
<u>Rummad nevez</u>	Niv. 1 : Skol Sant Erwan (diviet)	
	2 : Nedeleg en Breizh (4 fezh-c'hoari gant Jarl Priel	3,50
	3 : Danevelloù diwar-benn ar Bleuñ-Brug ha Skol Sant Erwan (diviet)	
	4 : Kontadennoù Kozh ha Nevez, ul levr klok da gelenn ar yezh er gêr hag er skol	6
	5 : Danevelloù a bep seurt	2
	6 : Daou Vloavezhad e Skol Sant Erwan	2
	7/8 : Krennlavarioù, renketa ha datumet gant F. Kervella	6
	9 : Kanaouennoù Santel ha Komplidoù ar Sul gant Maodez Glanndour	4
	10 : Ar C'hembraeg hag ar Skol	4
	11 : Face au Problème de la Culture dans la Bretagne d'aujourd'hui	3
	12 : Ar Brezhoneg er Skol	2,50
	13/14 : <u>AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU, Levrenn gentañ</u>	8,00
	15 : Prizoniad ar C'haokaz, gant Tolstoj	3
	16 : " Breizh hag ar Bed ", un dastumad penadoù-kelaouenn gant H. Konan	4
	17/18 : <u>AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU, Eil levrenn</u>	8

E GWERZH E TI "SKOL" hepken :

ar blademn hirbad : " RIMADELLOU HA KANAOUENNOU EVIT AR VUGALE ;
33 tro, 30 cm, 20 LN gant ar mizoù-post hag an destenn skrivet.
Dastumad WANIG HA WENIG 1961 d'han ur golo moulet : 2,00 LN hepken
da gas da gent-red W & W : 175 96, Roazhon.
Koumanant-bloaz da WANIG HA WENIG, 4 niverenn : 2 LN hepken.
Distaol d'ar skolioù ha d'ar strolladoù .

TREDE LODENN

AN ENSAV YADUANK

(1918 - 1945)

AR VUHEZ HAG AL LENNEGEZH (Roparz Hemon)	175
I - B A R Z H E D	
<u>Teir Amzervezh ar Werzaouriezh Vrezhonek</u> (F. Kervella).....	177
<u>(Gwerzaouañ... Brezhoniañ)</u> (Maodez Glanndour).....	178
Ur Wreg er skeud (Y.É. Jari).....	179
Al Lestr (Roparz Hemon).....	181
Al Liorzh Espar "	183
Ar Rozenn Du "	183
Porzh "	184
Dabl "	184
Ar Marc'hag Bale-Bro "	185
Introibo (Jekéz Riou).....	186
Serr-Notz "	189
Ar Feunteun Zoun (Langleiz).....	190
Ar C'han war ar Menez "	191
Ar Glav (Maevann).....	193
An Dellienn Varv "	193
Ti ar Valafenn "	194
Daoulagad va Mamm "	195
D'an Hini Karetañ "	195
Kan Kresisteiz (Bened)	196
Frouesha "	197
Goulsier-Kêr (D. Kenan Kongar).....	199
Dichal "	199
Ma'z afemp ni... "	201

Enez ar C'hevriñ (Maodez Glanndour).....	202
Peskig ar Mor ".....	205
Ar Voc'hig Ruz ".....	206
Skeudenn war Dec'h ".....	206
Ar Paotr Muzik ".....	207
Ar Paotr Muzik oc'h ober tro ar bed ".....	208
Amzer Fall (Youenn Drezen).....	209
Nozvezh Arkuz e beg an Enezenn ".....	211
Kan an Noz (Kerverzicu).....	215
Triadennoù ".....	215
Koumoul ".....	216
Distro ".....	217
E Kervoial (Roperzh ar Mason).....	218
Noz war ar bourzh ".....	218
Gwerz Mamm Rohu ".....	219
<u>II - I R D I D I G E Z H I O U</u> :.....	223
<u>Al Lennegezh kozh ha ni</u> (Roparz Hemon).....	225
Tonkadur Bugale Lir ".....	226
RakLavar (Abeozen).....	238
Huñvre Ronaboe ".....	238
<u>III - P E Z H I O U - C ' H O A R I</u> :.....	251
<u>Arz ar C'hoariva</u> (Roparz Hemon).....	253
Ur Bugel a zo ganet ".....	254
An Dakenn Dour (Jarl Priel).....	264
Mazv ar Gêr (Meavenn).....	276

<u>IV - R O M A N T O U , D A N E V E L L O U , K O N T A D E N N O U</u>	285
<u>Ar Romant haq an Denevell</u> (X...).....	287
Yun ar C'halvez (Yeun ar Gow).....	288
Fañch ar Gioc'h (Soëig Jonkour).....	291
Ar Banne Gwin (Abeozen).....	293
Ur Vaouez Vat (Roparz Hemon).....	296
Sant Evardon (" " ").....	299
Drailhennoù Diwezhañ ar Pardon (D. Kenan Kongar).....	303
An Hini bihan (Meavenn).....	306
Sant Ewan e-touez e beorien (Jakez Konan).....	308
Tro Lom an Arz (Jakez Riou).....	310
Skrapadeg Avaloù Trecuri (Youenn Drezen).....	316
Milin Korbouneg (Roperzh ar Mason).....	322
Urien ar Reder (Maodez Glanndour).....	325

-o-o-o-
o-o
o

E VEZ Z H I A D E N N O U
=====

D'AL LEVRENN GENTAN :

P. 12 : Barr-Heol (Mezheven 1961, p.28) en deus va lakaet da gompren gwerzenn gentañ ar poz pevare : sinor a zo da intant a zigor. Luziet on bet gant an a lakeat evit z. N'eus nemet al lizherenn-su da gemmañ ('z).

P. 16 : E-lec'h 1749 (1. 18) lann 1745.

P. 17 : E traoñ ar bajenn nemet ur werzenn, lann a voa e-lec'h a veo.

P. 19 : E-lec'h menezioù (1. 3) lann : menozioù.

P. 21 : E-lec'h da vanez (gw.2) lann : da vaner.

P. 69 : Kempouezet fall eo bet ganen taolenn an eil lodenn :

I.- GWENEDIZ : Gwilhom
" " " " Ar Joubiouz

Prosper Proux
Dan Lan

P. 70 : Ur fazi eo bet klask schuif al levzenn gant Malmanche hor skrivagner meur. Evit bezañ sklaer, an daolenn a oa da renkañ evelhen :

IV.- AR E'HOARIVA : Job ar Bayon
" " " " Malmanche

Kallouc'h
Efflam Koet-Skau
F. Al Lee.

P. 151 : Lenn : Sul Fask 1917.

P. 153 : Lenn : n'he c'hazent ket e-lec'h : n'he c'hare (L.i).

-D-D-
D

AN EMSAV YAOUANK

(1918 - 1945)

Brezel 1914-1918 a zo bet an trouc'h gwirion etre daou vare eus an Emsav. Divarc'het eo mui pe vuioe'h ar skrivagnerien n'int ket bet lazhet gant ur brezel, silpennet gentañ an doare kent a oa da gompren emdroad ar bed hag an dud. Bec'h o deus oc'h ac'hwezhañ an tan war oaled an Emsav rannvroel. A-vec'h ma kavent ur regezenn bennak dindan al ludu.

Diouer a zarempredoù a oa etrezo hag ar rummed tud yaouank a zeu war wel. Amjestr eo ar re-mañ ha douget d'ober nebaut a stad eus diaraogerien a anavezont, evit gwir, fellik a-walc'h. Fellout a ra d'ar re yaouank, war un dachenn lezet da gozhañ, d'o mena, sevel traoù nevez flamm. Unan eus an traoù-se a zo ul lennegezh broadel.

Setu ar pal a zo bet hini Gwalarn (1925). Da gentañ ez eo bet stagadenn lennegezh drimiziek ar gelaouenn Breiz Atao (1919). He fennskrivagner Poparz Hamon (ganet e 1900) en deus displeget fraez petra eo al lennegezh evitañ ha strollad ar re a zeu d'e heul.

Barzhoniezh, Troidigezhioù, Pezhioù-c'hoari, Romantoù, Kontadennoù, Labourioù gouiziek e brezhoneg, netra ne seblant dezho dreist diraez. Ma oa skañv o yalc'h, leun e oa o fenn a huñvreoù kear.

Tamm ebet n'oa moarvat al labour embreget dreist o galloud ma vije bet ar brezhoneg war e yec'hed. Klafvoc'h avat e oa eget ne grede dezho. Koll a rae tachenn zoken e-touez an dud vunut. Dizale e vae anat e oa ret ober skol d'an denvez lennerien pe'z eus anezho. Koazhañ a ra buan niver ar vrezhonegerien a-vihanik. Ar vrezhonegerien nevez a zo skignet dre ar vro hag e-maez eus ar vro. N'eus ket anezho kreizennoù. Netra nemet hiniannoù.

Petra eo, avat, ul lennegezh na vez ket lennet ? Pegait e c'hell skrivagnerien skrivañ evita o-unan ?

-D-

AR VUHEZ HAG AL LENNEGEZH
=====

...An darn-vuiañ ac'hanomp, pa lennomp, n'eo ket en em zihuediñ a fell dimp hepken, hogen kalz muioc'h. N'eo ket ankounac'haet ar vuhez. Huñvreal an ur vuhez gwelloc'h, dastum spi ha nerzh da vont gant hon hent eo kentoc'h. Evit gwir el levrioù e klaskomp ar pezh na gavomp ket en hor vuhez : ur vuhez all, heñvel ouzh hor vuhez, ha disheñvel koulskoude, stummet hervez c'hoant hor c'halon. Petra a klaskomp el lennegezh ? Ur stumm d'hon huñvreoù pa n'hellont ket dont da wir.

Un eil vuhez a zo ganti an hevelep prederennoù touellus, an hevelep goulennoù direspont ha gant eben. Evurusoc'h egeti, dre ma c'hall dizarbenn pep prederenn ha pep goulenn, evel ma c'hall kammañ, brasaat ha bihanaat, tostaat ha pellast kement tra. Dizarbenn, hep terriñ, avat, al liammoù etrezi hag ar vuhez; rak neuze ne ve mui netra nemet ur c'hoari goull.

Pep den, o tont war an douar, a gav dirazañ skoulmedalloù ar vuhez. Ha pa n'hall ket o diskoulmañ, e rank o zrouc'hañ pa o lezel en ur bern teñvel war e lerc'h, ha mont war-raok e-kreiz ur milendall neudennoù torret, seul roustloc'h ma vo bet habask ha hir-boanius o klask en o zouez ar sklerienn. Ha kollet eo bet e amzer ? Biken, er bed-mañ, ne dizho ar pal. Kollet eo bet e amzer marteze. Glac'harusañ ha didec'husañ soñj a hall daremprediñ e spered.

Minic'hi an den gwall-nec'het, skuizh o prederiañ dihan, an aner, pa ne dalv ket e brederennoù da galz, renet ma vo gant darvoudoù kreñvoc'h egetañ en diwezh, - minic'hi an den gwall-nec'het eo el lennegezh. Heglav e anken, hag ivez heglav e levenez, heglav e vuhez - un eil vuhez adarre - un eil vuhez o vo enni an anken, diwirion, digemmesk, distaget diouzh ezhommoù ar c'horf, troet e braventez, hag al levenez troet e galloud, ha pep trivliadenn aus an ene. etre anken ha levenez, glanaet, ha goulaouet-hall e c'halloud hag a vraventez.

Perak e klaskfa el lennegezh kentelias, p'he deus trawalc'h d'ober o treuzlec'hif ar vuhez war un dachenn all, e-lec'h ez eo klok ar goulenn heb ar respont, hag ar skouer heb ar gentel ? Perak e ve ret d'ar skrivagner tannañ ur gelenn aus darvoudoù na reont nemet skeudenniñ e ene, ha n'o deus gwirionded ebet nemet en e spered ? Darvoudoù n'int, en diwezh, nemet ur c'hoant hag un huñvre, o tarzhañ e kalon un den, hep pouez na talvoudgezh evit vuhez penderziak ar re all ?

(Roparz Hamon, Gwalarn, niv. 10^a, p.2;
Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, p. 119-122.)

B A R Z H O N I E Z H

An daou bennad da heul (anezho darnoù hepken eus pennadoù kalz hiroc'h) a roio un nebeut diskleriadurioù diwar benn stumm ar gwerzennoù a gaver e brezhoneg.

Savet gant daou varzh o deus prederiet war o donezon ha diskuilhet darn pe zarn eus o frederennoù, e talvezint da virout ouzh nep piv bennak da soñjal diwer skañv ne deo oberoù hor barzhed e-vremañ, na heuilhont ket realennoù boutin ar gwerzaouf gallek klasel, nemet steudadoù faltazius gerioù difluket penn-ouzh-penn diouzh pluenn tud o c'hoari gant geriadur ar brezhoneg.

))))

TEIR AMZERVEZH

AR WERZAOURIEZH VREZHONEK

P'o deus barzhed Vreizh klasket sevel gwerzennoù o deus heuliet, hervez ar mare, meur a c'hiz disheñvel :

1. Er skridoù brezhonek-krenn, da lavarout eo ar re savet betek derou ar 17^{vet} kantved, e kavomp un doare gwerzaouf o tennaf d'an doare gwerzaouf a gavomp ivez er broioù keltiek all (Kembre, Iwerzhon). Disezet e oa war niver ar mouezhiadennoù er werzenn, war ar c'hlotennoù dibenn hag ar c'hlotennoù diabarzh (...).

2. Eus ar 17^{vet} kantved betek bloavezhioù kentañ ar 20^{vet} kantved n'o deus hor barzhed anavezet nemet an doare gwerzaouf a vez graet gantañ e Bro-C'hall. Disezet eo war niver ar mouezhiadennoù er werzenn ha war ar c'hlotennerezh dibenn.

3. En ugent vloaz diwezhañ-mañ o deus klasket muioc'h-mui ar varzhed, o welout ne zerec ket an doare gall da werzaouf ouzh ur yezh evel ar brezhoneg, doareoù nevez da sevel o gwerzennoù. Darn n'o deus heuliet hent strizh ebet, fiziout ma raent hepken war o skouarn evit kavout al lusk dezast; darn all o deus klasket gwellaat an doare gwerzaouf diazezet war ar glotenn-dibenn; darn all c'hoazh o deus diazezet o gwerzennoù war an taol-mouezh, war genheulied ar mouezhiadennoù toniet hag ar re zidon. Kement hini a zo anezho a ziskouez bezañ

bet dedennet gant ar c'hlotennerezh-diabarzh, hep m'en divije hini greset un implij ledan anezhañ (...).

(F. Kervalln, Diazezoù ar sevel-gwerzioù; Gwalarn, niv. 162, p. 115)

GWERZAOUAÑ ... BARZHONIAÑ

(...) Gwerzaouañ ne dec ket barzhoniañ⁽¹⁾, ha koulskoude gwerzaouañ a zo barzhoniañ mar klot al lavar gant ar menoz. N'hell ket an hafv chom hep livioù ar bleuñv nag ar beure hep kan an evned. Ar gwerzaouañ 'vo eta displeg-erezh kened ar soñj gant kened ar gomz, ar gomz o kenseniñ enni hec'h unan hag o kenseniñ gant ar menoz.

Tri hent ez aus evit pellaat diouzh al lavar boutin ha tizhout pal ar c'han, tri hent a vez a-walc'h mont gant unan anezho, daoust ma c'heller ivez o fleustrif e-gevret.

An hent kentañ eo ar c'henventerezh o niver ar mouezhiadennoù⁽²⁾.

An eil, kenventerezh ar pouezmouezhioù.

An tredo, kengloterezh ar sonioù.

.....

Kemari: berzhonegoù Kalloc'h, evel Davit, Spored Santel, ha lennit. Santout a rit nen eo ket komz-plaen, klask o rit ment al lusk-ae, ha ne welit ket mat. Dindan gwagennoùigoù ha bourboulh ar gorre emañ lañs an tonnoù bras, ha n'hellit ket herzel ouzh e sach, dalc'het oc'h gant e narzh ha ret deoc'h sentañ outañ. Pezh a dalvez eo al lusk-ae, ramzel evel hini ar c'heñvor di-rollet, a vrenskelle soñjoù Blaimor. Petra vern mar nen eo ket an houlennoù kenventet rik kenetrezo ? Daoust hag e vefe an tonnoù bepred ken uhel, kel ledan ? Ne vezont ket. Ha koulskoude kenventerezh bras ar mor ez eo.

Peurliesañ e vez diazezet sozerezh ar mouezhiadennoù war ventoù bihanoc'h, adalek div vouezhiadenn betek trizek, pemzek hag all. Emzespont a glasker, kempouez hag heklav (...).

(Maodez Glanndour, Sant Hentoù Mour ar Gwerzaouañ, SAV, niv. 18, 1940).

(1) barzhoniañ : ober barzhoniezh, hag e c'hell barzhoniezh wirion bezañ hep na vefe gwerzennoù (Maodez Glanndour).

(2) mouezhiadenn : silbenn.

UR WREG ER SKEUD

D'an Ao. Perrot

Ur wreg er skeud e traoñ an ti
Mor a anken ouzh He hentañ
Un dar lemm-bev war He jod glas
Rak re-c'harvder a c'houzafvas
En amzer-mañ.

Davet an nefv, Krist ar vogar
'Vit-I a sav E zivrec'h hir...
Ur c'hleze bras, noazh ha pounner
Neoc'h a strink flamder e zir
En amzer-mañ.

Pe ner⁽¹⁾ eta a emgannas
Evit difenn ur Vin ken kaer ?
Ha marv eo neb He c'haras
Pa na zeu mui war-dro he c'haer
En amzer-mañ ?

N'he deus gwelet ar Plac'h hep par
Hinou skinus ar c'hala-mae :
War He zal gwenn a-vec'h e par
Bannoù argant heol ar beure
En amzer-mañ.

Plezet o deus ar mintinioù
Gant sklerder hir He blev melan;
C'hoarzhed an deus pers an abroù
Dre zounder boull He daouc'hourrenn
En amzer-gent.

Skuilhet o deus ar sterennoù
Skleur bev He boug, 'val ur c'hlizenn;
Nijet o deus an avaloù
Gant heson skañv war He c'herc'hen
En amzer-gent.

(1) ner a zo ur ger kembreek kozh o talvezout potrou, "lord" e saozneg. Amprestet eo mearvat diouzh Barzhaz-Breizh (Livadenn..., p.41) gant ar barzh-mañ.

He daoulegad dispont digor
 N'int bet gant den biskoazh saotret;
 He blev dispak da went ar mor
 N'o deus douget ere ebet
 En amzer-gent

Ha ne spinae pok an estren
 He beg ken gwerc'h ha stivell-zour;
 Fezv e voe evit gorzen
 Glannder dinam Hec'h ene flour
 En amzer-gent.

Gwa te, Merc'h kaezh, ar mestr diwir
 A ren warnout a venn mougañ
 An tañzor splann e zo ez mir :
 Ene Kornog, Ene gwellañ
 An Amzer-mañ.

(Gwelarn, niv.1, p.3)

(Sell. Istor..., p.130)

AL LESTR
 =====

I

Dour, dour e-leizh o tremen e varradoù
 Troennoù eon hep ehan o punellat;
 Safar an tarzhioù ledan ouzh ar c'herreg
 A-hed inizi serz an hanternoz;
 Gouelvan un oriaev kollet o tarmijal
 War bradoù gwer ar gwalaz; hag an avel
 O tougen blez an holen war va gweuz;

Froudennoù gouez an noz...

Ha trumm, o regiñ
 Pallenn an hurlink gant ur serac'h eioul,
 Klevet em eus ur c'hwitell dre va hun.

O Lestr gortozet pell, emout o tont
 E goulou gwenn ar beurs, hag ar porzh
 A sav e dal davedout, az anavez,
 Hag a ro dit e c'houder.

II

O levezeh

Un devezh klok e ziskuilh, paotred. 'Vidoc'h
 Bremaik e trid ar stredoù, ar marc'hallac'h,
 Ar stalioù, ar stivelloù hag ar plac'hed.

 O devezh barr !

III

Ha bremañ galv ar c'hloc'h.

Lezit, va c'hamaladed, war an doal,
 Ar werenn c'hleb dazlipet trumm, ha lezit
 C'hoarzh dzent ar merc'hed, hoc'h amheulio, - put,
 Ha c'hwec pedal, - e-hed ar c'haseoù gell.

Ha kerzhit war ho pouez, 'val tud e pourmen,
 Davet ho lestr.

Emañ ar c'hloc'h o c'hervel
A-dreuz d'ar marc'h-lav 'vel ur beurbadelezh,
D'evall, diarvar, splann ha spis, ur poentig
A sioulded leun e-kreiz ur bed o fifval.

Gwernioù a-vern o krenañ war an oabl
Gwenn-holl ha yen.

Dizale ne vo mui
Nemet ar mor evidoc'h hag an tamm-se
A geuz.

A-walc'h evit ho preder daonet.
A-walc'h evit ho hufvre.

Paotred, c'hwi
Hepken, - betek e don ar c'hostoù pounner,
O poaniañ, du ho penn, ho korfoù treut
Brizhellet gant ar c'hwez, an uloc'h lamm
En ho taoulagad sklaer, - a vir d'an den
Un tammig eus al loec'h, an haelded kent,
Bet kollet gant ho predeur war an tir.

IV

Ha te, va Lestr !

Bepred aketus, sentus,
O kas ar gwin, an eoul, an temzoù frondus,
Ar frouezh, ar c'hig, ar riz, ar gwinizh flour
Da walc'hañ korfoù leun, da gargañ yilc'hier
Mistri er bed, n'o deus tamm douj evicout.

O douger glan nac'hañsoù kuzh, netra
Ne c'hello saotrañ biken da diernelezh.
An tonnoù war da vourzh, didruer, a zispenn
Ar farkerj, hag ar fru a sun hep astal
Da gouc'h dislivet, laourek, krignet gant
An huzil hag ar mergl, - ha ma az kev
Kaeroc'h, yaouankoc'h ouzh an heol a bok
D'az jod, e splannded hir an derou-noz.

Ha n'ouzon tamm pe hud a bag va lagad
Duzhit, betek an dremmvel, ha pe euzh
A ra din menel mantret war an sod,
Ha dont en-dro, 'vel unan emzivadet
Diouzh alberz trumm ur gened ker diziruez,

(1934, Gwalarn, niv. 66)

AL LIORZH ESPAR

Dre 'm c'houk ez an alies da gantran
Dre zrein ha drez ha korz ul liorz-hud
Ma vez gant bleuñv ha broñsoù dremmoù-tud
Dremmoù traitour ha garv enebourien.
Ma vez pep skourr kizidik ur gigenn
Hejet 'vel un antell en avel yud;
An delioù, blim ha prim, 'kreiz o aimud,
Gant c'hoarzhoù glas ha ganas a zaskren.
Neuze, brevet em glac'har, klask a ran
An dremmoù laouen, ar c'horfoù heneuz,
Koskoriad skeñv, seder an amzer genz.
Hag, aet da struj divslav, o c'havan,
E-mesk al linad, a-hed hag a-dreuz,
Strewet, gwadek ha gwan, war lez an hent.

(1939)

AR ROZENN DU

En ur saonenn e kresk va rozenn du,
D'indan un oabl tefval ha leizh dalbec'h,
Gant tiez hakr stlabezet traoñ ha krec'h,
Ha muzioù gleb ha ramzel a bep tu.
Eno n'eus c'hoarzh na c'hoari na didu
Tra nemet gloaz, hag anken, hag azrec'h,
Preder ar spered ha striv an divrec'h,
Ha dremmoù tud glas evel al ludu.
Padal, bepred o ren en o metou
Ur goanag kuzh; e don o daoulagad
Un tan iskis a bar, yen ha diaked.
Ur ferdur sioul, ur splenned dic'houlou
A sav, trec'h d'ar galon ha d'he zonkad,
Diouzh ar rozenn, peurbad en he c'hened.

(1939)

Notenn : En div sonedenn a-us en deus ar barzh graet gant klotennoù disbarzh evel
barzhed ar Grenn-Amzer. D'ar skolidi da glask penae eo frammet an daou bezh.

PORZH
=====

A-hed ar stroad a garen, biken mui
An tiez-hont damguzhet gant an delioù,
N'o gwelan, nag ar voger hir o tarc'hel
Birvilh al lireu glas en Ebrel yaouank.

Ne glevan mui o sevel eus ar porzh
Yudoù al listri bres en avel c'hleeb,
A ranne mik va c'halon gant o hireezh,
En nozioù-hont, pa veze skofv an anken.

Ho tasmant, tiez, porzh, ha stroad, ha bleuav,
A zougan kloz em efvor dre ma'z an.
Hogen ho samm zo pounner, hag a bouez
Pounneroc'h war va chouq, a c'hoav da c'hoav.

Kerzu 1956

DABL
=====

Er stroad hefvel bepred, netra ne gemm
Nemet an oabl, an oabl ha na ra van
Nag eus an dud e karc'har o ziez,
Nag eus an dud o tremen stouet o fenn,
Staget ouzh an douar gant o frader.

Kement liv, kement lusk, kement kenad
A zo er bed a skud a stêr an oabl;
Tudigoù, en o mil trevell stroballet,
Ne welont ket.

Hag e kerzhont, hag e kerzhont dindan an tanflam
O tarc'hel pizh
En o dozn serrret
Ur vozad ludu.

9
9 9

AR MARC'HEG BALE-BRO
=====

Va jav ha me o vont a-hed an hent
Hag a-dreuz park pa n'eus mui hent ebet,
A-hed, a-dreuz, ne vurn, ez eomp bepred.
Hor pal bendez zo keit hag en dec'hant.

D'an noz e kouskan, gwec'h en ur c'hastell,
Gwec'h en ur peniti, gwec'h war ar vein.
D'in-me, ne vern evit astenn va c'hein,
Roc'h noazh, plouz gleb, pe vele dimezell.

Traonienn pe run, douar ed pe ouelec'h,
N'o gwelan ken. Din-me int holl hefvel.
Goav pe haav, glav pe heol, kalm pe avel,
N'eus din na warc'hoazh, nag hiziv, na dec'h.

(Liann, 62, p.279,1960)

9
9 9

INTROIBO
=====

(Istor..., p.124)

Henozh emañ pellgent an deiz kentañ eus ar bloaz,
an deiz kentañ eus ar bloaz mat;
ra vire an Aotrou Doue maouez ha gwaz
diouzh anken ha kalonad.

A-hed an amzerioù tremenet pe da dremen,
ha koshoc'h e vezomp goude ur bloavezh all,
p'irc'hirined dizek ha dall,
m'ibien reuzeudik mab-den ?
Nann, ne goshomp ket dre ma'z eomp war an oad.
Eus hon derou henañ da ziwezh hor buhez,
ez eomp war yaouankaat bemnoz ha bemdez,
e yaouankiz hon Tad.

Ganet omp er pellgent,
en draonienn dizudi, tud anni o kunudañ;
hag edo kroget ar riell e skoasell an hent,
da bred hor ginivelezh, hor yaouankiz goshañ.
Hag edo skornet an avel war ar run,
pa ziskennas ar Vuhez da boket dimp,
ha da luskellat hor c'hentañ hun,
e tronienn ar glebor hag ar frim;
hag edo gurudet ar richodenn e gweakedoù ar roz,
hag astennet ar psour divouedet hag eok
war zevenn warn an noz,
en troniennoù deok.

Henozh emañ ar bloaz nevez,
ar bloaz nevez o tigeriñ;
ra vire Doue tud an ti
diouzh neon ha disneñ.

Ganet omp e tronienn an hizezh,
an noz ar bloaz ma kroge ar yonjenn galetañ;
pred hor ginivelezh eo hor c'hozhni goshañ,
hag e c'houzefvomp o c'hortoz yaouankiz an amzer-nevez.

Douget omp bet d'an iliz,
dalc'het ouzh bedez gant Ael ar Blanedenn,
ha fiziolaet⁽¹⁾ gant an Anken,
da zerou hor yaouankiz.
Skullhet eo bet war hon tal dour ar C'hlanidigezh,
siellet hon ene gant ardamez roueel;
gelvet omp bet d'ar velegiezh
en anv an Tad, ar Mab hag ar Spered Santal.
Bugel sioc'han, an da gozhni ganet
Kerzh war-du da yaouankiz tonket.

Henozh emañ pellgent ar c'halanna,
kalanna ar bloaz kristen;
ra blijo gant Doue ha tiboanief
diouzh kalonad hag anken.

Diuzet omp bet e viskoazh da viken.
- Gwa-ni ma vezomp bet dibarzh⁽²⁾ an aner ! -
Kroaz hor Silvidigezh e zo roet dimp da zougen,
hag un oferenn da lavarout, - un oferenn bonnez.

Introibo. Ma e dostaio ouzh Doue, va levenez,
levenez va yaouankiz.
Ha n'eus den en iliz
da respont an oferenn nevez.
Ar gristenien diwezhañ, sevenet oferenn o fallgent,
an eil war-lerc'h egile, e zo aet gant o hent.
Hag an iliz e zo chomet goull, goull,
evel skiant ur c'hiafavour o tremen an alfo.

Ni a yelo devet Doue
andon ar yaouankiz wirion;
Dazhañ e taskorimp hor c'horf hag hon ene,
da vare an hinon.

Introibo. Ret eo lidañ hon oferenn douzrel
dinden deare an estrenven,
hep sker na skozzell,
hon-unan, hon-unan.
Hag e renk pep oferunner kenderc'hel gant e oferenn,
direspont e bedennoù,

(1) fiziolaet : kavout e reer fizvol "filhor" e Cathol. hervez Gloss. Ernault, 238.
Ne graden ket avat eo bet J. Riou ouzh e glask ano. Sant a dia dezhañ eus brezhoneg
e gavel.

(2) dibarzh : diuzet, dibebet.

kerzhout en amzivin, dalc'het war e gomzoù,
 aon gantañ lavarout un ofereñn wenn;
 dre groez-hentoù dic'houlou morzañ hep astal,
 renet gant an Tonkadur,
 anken evit hor mezur,
 a-hed hon hent, war-du ar pal.
 Ha bemdez e tostaomp, ha diri ha diri
 e pignomp d'an aoter savet e diwezh hon hentad,
 pirc'hirined sammet gant doan hag ambloari,
 divi kent hor c'himiad.
 Hag e sevenomp arnodenn an douar,
 pirc'hirined dizek,
 divi hag ampalvar,
 hon nerzh gourel set da heak;
 hag e pignomp divi ha blin,
 atrebot e kement lindog
 pistig e kement tag,
 ha gloaz e kement atahin.

Bemdez avat, ha bemnoz e vezo distrujet
 hor c'hozhni douarel hag al levezonoù anez,
 hor yaouankiz hepken a vezo aotreet
 da dostaat ouzh an aoter.
 Bemdez e pellaomp diouzh traonienn ar gortoz,
 war-du annez an hoal-vat;
 ha bemdez ha bemnoz
 ez a hor yaouankiz war yaouankaat.

E-doug ma savont eus traonienn ar pened
 e pign da Zoue kan ar birc'hirined :

Gwelout a reomp o tigeriañ
 an deiz kentañ eus ar bloaz;
 ne vezo mi na doan hag anoaz,
 nemet levezon en hon ti.

Pa vezimp degouezhet, simidi douel
 war run an heol,
 e vezo enaquet e pep tu d'hon aoter, evit hor gouel,
 ar steredegoù holl.

Enaquet e vezo ar steredegoù
 en iliz divolz ha dic'hourin,
 ha Mab Doue E-unan a responto d'ez gorreoù,
 hon ofereñn anterin.

Tad,
 setu ho kig, setu ho kwad.

Hag endra ma vezimp degemeret e-metou ar C'hoegor,
 eus run an heol e savo ar bangor :

Hiziv emañ an deiz kentañ eus er bloaz mat,
 derou hor yaouankiz divarvel.
 Ne vezo nag anken na kalonad
 en Tad, er Mab, hag er Spered Santel.

(Gwalarn, niv. 16, 1928)

SERR - NOZ
 =====

Azezet e oa war lez an aven,
 O c'hortoz an hini a gare.
 Uhel e oa an heol pa zegouezhas er glen.
 En-dro dezhañ e noze.

En halegoù e bleufv ar vilzig a oa tavet;
 War c'horre ar c'higid gwenn an nadoz-ear a vorade,
 hag eñ e c'hortoze
 er plac'h na zeus ket.

E bevann ar c'hoznog a teskere ruzoni,
 Skeud ar c'higid gwenn a varve e-barzh an dour,
 Lano blot ar vorenn a bigne lizidour.
 Hag eñ a welas e oa o noziñ.

Sevel a reas goustad,
 Kemercout a reas en-dro gwanodenn an dozenn,
 Hag an heol o vezvel a skuilhas an aven
 Ur veradann wad.

(Gwalarn, 1931, niv.29)

AR FEUNTEUN ZOUN

(Istor..., p.167)

E-kreiz ul lann ec'hon, didud,
 Me anav ur feunteunig wenn.
 Ur feunteunig a garantez,
 E-kreiz ul lanneg a dristidigezh
 Ur feunteunig wenn
 E-kreiz ul lann du.

Tro-war-dro ur Morad ludu,
 D'he c'helc'hiañ evel un enez.
 Warni un osbl koumoulennek
 Hag e pep lec'h poan ha glac'har.
 Enni dour sklaer, dour fresk enni,
 Enni dudi.

Enni dudi, Enni hepken
 Dudi ne diavaez an dudi,
 E ziavaez kentoc'h, o siwazh,
 Rak netra ne vev war he zro.
 An douar tefval a chom difrouezh.
 Nep bleunienn ne vleuf he bardell,
 Geot ne gresk, naq evn ne gan,
 War dro feunteunig an didrouz,
 Ar marv eo.

Feunteun graet 'vit bezañ karet,
 Feunteun gaezh, re zoun eo da zour
 Ha re c'hlan ha re sklaer.
 Ar glav ne gouezh betek ennout,
 Ar skorn ne galed da c'horze,
 An avel ne luskeñ da gousk,
 An heol ne domp da zigenvez...
 Re bell da zour.

Genou ebet n'ev ac'hanout,
 Nep skouarn ne glev trouz da vammenn,
 'Vel 'klever lammat ur galon.
 Ennout, 'vel ur melezeur down,
 Nep daoulaged ne sell, krenus,
 Un dremm yaouank stouet warnout
 Un dremm dudius, un dremm karet,
 Keer da gazout.

Te 'zo ur feunteunig gollat
 E-kreiz ul lann trist ha didud,
 Ur feunteunig a garantez,
 Kalc'hiet gant ur mor divuhez,
 Ur feunteunig wenn
 E-kreiz ar bed du.

o o o o

AR C'HAN WAR AR MENEZ

Pignet on war gain ar menez,
 A-barzh heolig gwenn tarzh an deiz,
 An noz 'c'hronne an douaroù nes
 P'oañ er-maez.

'Felle din diouzh ar bed diaes
 Pellaat. O ve hufvire gaezh !
 Hag evañ ouzh mammenn an deiz
 Ar wir vuhez.

Ur mare hir an eus kerzhet
 Hep tizhout ar gribell gallet,
 Gent samm tomder an neñv flastret,
 Digalonet.

Ur mare hir a-hed va red,
 Mantret va c'horf ha va spared,
 Chadenn re griz ar poanioù ret
 An eus stlejet.

Ha bet on, me, evel ul loen,
 War e zoulagad ul laonenn,
 Dall, mevel dall a ye er boan
 Ne oar amen.

P'en diwazh, skuizhet o pignat
 Evit klask an heol gouez a dazzh,
 Harluet em eus doen va zal...
 A zic'hoanag !

Sant ar c'hornog ar goulou gwan,
 A sanke 'barzh ur mor e gafv,
 Hag an noz 'c'hzonne hec'h-unan
 Va hufvze wan.

.....

Me 'zo pignet war ar menez,
 Menez ar bed. O hufvze gaezh !
 En aner 'm eus klasket an deiz
 Hag ar vuhez.

(Kanob en Noz, Gwalarn, niv.39-40,1932)

AR GLAV

(Istor..., p.159)

Kouezhañ, kouezhañ 'ra, kouezhañ 'ra ar glav,
 Kollet em eus va disglavier,
 He va botoù ruz 'zo torret.
 O, ne c'hallin ket mont er-maez !

Kouezhañ, kouezhañ 'ra, kouezhañ 'ra ar glav.
 Hag e chomin e-barzh an ti,
 Da blegeñ ha da ziblegañ
 Tammoù paper.

Kouezhañ, kouezhañ 'ra, kouezhañ 'ra ar glav.
 Harzhet 'n deus ar c'hi.
 Trist eo ar c'hi,
 Me ivez.

Kouezhañ, kouezhañ 'ra, kouezhañ 'ra ar glav.
 Kousket eo va marc'hodenn,
 Kousket mat betek warc'hoazh.

Kouezhañ, kouezhañ 'ra, kouezhañ 'ra ar glav.
 A-hed an deiz, e-hed an noz,
 Kouezhañ, kouezhañ 'ra, kouezhañ 'ra ar glav,
 Kouezhañ 'ra ar glav.

AN DELIENN VARV

Delienn varv, delienn varv,
 N'hoc'h eus ket riv war ar skorn ?

Tomm eo va dozn.
 Me ho kumero,
 Dalienn varv.

Fa ve deust en-dro
 An novez-omzer,
 Me ho lakaio
 Da nijal an aer.

Hag ec'han di,
Tomm eo an ti
'Vidoc'h, delienn varv.

TI AR VALAFENN

Emañ ti ar valafenn
E skeud ur c'hectenn.
Gant un doann c'hlas,
Hag ur voger c'hlas.

Hep teurel evezh
Ouzh al loer e sell,
Ar valafenn ruz
A gousk,
Hep digerif
Ar prenestr.

Ouzh ar prenestr kloz
'Sell al loer.
Krenañ 'ra
Ar voger c'hlas.
Ar valafenn ruz,
Dihunet,
Aonet,
A zigor e vil laged.

N'eo netra.
Kammed skofv an aval noz,
Marteze

Hag adarre
Ar valafenn e gousk
Hep digerif
Ar prenestr.

o o o

DAULAGAD VA MAMM

Pa sellan a-wechoù ouzh daoulagad va mamm,
Ul lenn voull eo a welan.

War he zro, gwez pin e bign war-du an oabl,
E-kreiz an dourioù sklaer,
Un enezenn defval e zo.

Ma c'hallfen, gent ur vag,
Mont d'an enezenn !

E sol an dourioù sicul,
Pe besk iskis a ya da neuñ ?
War lein ar gwez en-dro d'al lenn,
Pe labous marzhus
A ya da ganañ ?

Diouzhtu pa sellan ouzh he daoulagad,
Ma 'wel ul lenn;
Ul lenn voull...

D'AN HINI KARETAN

III

Lorc'hus on, didruez ha... me 'oar !
N'em eus 'met un dra,
Un dra kuzh ha kufv,
Evel ul locuennan klouar
Ennon,
Evel ur c'honiflig gwenn
E-kreiz ar c'holo.
Va c'harantez eo,

Pe labouran e chom ganin,
Pe gousken e hufvze ganin,
Va c'harantez,
Dianev d'ar re all,
Va c'harantez karet.

(Kanoù en Deiz; Gwalarn, n.53, 1933)

KAN KREISTEIZ

(Istor..., p.175)

Tud a zo ha n'ouzont 'met goulenn dizehan,
Ha re all o klemmichet bepred dindan o foan,
Ha c'hoazh tud 'ra o micher hep rannañ grik,
Kristenion vat ez int, moarvat, kristenion rik,
Met ober evelto n'houlan ket koulskoude.

Rak ar bed a zo kan,
Galloud ha tenerded e vouezh.
Ken eo an oabl, ken eo ar mor,
Ken eo ar glav, ken ar sec'hor.
Ha me a chomfe dilavar ?

Da genañ 'rin, Doue karet.
Met penaos ? va mouezh a zo raouliet.
N'ouzon ken ha n'ouezin biken.
En aner e verv va spared mibin,
Ar yezh a garan ne sent ket ouzhin.

Petra vern ! Ne blij ket dit an trouz,
Nemet ar stivell a richan ennon,
Trid ar garantez, esmaoù ha don,
Foan ha levezon va c'halon, bendez,
Honnezh, ar sonenn a garez.

Taolioù kreisteiz a bacuez a senif.
Digerif 'ran va genou d'ez meulif,
Met son ebet ne sav strezek an oabl.
Trompilhoù ar beure e zo tavet da vat.
Ne glevan ken an dubeed o c'hrougousat,
Ne welan ken ar wannili o troiellat.
Daoust hag e vefen o vonet da vervel ?

Da vuhez eo hag en em skuilh em ene gwan,
Ha skefiv ha gwevn evel ur frond
Nerzhus ha taer 'vel ul larv.
Ken taer ha ken dous war un dro
Ma teuzan a-bazh gant da wrez lirzhin
Evel glizh ar beure glizin.



Ronan KERMEZ .

F. VALLEE e 1946.
Jakez-Yann KERRIEN.

Loeiz HERRIEU .

O va Doue, Te eo,
 Hag ouzhit e stagez ac'hanon
 Gant achanterezh ar galon.
 A, penaos komz, penaos kanañ gant va diweuz,
 P'emañ em c'hreiz ar sonerezh ?

(Studi haq Ober, niv.21, 1943)

FROUESHA

Deus, va Soazig vihan : da flamboesa ez eomp.
 Tomm-grizias e vo hep dale; na lazomp kat da sec'haft
 ar boullouigoù bresk,
 Saourek ha kufiv-voulouz, goloet gant an delioù avel
 bragerizoù ruz.
 Dinijal a ra mouilc'hi ha golveni. Ne chom nemet ar
 gwenan.
 Ne chom nemet da zornig o kutuilh, da fri e-sav o
 fronellañ c'hwezh ar frouezh.
 Diaes e vo leuniañ ar baner, p'emañ em c'hichen ar
 genaouig-se digor.
 N'eus forzh. Livet eo da ziweuz gant ar sav limestra.
 Holl levenez ar bed a sked ez taoulagad.

Deus, va Soazig vihan : da galvesa ez eomp.
 Re verr, re verr da zivrec'h; me a blago ar bledhoù.
 Tec'hout a ra ur gwirver o skopeñ dimp kunujannoù.
 Nec'het un tamm e sellez ouzh ar c'hlorennoù goull,
 strewet war an douar gant al laerig koant.
 Strakal a ra ar graofenn etra da zent ha, dinden
 ar gwisket kalet, setu ar c'hig gwenn.
 Dinden an dremm diseblant, klaek an ene kizidik
 Kompren a rez, va Soazig ?

Deus, va Soazig vihan : da gistina ez eomp.
 C'hwezhet he deus un avel but; diskaret eo bet
 ganti kistin ha delioù.

- Petra e c'hoarvez ganit, va flac'hig karet ?
 Gwed war da vizied, daeroù war da zivjod !
 Ret e oa dit diwall ouzh ar c'hloc broudus -
 Gant beg da votez, lake ar gistinenn da lammat
 er-maez. Sell ! an hini vrav, lufr hag alaouret !
 Pegen mat e vo diouzh an noz, poazhet el ludu tomm !

Evelse e kavi ar vuhez; drein tro-war-dro d'ur
 berlezenn !
 Petra 'vern da galon wadet, ma strinkfe diouti
 - ha da viken - al Levenez !

(Gwalarn, niv. 154-155, 1942)

GOULEIER - KÉR
 =====

(Istor..., p.161)

A-hed an noz klouar
 'm eus gortozet hir amzer
 ha klevet va c'halon o vorzholiañ em bruched,
 garv.

Dreist an draonienn 'm eus gwelst
 o skedif, e kelc'hioù latar,
 gouleier ar gêr vras;
 ouzh sioulded an noz e tiwallent an dud,
 hag ar vuhez a verve en o sked,
 'vel ma verve va spered.

Ne gleven o reuz
 nemet em c'halon,
 a-dreuz al latar,
 tanav.

Hogen annon a teve,
 en-dro din e tros
 ar buhezioù didrouz.
 Ha me 'oa va-unan war al lanneg,
 va-unan 'hed an noz o c'hartoz
 ur ger.

(Gwalarn, niv. 66, 1934)

DICHAL
 =====

- Gwelout a rit ar vagig wenn
 A vorads e kozn al lenn,
 A-dreñv ar c'horz, e-mesk ar broenn,
 Nerzhus ha flamm evel ul loen.

Ar peotrig koant en deus kavet ar vag,
 Stignet ar gouelioù ha brevet ar stag,
 Sellit outañ o vleniañ 'tal ar stur,
 O tridal gant al lorc'h, seder ha fur.

- Emañ o vont dre 'n avel hag al larv
Evel un den kollet gantaf e anv.
Parak 'ta bezañ dilezet ar porzh,
Ar goudor sioul, an elestr hag ar c'horz ?

War gein an tonn e vag a vrall,
En amzer vat, en amzer fall
'mañ-heñ o vont da redek bro
A-dreuz ar bed, ha tro-ha-tro ?

- Emañ o vont da veg ar Raz
Da glesk e doun he falez glas
Morgan a gan gant trouz ar mor
Pa roc'h an avel 'tai ho tor.

Morgan a zeu d'an sodoù pell
P'eo diskennet an noziou gell,
Evit klevout trouziou ar maez
D'astenn he c'horz a-dreuz an traezh.

Pa ziskenno an heol da serr an noz
Klevit a-hed an eod ar c'hlemmen kozh,
Oc'h astenn war ar bili hag an traezh
Ar mor a groz e skleur an ebardeaz.

- Un deiz marteze 'vo doaniet hor spered
Pa 'z simp hor pevez da zougen d'er vered
Ar paotr a gare Morgan ar mor bres
Hag aot d'he c'hilask da gichen Beg ar Raz.

(Gwalarn, niv. 74, 1935)

MA 'Z AFEMP NI...

Ma 'z afemp-ni un deiz, 'n ur c'hoari mil-he-kazh
Da reif un abeg reizh da wask ar goanag dell
A vag evit ur pal hor bezañ gwel-ha-gwazh,
Ar vuhez ha ne del nemet e meiz un all;

Ma 'z afemp ni hon-dacu, 'n ur selacu ouzh an dud,
Da santualoù 'r geou da welc'hiñ merk hol le,
Ha mont 'vel ar re all da glufañ en hor c'hilud
Keit ha m'amañ ar Gell o waskañ war hor re;

E teufemp a-dra-sur da c'hounit stad hor brud,
E vefemp anvet fur war rolloù mestr ar vro,
E klevfemp war hon tro o nijal bommoù-hud.

A geneil, petra c'hoazh ? - Ne ran forzh petra vo
Pa savo heol warc'hoazh e tor ur beure put :
Da veure un deiz yud eo 'z ay an toez a go.

(Ibid.)

ENEZ AR C'HEVRIN

(Istor..., p.153)

Al faezh e oan an deiz-se, skuizh-divi, pa 'n em gavis gant ribl ar mor, en deiz-se.

Ore bedoù ha bedoù em boa kantraset o klask peadra d'am c'halon. Met re vras e oa-hi, trs n'he leunia.

Ha faezh e oan pa 'n em gavis gant ribl ar mor en deiz-se.

An houl a laoske war an traezh sonenn an hireazh. War an eodoù didermen, an donn a gane. C'hoant an diaman em gwaske.

Va c'halon a c'harne a-dal d'an ec'hon. Ul labous-mor er peludoù, o yudal, a varve.

Hag an houl o riklañ war an traezh e laoske sonenn an hireazh.

Ha blaz ar gwed oa gent an aer : ruz-gwad an oabl, ruz-gwad ar mor.

Evel ma vije bet rannet kalon ar bed gant un doan dreistvuzul.

Petra 'zeu war lein ar mor ? ur vag o tastaat gent tizh, ur vag hep gouel, ur vag hep roefv, o riklañ didrouz war en dour.
Ur vag, 'giz ul laouer, pe 'giz ul laour ?
O va c'halon nec'het, petra 'zeu ?

Ur vag en strink, o tanflammañ er ruzell-noz,
Enni un den gwenn-kann ouzh ar stur,
Ur vag en strink, o tanflammañ er ruzell-noz !

Met an den o kas e vag betek an traezh a ziskennas ez skafv da vonet davedon.

"A plac'h, emezeñ din, o perak da viken sunañ blaz an anken, deus genin ! Ar garantez e glassez 'aneven an enez anezhi".

Treid en den ouzh an traezh a oa flour 'vel en dour.

Ha me mont, rak c'hoant ur garantez divent em bourrevie.

Pignal a ris er vag, an em astenn a ris enni evel ma vije bet unan marv en e arched, unan marv e soñjoù kent.

Ha me mont kuit.

Va blenier, 'n e sas wenn, a savas e penn ar vag. A zigoras divaskell bras, ouzh o flapañ en aer, hag a c'haras war-du ar c'heirvor.

Un ael e oa, un ael gwenn-kann e penn ar vag.

Pegait e padas an traezh ? n'ouzon ha n'eus forzh...
Un all e oan pe'n em gavis er porzh, en anez ar garantez divent.

Pegait e padas an traezh ? n'ouzon ha n'eus forzh, edon er porzh.

Hag e tiskennis gent mall. Al levenez em c'halon em douge.

War be du mont ? Hon gouzout a rasn
E vouezh em galve.

Ti va C'hariad en kuzh ar gwez, war ar menez, ul lochenn baour.

O va c'halon ! Rous ar bed amañ a chom.

War ar menez, ti va C'hariad en kuzh ar gwez.

Hag e skoas ouzh an noz. Va c'halon em c'hreiz a dalma.

Hag e klevis e vouezh e c'houlenn ouzhin ken doue : "Piv a sko ?"

Ma respontis : "Ne eo". Va c'halon ennon a dride.

Met ar vouez ne respontes ket. An noz ne zigoras ket. Hag a chomis mantret o lenveñ puchet e-kichen an ti. Va c'halon ennon e oa skuizh-divi.

A-hed an noz ne ris nemet lonkañ soñjoù,
lonkañ soñjoù.

Betek ma tisammia 'n un taol-pened, bec'h
va fec'hed.

War an dremmwel an cabl a velene; an evned
gardis a richane.

Sevel a ris evit diskenn davet ar stêr. Hag e soubis
en dour d'en em burañ en e freskter, en dour lirzhin ar
mintin.

Pe zeuis er-meez, ur yasouankiz nevez am zreante. Un
nerzh laouen ennon 'n em zispake.

O! 'n em soubañ e freskter ur stêr !

Va blev e gompennis gant bleunioù rouanez. Frondoù
ar glizh am basalme.

Hag ez is da adakeiñ ouzh dor ti va C'hariad.
Frondoù ar glizh am basalme.

"Piv a sko ?"

O va sotonî dec'h, â kozh lorc'h, skarzhat out !

"Piv a sko ?" - "Je eo !"

Ha digeriñ a reas an nor...

O va c'hariad, en divrec'h da c'hras, pell diouzh an
trouz, echu ar reuz ! Pa boked ouzhin en frond da ziweuz,
o levenez vras enez ar c'hevriñ !

(Studi hag Ober, niv.19, 1942)

PESKIG AR MOR
=====

Lavagnon 'z eus hiziv;
Fagen brav 'vo din-me
Mont da heul an houl bras.

Ha bezañ brañsallet
Me peskig an dour glas
Em hufvre alaouret.

Pa vin skuizhet gantañ
E tiskennin endro
Da dreoniannoù ar stred,

Hag ez in da c'hoari
En koad ar bezhinoù
Krapet er garregenn.

Pe da furchal en troezh
Evit kregin-perlez
A sked 'vel opalenn,

Redek a vandannoù
War striv hon angelloù
Gwenodannoù ar mor,

Hag ober pennlammoù,
Da lakaat skentenoù
Hor sae da lugeriñ,

O c'hortoz an nozioù
Ma treluc'h ar gorre
Gant mordan arc'hantek...

Lavagnon 'z eus hiziv
Hag e vin brañsallet
Em hufvre alaouret.

o o o o
o

AR VOC'HIG RUZ

Ar voc'hig-ruz a vesk he geiz
 Gant frondoù blin ar bleunioù gwenn,
 Ar bleunioù gwenn war bzankoù du
 Ur speznenn irin.

Er faunteun skeltri eo boull an dour.
 Evel biskoazh eo boull an dour
 War an diribin.

Evel ur bugel 'lamm ar wazh,
 Ha kan an evn a ruilh a-builh
 Gant ur joa pitilh.

SKEUDENN WAR DEC'H

Edon o vals war an hent
 Pa dremenas e-biou din o redek
 Ur plac'hig vihan.
 Ken souszhus en he dremm
 He droclegad alamandez-heñvel.
 He mibin e pignas gent ar c'hrav
 Me klevon o pellet strop-distrap he botoù.
 Ha gent un ! j e goulzadù
 E tistole war he choug
 He blevad hîr ha gwagennek,
 An ebeulez.

(Konzoù Bay, p.27; 34; 38)

AR PAOTR MUZIK

Mont a raen betek ti ar c'hereer
 Da welout va botoù ha dreset e nant bet,
 Pa welis e korn ar ru, ur c'helic'hiad tud bodet,
 Hag en o c'hrreiz, o tifretañ gweshañ me c'helle,
 Un den. Piv ? Ar Paotr Muzik !
 War e benn, a-ispilh, ur gurunenn kleiarigoù,
 Ha war e choug a bep doare taboulinoù,
 Me skoe taer outo en ur mentorez rik
 Dre fifval e droid a frapadoù.
 Duzh e divhar, ouzh e chupenn, grizilhonoù.
 Ha ne oa ket e zivrec'h mofs :
 Eno un akordac'he
 A sone splann un dafeadenn
 A laka ar paotr da nijal drev-aklinterin
 Ha d'en em zifretañ gent ur mil titirin...
 Evit bam an holl sellerion.

Hinienoù avat 'c'hoerzhe outañ:
 Pebez istrogell eo hemañ !
 Met ef a zalc'he da c'hoazi
 Evit plijadur ha dudi
 An holl dud a galon.
 Ha me de vont em soñjezon...
 Perak sellocu ar goapaerzh ?
 Em diabarzh bezañ ivez
 Ur Paotr Muzik
 Taer ha sardik,
 Pep tre ennon kan ha richan,
 Son ha dason.
 Bezañ lirezhin 'vel ur mintin !
 A va ens, labous-sedar ha gobelin,
 Petra 'dalv un evnig ps ne gan ?

o o o o
 o

AR PAOTR MUZIKOC'H OBER TRO AR BED

Diskenn er porzh, pignat er vag,
 Ar Paotr-Muzik war vourzh e lestr !
 E-unan-penn, nemet e gi,
 Ur c'hi bihan, rouz gwenn ha du.
 Sevel ar ouel, ha kee, va bag !
 Luskell war rack !
 Gale, gobar ?
 O nann, ne oa ket ur valum,
 Nag ur moroc'h, nag ur morvleiz :
 Un inged marteze, ur morskoul
 Gant ar Paotr Muzik war e gein
 Hag ar c'hi bihan fistoulrik
 A ouie ober chiboudik.

Greet o deus tro ar bed,
 Ha gwelet ar mor glas, ar mor ruz,
 Ar mor gwenn, ar mor du.
 Hag a kreiz en dour bras, war sav,
 War vourzh e lestr, ar Paotr Muzik
 A sone 'vit ar bed, 'vit ar mor,
 'Vit an evned, 'vit ar pesked,
 'Vit an avel o dremene,
 Evit ar Vubez o gane,
 Hag ar c'hi bihan fistoulrik
 A rae war ar pont chiboudik.

(Va lavrin skeudennou, Liann, niv. 49, 1^o)

AMZER FALL

(Ister..., p.121)

I

Germet o deus ar gwelini e laez an aberioù.
 Selaou ar gwelini, a ene va ene !
 Kornel a ra, dre ar mulgul, ar wagenn hir,
 O widilat hag o torimellet a-hed an tornaod sonn,
 Hag o tarzhañ gant berz ha spum ha fru, ken trumm !
 Na kee eo din henozh, a va ene !
 Atlantel rust, garv da lorc'h, tarz, ya ! ya !
 He youc'h ! ha torr !
 P'emañ erzu miz Du e-tel va dor.
 Atlantel, Atlantel, taeraz Arc'haei, ken gwevn ha kenadus,
 Diroll da cholori ! Safar ! ha boud dirak ar pennoù-tir !
 Gra frailh ha drailh, er-maez,
 Betek Eusa ! a ! a ! en-dro d'an inizi !
 Da houl a c'hwez e c'hourdrouz betek va run rouz.
 C'hwezhet !
 Ma 'zo tomm din em zi, 'kichen an tan.
 Ha flip dezhi !...

II

Selaou er glav, a va ene, hag an avel !
 Bagol avel mervent ! Hennezh ne harzer ket outañ !
 Gouez e c'hourig !
 Ken na hop ar Fromveur
 Ken gouez ma skrij ar morskoul en e gev,
 Ma tec'h ar morhouc'h hag ar baluga...
 - Na geront ket, a va ene,
 Pokoù skourjez ar Bugul-Aercouant,
 Ar Mervent drant ! -

...Ma fiv goustad e strad ar mor
 Damzivorfilet e traoñ o c'herreg,
 Hag o krozal 'giz kozhidi gabac'h,
 Ar bagoù kollet.

W N'eo ket henozh, anet, ez in war an erin
 Da spurmantif ouzh ar brifeaz ha blev bezhin ! -

Dilammet eo ar glav hag an avel
A vervent gleb, puñs an Ifern,
Dreist kerrag Toull-Inged, e Kameled.

Evelato, a va ene, arabat dit skrijañ.
Strilhet eo ar gwez pin, ken blin ahont
War gribenn Roskañvel.

Ken na dorront,
Evelato, a va ene, arabat dit skrijañ.

Kanañ 'ra gent e lorc'h, mab ar c'houmoul, ar glav a-bil.
Hennezh ivez, ne harzer ket outañ.
Ma tic'hlañ d'o zro ar paludoù krin, al loc'h hag ar c'haun.
Evelato, a va ene, arabat dit skrijañ.
Ha klevout a rez klemm hir an ingidi ?
Selacu hirvoud ar poc'hanig, kri ar moullag, galv ar galdou...
Etre kounnar an Atlantel,
Hep diogel,
Ha kevrin an Douar-Bras dienev,
Diglud ha diarsav,
O va ene,
Garmif a reont gent an anken,
An evned-ernev,
Rak pa ziroll an Atlantel,
Da gehedel,¹⁾
Pa c'hlañ an avel,
Ha pa zilanm kourmoul mervent,
Aner herzel !

... Ac'han da bell na vo gwalet
Nag heol an deiz hag ar stered an noz.
C'hwezhañ a ray avel mervent,
Hep repoz;
E vimp d'inden beli ar glav, daou ugent deiz, daou-ugent noz,
Hep repoz.
Ha daou-ugent all goude-se,
Mertaze.
Evelato, a va ene, arabat dit skrijañ.

III

...Tomhealigoù 'vo c'hoazh war an diribinoù,
Pa suto ar vilfid ar c'hili glas, pa hinone...

(Gwalarn, niv. 66, 193)

1) kehedel. Guehidell "équinaxe" (Gloss. 527). Kadsz e lec'h all, e Leon da skour.

NOZVEZH ARKUZ
=====

E BEG AN ENEZENN
=====

I

'Us da goadoù izel inizi an aber,
E tieliv goustadik brud milzin ar c'huzh-heol.

Va neizhi glas marc'hourizet, e diogell ho lenn
A listri va huñvre, va baradoz, va inizi,
Douar klouer va bro,
Salud ! Deut on en-dro !

Gwelit ! chomet on sonn; met plegoù va diweuz
A zo warno arouez ugent vloaz reuz ha keuz.

Baa-hud hebaskaus, salud ! A te, chomet heñvel,
Gant da flamm o teuzif war a bouez en dremmel !

Douader abardeazioù va Breizh-Izel,
Va zal chouret-flour gant ur vorazenn,
Da dafva 'ran hiziv en-dro e beg va Enezenn,
Faezh, avst, va ene diwar-gerse ha didouell,
Ha va daouarn goullio.

A ! evel gwechall, an houl lizidour a darlip an traezh;
Henozh, evel kent, sioulik, ar gwez-pin a vout 'us d'an drez.

Morgefalaged, melkoni anno,
A gren o hirvoud 'tal snez Haro.

Henozh, evel dec'h, dard mouget-pria lagad an tour-tan
A lu'r an houlenn gant o luc'hed kran.

En eabl du-pelos, a-zioc'h Tudi warn
E c'hourlamm bremañ ar wrelacoun.
A greiz ma krog gent o sterennadeg
Kastell ar seizh efen-aret,
Ha seizenn drovedel Sant-Jalm,
Dinden sell glas ar C'hi.

Ha, dreist an arvor, henozh evel dec'h, e pign, kent izel,
Coude, ledanoc'h, mouezh an Atlantel.

Selaou !... Kufvat luskellerézh da hun ar bas !
He meiz !... Touellerezh peurbadel d'hon huftre !

Evel gwechall, mag da c'hoanag, a va-ens !
Ha klev heglev da gan, a !... da neuze, ken digerse...

Beg an Enezenn, aod bili bourrus,
Da zarempredet 'm sus, pa oan eürus,
War un dro gant brini ha gouelini.

A eorc'henoù brav e flistre neuze
E spered ur paotr war voulc'h e vuhe
Bliv e lagad, dilui e izili !

A eorc'henoù droch, anzavet biken,
A waek va bruski, kement oant laouen,
Ha skedus o fazi !

Yac'h e oan, ha diwidre...
Leun a gred, penaos
N'em dije bourret huftreal en noz ?

Douster adkavet, douster nozioù Breizh,
Frealz ha balzam, pa drid c'hoazh em c'hreiz
Lorc'h va yaouankiz !

Va yaouankiz-me, e-giz roc'h an eod, e-giz an derv,
Kredif 'ris edo gwiziet em erv.
N'anavezen ket al langis.

N'anavezen ket an hir amzer du,
Na zoken er gomz diwar re drank : harlu,
Na klefved ne kaffv kriz.

N'oa ket re wall-geneil an dienez
Hag e oan gredus, hag e oan diboell,
Hag e selaouen da gan, levenez,
Hep merzout na dillo e tremenez,
Dindan skourjez an Tonkadur hag e gentel.

A Vro ! Gallout kredif !... Henozh, evel gwechall,
Gallout kredif en-dro out ober ur Mestr Mat,
Eus stered an oabl betek al linad.

Levr ar re zister, o c'halon dinamm,
Gallout de lenn, evel pa oan yaouankik-flamm,
A Grouadelezh, gant ur feiz divrall !

Gallout kredif eo sperius ar glac'har, ha dereat
Bezañ didrelatet, - pa bad re hir hor joe-bevañ, -
Gant darvoudig an dremenven.

Ker gwir, a va ens, ma strink an deiz war-lerc'h an noz,
Ker gwir ma skin, du-me uhel, stered ar baradoz,
Keid-all, du-se, diouzh hireezh hor c'horfoù diaskell,
Bev, avat, peurvev d'hor sell;

Gallout kredif n'eo ket mut da viken tefvalijenn ar bez,
Hag e kavimp hor c'haridi en hinon sklær un advuhez,
Tec'het diouzhimp pep estrenven !...

Evel ar gwez, evel ar vein, evel ar c'hoabr,
Evel anal heson ar voravel, ledet-ledan,
Gallout da lenn zoken, diefvor, divennoz .

Ouzh boud an haul, evel ar brug hag ar buzhug
Gallout hunif, divelkoni... Hunif, en noz,
Ken na c'hoarzo en-dro yaouankiz ar mintin.

Hunif ! Bezañ lodet gant diogel an traoù dilorc'h,
E-giz liorz an avaloù stouet war an tommheolig gleb;
E-giz iliv ha kirvi ar voger, ha lugustr ar warn,
Hag ar mouar du war strouzheg ar c'hleuz,
Ha treujoù al lann, hag irin ar spenn,
Hag ar brulu ruz, e bod an targos derv.

Hunif 'vel ar gweklev war veler e boullig,
'Giz ar grill du en e doullig.
'Giz an duriadenn-c'hoz, ha krugell ar marien
War ar waremm...

Hunif e giz ar c'houmoul sioul,

Ha grouan an aod, ar broenn, ha meilhed an ouf,
E-giz bezhin ar c'hleazideg, e-tal an inizi,
E-giz irinjez an erin.
Ouzh boud an dour, ouzh boud ar pin, an aezenn sin...
Fennañ va ene en aezenn hedro.

Hunif dibreder gent ar maeziou, gent ar mor,
Gant va enez hec'h oabl digor,
Da c'hortoz ma hopo ar sklerijenn en-dro.

Kredif oa un touell pep drouklamm, pep klefved,
Hag un trelat ha gwallhufvre kement poan diwasket,
Ha buhez torret hor c'hile, ar c'hefiv, hag ar vered.

Kredif, evel gwechall, e ren, a-us dimp, e Porzh an Aelez,
Un Doue Mat gent E Lagad war hor reuzeudigezh,
O treiñ da vleuf pep drouziwezh.

(Gwalarn, 1938, niv. 121)

KAN AN NOZ
=====

(Istor..., p.131)

War sav-mein ar porzh kozh, karout a ren menel
d'an abardaez, va-unan-penn. Un nivlenn skafiv
he deus kuzhet en heol. War ar vourc'h o teval
e tiakenn peuc'h dispar noziou an nevez-hefiv.

An oabl, ar mor 'zo glasoc'h-glasoc'h er pellder.
Er bigi ne glever mouezh ebet ken. An donn
a ruilh didrouc'h war an traezh. An avel d'êr
O c'hwezhañ eus donder an Atlanteg divonn

a frondusa 'n ur luskellet mil bleuniadur.
Hag en defvalijenn n'hallan ket disrannañ -
goulacouenn amresis - dasskl'rijennadur
ur steredenn diouzh un tour-tan e vannañ.

(Liam, 48/17)

TRIADENNOU
=====

Ment divall ar roefvoù hir,
War ar c'heinvor, dust bir !
Bagig dieub ha kantreor

war an tonnoù lent e koroll
ar skafig, hag ar skafvlenier
a angell goustad ha reol,

evel ma pella 'r morevn
en ec'hander atlantek
gant askelladennoù gwevn.

War vagennoù ar vuhez
e stlej va ene gloazek
samm pounnar e zrouk-hirnezh,

hep lusk e vennerezh,
berrad heol a-dreuz kourmoul,
'vit reiñ de'i tamm hoalerezh.

Heklev ar meizañ, hag-ef
ouzh stokad an awen voull
na zassonje ken biken ?

(Liamm, 48/19)

KOURMOUL
=====

Kourmoul hag a dremen da ziskar an devezh,
ha ne livirit ket da 'm spered, a-wechoù,
"deus ! bez' ez eus broioù na van digevannez
nep ene, - ma kavi doue da hufyreoù" ?

Kourmoul hag a zered da ziskar an devezh
avel evned trollet gant marvidigezh 'n hafv,
a leugn he frond mezvus un ene didsivez
hag a zihun un tangwall plasouier ennañ,

kourmoul hag a rusa da ziskar an devezh,
ha ne vijec'h ket deut evit doan diwezhañ
a varv ganti an eneoù, tonket ma vez
u strobo 'n Ankou, meder digizidikañ ?

Kourmoul hag a deva da ziskar an devezh,
didec'hit war eskal an avel vonedus, -
c'hoant da gement dazont va ene n'en devez,
a vir en e gushañ ur bugeliq sentus.

(Liamm, 48/21)

DISTRO
=====

da Veven Mordiern

Savet 'm eus 'n eor trema 'n Aber,
savet an eor bremaik,
Faltezier ?
pe 'r wech-mañ strivad gwellic ?

Savet 'm eus 'n eor 'trezek an Aber,
davet Mamm guñv an emzivad a leñv, -
o c'hwi, Gwerc'hez, din ma 'm zoueller
harp diziskogellus ha kreffv.

Savet an eor sioul-kenañ.

Evel skeudenn skañv ar palmez
war veajourion skuizh oc'h astennañ,
war va ene, usvedelet kufvalazh,
dre zaouarn mammgarantezus ar Wenvidigezh,
emañ ar C'hraz o teverañ.

Sant-Per-Mikelen, Eost 1927
Roazhon, Eost 1942

(Liamm, 48/23)

E KERVOIAL

(Istor..., p.169)

C'hwi zo qwriziennoù ma
c'halon Breizhad. (Kallouc'h)

E Kervoial, p'oañ bihanik,
N'ec'h eus ket soñj, o mamm karet ?
Ni 'yae 'lies gant un hentig
Bet' ar velin, e-mesk an ed.

Ar bleuñ a oa leun a wenan,
Klemm a rae eskell ar velin.
'Hed ar girzhier mourb ha melen
E serrempe mouar hag irin.

E penn an ivarc'h troiellus
E spurmentep 'vel un huné,
Ar mor divent ha lugernus,
Gant a ouelioù ruz a Siné.

Ha pa gouezhe an enderv-noz,
En ur ganaf ec'h semp d'ar gêr.
Ar pennkerioù dija oa kloz...
N'ec'h eus ket soñj, o mamm tenar ?

(Chal ha Dichal, 1933)

NOZ WAR AR BOURZ

Deuit hag an noz a vo evidon leun
a splannec'h (Kallouc'h)

Lezet hon eus a-c'houde dec'h
Forzh hol lestr ha treuzoù hon ti.
Oidù ar nor 'vel ur gouelec'h.
Tra ne welan an noz gouli.

Netra nemet al levañnon
O skumenniñ d'ar frigelion
Hag, stre fardoù ar gwezni,
Koroll hep fin ar steredi.

mourb : glas-ru. huned : buñvro. didu : dilezet. gouli : goulln. levañnon : houl
frigelion : steon, fri al lestr.

E korn an dreuzell ez on deuet.
Ne glevan nemet ar morson
Hag, o trouzal 'vel ur galon,
Lusker al lestr edan ma zreid.

E-kreiz ar c'hriaj hag e hud
Hir eo peder eur de c'hortoz !
Soñjal a ran, difiav ha mut,
En traoù a zo pell diouzh an noz.

En inizi a zeuy emberr
Da gevelliñ perzhier liirzhin,
Em dous chomet war an erin
Lec'h m'en deus bleuñ ol lenneier.

(Ibid.)

GWERZ MAMM ROHU

Selaouit holl ha selaouet
Ur werzenn a-zevri savet
A-zivout Mari, mamm Rohu.
Istor brövec'h ne glevet-hu !

Petra zo kouezhet a-nevez
War Bro-Garnag, trugarez Doue,
Ma welan du-se kalz a dud
O treuziñ al lann, trist ha mut ?

Setu tud yaouank ha tud kozh,
Gwragez ha bugale a yec'h.
Ur bobl a-bezh a zo tolpet
Gant kirri, snout, moc'h ha ronsaed.

Siwezh ! N'eus hiziv foad ebet,
Ar brezel kriz ne laran ket.
Deut eo ar chouaned gante
Ag an Intel bet' an Alre.

kriaj : amzer fall. gevelliñ : reiñ kalou aus.

Nag ur blijedur da gentañ
Goude torfedoù diehan
Klevout ar re an oferenn
Gant beleion an arme wenn !

Ag ar c'hreiznoz bremañ, allas,
E teu fonspl an arme c'hlas.
Mell eo tec'hel 'rek ar brezel
He difenn mat hentoù Plarnel.

Ar Chouaned a zo du-hont
O vrezelñ garv ha dispont.
En o mesk emañ Kadudal,
Rohu a Garnag ha re all.

Kuzhet war roudouz ar Begoù,
Ne vint ket trec'het an tazoù⁽¹⁾.
Divaret eo gwad meur a zen,
Met ar re c'hlas ne gerzhont ken !

Piv o sailhañ a walit-hu
Er barrad plom ? Emañ Rohu
O vont da gonfortif an holl.
Boledoù a c'hwitell bep taol.

Neoazh chemel a re hep aon
Gouarnet marse gent an Anaon.
A-vihanik en deus pedet
Bemdez 'vit ar re dremenet.

Met skuizh-brein eo. Hag ar chouan,
Evit kemer un tamm ehan,
A chouk a-dreñv ur pikol maen.
Piv c'hoazh war e lerc'h a dremen ?

Ur vaouez gozh eo, krizet ha rac'h
A red neoazh evel ur plac'h.
Doust d'an hent strizh, doust d'an Ankou,
He botoù koad 'n he dozn dehou.

1) kent pell.

Hec'h anzavet en deus Rohu :
- O mamm, emañ petra rit-hu,
O redek e-kreiz an emgann,
Ha piv a glaskit war al lann ?

- Hini, ma faotr, hini 'medout !
Ken foll out 'lies hep her gout,
Ma vennen ober war da dro.
Az heulief a ran e-werso.

Met diaoul a baotr ! Foul zo warnout
Ha buan ec'h ez ! 'vit ez tapout
Ha chom ec'hoel war da roudoù
Ret eo din teurel ma botoù !

Pedomp bremañ an Aotrou Doue
Hag e vamm ar Werc'hez ivez,
Peogwir ec'h oa honnazh hep mar
Warlerc'h he mab, deiz ar C'helver !

Selaouit holl ha selaouet
Ur werzenn a-nevez savet
A-zivout Mari, mamm Rohu.
Istor bravoc'h ne glevot-hu !

(War don An Anaon, e Barzhez Breizh) (Dihunamb, Genver 1944)

T R O I D I G E Z H I O U

Bras eo bet lec'h en troidigezhioù e bloavezhioù kentañ Gwalarn. Mar deo aet al lec'h-se war vihanaat ne deo ket hepken dre ma kemere ar skrivagnerien ysouank muioc'h a fiziañs en o donazon, hogen dre ma choma berr an arc'hant a kef ar mouladurioù brezhonek. Ret-mat eo soñjal da gentañ ar skridoù savet war eeun e brezhoneg.

Daou abeg e zo d'an troidigezhioù :

1st) Reiz d'en dud en o yezh penn-oberennoù lennegezh n'hellont bezañ lennet en o yezh-orin nemet gant nebeut a dud. Setu an abeg a zo bat da Youenn Drezen da lakaat e brezhoneg Prometheus hag ar Garsed gant ar Gresian Aesc'hulos (1928). Hefvel en deus graet Roparz Hemon evit Makbez gant Skakespeare e 1941. Hir e c'hell fe bezañ ar roll.

2^d) Bez' ez eus pobloù, avat, kalz neoc'h dimp dre o yezh eget lod all. Pa'z eomp da glask en o lennegezh kozh, pe hini Kembre, pe hini Iwerzhon, pe hini Skos e ve, na reomp nemet klask eno ar pezh a zo aet da goll eus hon harezhen-geltiek. Setu perak e voe kavet, adal an dezo, e Gwalarn troidigezh Mabinnigion Kembreiz hag ivez eus hen-zanevelloù Iwerzhoniz.

Skeudennoù un amzer dremenet, nebeut anavezet ganimp, kentoc'h eget skouerioù evit ul lennegezh a-vremañ a glasked er skridoù-se. Setu pezh e lavar deoc'h Roparz Hemon kent displegañ Tonkadur Bugale Lit :

Evit Abeozen, troer ar Mabinnigion, eo bet luziatoc'h ar c'hoari. Pa oa war studi ar brezhoneg-krenn hag ar c'hembraeg-krenn e Roazhon, war-dro 1923-1927, e voe skoet e spered gant ar bras a gemm a zo etrezo. Breizhiz ar Grenn-Amzer o deus kaset betek ennomp skridoù relijiel hep muiken ha bras eo levezon ar galleg war o geriadur. Un nebeut dornekridoù e Kembre, avat, o deus miret betek hon amzer danevelloù savet en ur yezh ermi un narzh hag ur verdedd souzhus ha kalz digemmeskoc'h ar geriadur anezho. Ur skol dispar evit ur brezhoneg.

Troidigezhioù all, avat, a zo bet savet da reiz dimp skouerioù evit hol lennegezh a-vremañ. Fellout a ra din, da skouer, menegiñ pezhioù-c'hoari berr c'hoariva Iwerzhon. (War varc'h d'ar mor; An Draonienn hep hecl troet gant Y. Drezen; Nevez-Amzer lakaet e brezhoneg gant Roparz Hemon, evel ma reas evit Ar C'hounoul e dec'h pezh-c'hoari a Vro-Gembre.)

Kontadenn verr Kembreiz ha deus ivez tennet evezh hor skrivagnerien. Nemet eo ret anzav e c'hell bezañ bet levezonet en dud eus an daou du da Voz Breizh gant un hevelep froud lenneget eus hon amzer.

A L L E N N E G E Z H
K E L T I E K K O Z H H A N I

Perak ez embannomp e Gwalarn troidigezhioù hag addisplegadurioù diwar lennegzh kozh ar Gelted ?

N'eo ket tenn da lavarout.

N'hon eus c'hoant ebet - evel ma kav da galz eus hol lennerien - lakaat skouerioù dirak sell hor skrivagnerien, dezho da boaniañ goude da sevel oberoù hevelebekaet diuto, kalz pe nebeut.

N'omp ket taer a-walc'h, nag hegreidik a-walc'h, da soñjal ez eo spered Breizh en amzer bremañ heñvel, pe damheñvel zoken, ouzh spered Iwerzhon ha Kembre er Grenn-Amzer. Ne c'hell lennegzh nevez Breizh diwanañ nemet diwar menozioù bev ar Vreizhiz a vremañ, hag ar menozioù-se end-eeun tarzhañ nemet diwar darvoudoù bev. Lennegezh Vreizh, evel Istor Breizh, a vez graet gant hor c'hig hag hor gwad, ha nann gant hunvreadennoù diwar-benn hor c'heltezh ha mouezh hor c'hentadoù.

A zo muioc'h : anavez a ranken e kavan plijadur o lenn hag o treiñ skridoù kozh ar Gelted, dre ma tiskouezont din bezañ esper ha souezhus, ha pell bras diouzh va frederennoù pemdeziek. Ma c'hwezhañ awen ar ouenn drezo, neuze ez on un estren.

.....
Un deiz e klevjont e oa merv ur c'har dianav, hag ez ejont da walcout e di, a vije dezho hiviziken, hag e kavjont e-barzh ur bern traoù sebezus : eiz - beuri eus amzer ar roueed, delwennoù porselen iskis hag avelerioù bras fichet gant pluennoù struskafval. Digoret ar stalafioù, e tiboultrennjont pep tra da gas ganto. Tamm-ha-tamm e steuent o ene diouzh ene en amzer dremmet.

(Roparz Hemon, Gwalarn, niv. 13, 1928)

Notenn

Ma ne glaeke ket Roparz Hemon skouerioù e lennegzh hag un heñvel d'e brederiadennoù e danevelloù Iwerzhon, bet en deus diganto tostenn daou eus e varzhonegoù kerañ : Lazhadenn Unwab Aife (1942) ha Gwarizi vras Emer (1943).

TONKADUR BUGALE LIR (1)

1. LIR HA MERC'HEO GILIOLL ARANN

A-zivout an De Danann(2), diwar an emgann e Tailten :

Ur vodadeg a rejont gant tud deut eus pep korn ar pemp rannvro. Hag e lavaras ar pennoù-bras :

"Gwell e ve deomp, emezo, kaout ur roue hepken o ren warnomp eget bezañ rannet evel bremañ, hag oc'h ober gwazoniozh da galz rouaned an Iwerzhon."

E-touez ar re a oa engortoz bezañ anvet da roue e oa Bobb Dearg mab an Dagda, (3) hag Ilbreac'h a Eas Ruaid, ha Lir(4) a Lez Fionnac'haid, ha Midir B-le'h a Vri Leit, hag Aengus Og. Evit Aengus Og, gwell e oa gantañ chom evel m'edo, ha ne felle ket dezhañ buzañ roue.

An uhelidi a reas kuzul strezo, ha sed a voe divizet : reñf ar rouantelezh da vab an Dagda, Bobb Dearg, diwar tri abeg : en abeg d'e dad, en abeg dezhañ e-unan, hag o vezañ ma oa ef an henañ eus e vredeur.

Pa glevas Lir kement-se, ne blijas ket dezhañ an dibab. Hag e kuitas ar vodadeg hep kimiad. Dezhañ, war e veno, e vije bet deraet reñf ar rouantelezh. Bobb Dearg a voe lakaet da roue evelato. Hag e vennes ar re all mont war-lerc'h Lir, lakaet an tan war e di, hag e c'hloazañ ef e-unan dre ar goef hag ar c'hleze, pa ne sante ket ouzh an hini a oa bet roet dezhañ ar veli hag ar rouantelezh.

"Arabat deomp hen ober, a lavaras Bobb Dearg. En em zifenn a rafe. Ha daoust n'en deus ket pleget din, kement-se ne vir ket ouzhin da vezañ roue." Hir amzer e dremenas, hag e chomas an traoù e-giz-se. En diwazh, droukverzh a c'hoarvezas gant Lir. E wreg a varvas goude teir nozvezh ma oa klañv. Izal a kouezhas sperad Lir en abeg dezhi. Hag ur bras a zervoud e voe marv ar vacuez-se en hec'h amzer.

Dre Iwerzhon a-bezh e redas brud a gement-se. Betek tizhout ti-meur mab an Dagda, ma edo tolpet holl a-gevret uhelidi an De Danann.

Bobb Dearg a lavaras :

"Ma kar da Lir e vo talvoudus dezhañ va skoazell ha va c'heneilded hivi-ziken, bremañ m'eo marv e wreg. Rak amañ en ti-mañ ez eus teir flac'h yaouank, ar gwellañ neuzeñt hag ar bravañ stummet hag ar brudetañ a Iwerzhon. Aob, Acife, hag Ailbe, merc'hed Gilioll Arann, hag ivez merc'hed va c'halon."

Ewir oa, a respontas an De Danann, ha mat en doa lavaret.

Kennaded a vos kaset neuze davet Lir, da gumenn dezhañ, ma karfe anavezout beli mab an Dagda, e vije roet dezhañ da wreg unan eus e adverc'hed. Da e voe gant Lir. Ma loc'has antronoz eus Lez Fionnac'haid, hanter-kant a girri gantañ, da vont dre an hent berrañ da Lez Bobb Dearg. Hag e hetas pep mad dezhañ, ma voe laouen hag hegaret holl dud ar paloz outañ. Ha mat e voe servijet ha maget Lir hag e dud en noz-se.



Youenn DREZEM

Jakez RIOU .

LANGLEIZ .

Roparz HENON .

Olier MORDREL .



1948



6-8-1951



Yvan AR GOW

Yann SOHIER

F.M. FALO'HUN

TALDIR-JAFFRENNOU

Pêr MOKAER

Edo teir merc'h Oilioll Arann en hevelep gwele gant rounez en De Danann, gwreg Bobb Dearg, hag a oa advamm dezho.

Bodh a lavaras da Lir :

"Dibeb an hini a blij dit."

"Ne ouzon ket, emu Lir, pehini eo ar wellañ. An henañ, evet, eo ivez an uhelañ, hag hounnezh a zibabon."

"Ma ! a lavaras Bobb, Aob merc'h Oilioll eo an henañ, ha roet e vo dit mar kerez."

"Karan", emezañ.

Hag e kouskes Aob gant Lir en nozvezh-se.

Div sizufvez e vanas Lir e ti ar roue. Ha neuze mont kuit gant Aob d'e di-eñ da lidañ ur banvez roueel bras.

Nebeut amzer goude e teuas ar vacouez-se da vezañ dougerez. Ha deou c'hevall a c'henas, ur verc'h hag ur mab, a voe graet Fionnguala hag Aod anezho. Dougerez e voe adarre, hag e c'hanas deou vab, Fioc'hra ha Conn. Evit ar vamm, marvel a eure e gwilioud. Ha ken enkrezet e voe Lir ma vernas mervel ivez, ha ma vije mervet penevet ar garantez a zouge d'e vugale.

Pa zoues ar c'helou betek palez ar roue, e reas en dud ano teir leñvadenn d'an aderc'h o doa kollet. Bobb Dearg a lavaras :

"Keuz hon eus d'ar plac'h-se, en abeg d'an den mat m'hor bos he roet dezhañ rak anaoudek omp en e gefver en abeg d'e vignoniezh ha d'e lealded. Ne vo ket torret hor c'heneilded, evelato; rak he c'hoar Aoife e roin dezhañ da wreg."

Pa glevas Lir, e teredas raktal da zimeziñ gant ar plac'h-se; euraudet e voent hag e teuas d'ar gêr ganti. Sted a reas Aoife eus bugale Lir hag he c'hoar. Nikun n'helle, e gwirionez, gwelout ar vugale-se hep reiñ dezho raktal holl garantez e ena.

2.- EREZ AOIFE.

Alies-meurbet e teue Bobb Dearg da Lez Lir dre garantez ouzh ar vugale. O c'hemer a rae en e di e-pad hir amzer, ha neuze o lezel da zistreiñ. Ha pa veze lidet Banvez an Dad gant an De Danann e Lez Lir, ar vugale-se a vourrent en abeg da goned hag eundet o c'horfoù. E gwelsoù dirak o zad e kouskent, ha boss os hemañ da sevel bep beure na mont da c'houzvez e-touez ar vugale.

Sed a c'hoarvezas koulskoude : un tan a erez a gregas e kalon Aoife abalamour da gement-se, hag e sellas ouzh bugale he c'hoar gant anebizh ha kasoni. An neuz a reas da vezañ klañv e-pad an darn vrasañ eus ur bloaz. Ha goude-se, un argerzh taol gwarizi ha gourvenn a ijines a-enep bugale Lir.

Un deiz e lakaas starniañ he c'harr, hag e kasas ar vugale ganti. Hag hi en hent etrezek ti he zad. Fionnguala ne felle ket dezhi mont, o c'houzout e klaske Aoife ober droug dezho pa o lazhañ : dre he huñvre he doa gwelot ar menoz

trubard a ziwane e spered Aoife. Ne oa ket, avat, evit herzel ouzh an tonkedur e oa engortoz eviti.

War an hent e lavaras Aoife d'he zud :

"Lazhit, emezi, pevar bugal Lir, o deus lamet diouzhin karantez o zad. A bep seurt goprou ho pezo diganin."

"Naren, emezo, avit geneomp-ni ne vint ket lazhet. Un torfed fallakr out mennet da ober, ha kouz az pezo da vezaf e ziskuliet."

O welout ne sentant ket, e tennas ha c'hleze da lazhañ hec'h-unan bugale Lir. Hogen he gwrazelezh, hag he laoskontez natur, ha gwanded he spered a viras outi. Evel-se ez ejont war-du ar Reter betek glann Loc'h Dairbreac'h, hag eno e harzjont o c'hezeg.

Neuze e kemennas Aoife da vugale Lir mont da gouronkañ ha da neuñ war al lenn. Mont a rejont. Diouzhtu m'o gwelas war an dour, e stokas Aoife outo gant ur wialenn hud drouizel, m'o lakeas da bevar alerc'h gwenn-kenn.

Neuze e troas pevar bugal Lir o dremm davet ar vaouez. Fionnguala a gomz outi evel-hen :

"Fall an torfed ac'h eus graet, Aoife, hag un taol ganas eo bezañ hon distrujet hep abeg. Talvezet e vo dit hep mar. Ha kouezhañ e ri en abeg da se. Rak n'eo ket brasoc'h da c'halloud-diskar eget drouizelezh hor c'heneiled. Lavar deomp eta peur e vo termen d'hor rouz."

"Hag e rin, eme Aoife. Ha gwazh a se deoc'h p'hoc'h eus goulennet. Sed an termen a lakean d'ho poen : pa vo unanet Maouez an Dehou gant Gour ar C'hleiz; da leverout eo, pa vo unanet Lairgnen, mab Colman, mab Coctac'h, mab rous Connac ha Deoc'h, marc'h Fingin, mab Aod Alainn, rous Muma. Ha peogwir hoc'h eus goulennet mignon ebet na galloud ebet ne c'helle lemel ar stummoù-se diwazhoc'h ken na vir chomet tri c'hant vloaz war Loc'h Dairbreac'h, ha tri c'hant vloaz war froud ar Macil, etre Iwerzhon hag Alba, ha tri c'hant vloaz e Iorris Domnann hag Inis Glu sira Brendainn. Ha sed ar pezh e c'hoarvezo geneoc'h."

War se, keuz e zeuas da Aoife, hag e lavaras :

"O vezañ na c'hellen ket ho frualziñ hag ho tiboeniñ hiviziken, ho prezañ a virot; ha gwerzioù klamvanus a garet, m'o devo mibien an Douar c'hoant da gouzout ouzh ho klevout, ha kenerezh ebet na vo par d'ho hini. Ho skiant hag ho poall n'avo geneoc'h, ha n'ho pezo don ebet o vezañ e stumm evned."

Hag e kanas ar ganenn-mañ :

"Kenavo deoc'h, bugale Lir,
Gwenn ho tremmoù, simut ho teod,
Braset reuz da yeouankiz flour
Gortoz nav c'hant vloaz war an donn."

-0-

3.- KASTIZ AOIFE

War-lerc'h ar ganenn-mañ e voe sterniet he c'herr da Aoife, hag hi ha mont davet ha zad. Degemeret mat a voe gant uhelidi el lez. He zad a c'houlennas perak n'he doa ket kaset bugale Lir ganti.

"Toufañ a ren dit, emezi, n'out ket karet gant Lir. Ha ne gred ket kas dit e vugale, gant aon na vefant dalc'hat ganit."

"Souezhet on e se, a lavaras Bodb Dearg, rak keroc'h eo din ar vugale-se eget va bugale-me."

Hag e soñjas Bodb Dearg ennañ e-unan e oa un taol trubarderezh he doa c'hoariet ar vaouez-se ouzh ar vugale. Kannaded a gasas war-du en hanternoz da Lez Fionnac'haid.

Lir a c'houlennas perak e tawent.

"Da gerc'hat da vugale", emezo.

"Daoust ha n'int ket degouezhet a-unan gant Aoife ?" amezañ.

"N'int ket, eme ar kannaded, hag hervez Aoife, te eo ac'h eus miret outo da vont."

Daoust hag ankrezet e voe Lir o klevout ar c'heloù-se. Rak maizet en doa e oa bet mac'hagnet pe lazhet e vugale. Paket e voe e loened da Lir antronoz beure mat, hag en hent, strezek ar mervent, betek ma tizhas glann Loc'h Dairbreac'h.

Pa welas ar varc'hekaded o tont, e kanas Fionnguala ar ganenn-mañ :

"Ra vo deut mat ar varc'hañ
A welan tost da Loc'h Dairbreac'h.
Ur strollad nerzhus, kevrinus
A zo deut bremañ war hol lerc'h."

Degouezhet e-kichen ar ribl, e verzas Lir e oa gant an evned-se gouezhioù tud, hag e c'houlennas perak.

"Klev 'ta neuze, Lir mab Lugaid, eme Fionnguala, ez omp-ni da bevar bugal strobinnel gant da wreg ha c'hoar hor mamm dre eraz ha gwarizi."

"Na c'heller ket, eme Lir, lakeat ho stummoù da zont warnoc'h adarre ?"

"Na c'heller ket, eme Fionnguala, he na c'helle don mont war hor skostell ken ne vo unanet Maouez an Dehou gant Gour ar C'hleiz, en amzer ma tauin ar Feiz hag an doueegezh an Iwerzhon."

Pa glevas Lir hag e dud, teir lañvadeg a c'hlac'har, e gaez hag a enken a rejont etrezek an nañv.

"Ha c'hwil a fall deoc'h, eme Lir, dont geneomp, pa'z eo chomet geneoc'h hoc'h avar hag ho skiant ?"

"Na c'hellomp ket, eme Fionnguala, mont kevet gant den hiviziken : hogen hor yezh, ar gouezaleg, hon eus c'hoazh; hag e c'hallomp ober kenerezh klamvanus, na vo boemet tud an dour ouzh hor c'hlevout. Chomit geneomp an noz-mañ, hag e kanimp evidoc'h."

Lir hag e dud a chomas da selaou ouzh kan an elerc'h war c'hlann Loc'h Dairbreac'h. Hag e vanjont kousket en diwezh. Antronoz vintin e savas Lir da vont da Lez Bodb Dearg.

Tamallet a voe dezhañ bezañ deut hep e vugale.

"Siwazh, eme Lir, me n'eo ket na felle ket din kas va bugale amañ. Hogen Aoife, da aderc'h ha c'hoar o mamm, he deus o zroot e pevar elerc'h gwenn-kann," Skrijañ a reas Bodb o klevout ar c'heloù-se. Rak anaout a ree e oa gwir. Hag eñ da rebec'h start Aoife :

"Gwashoc'h, amañ, a vo dit an taol-mañ eget da vugale Lir. Distrobinellet e vint a poent, hag ez ay o eneoù d'er baradoz."

Hag e c'houlennas outi pe stumm a vije gwasheñ ganti mont ennañ : "Stumm un serouant", a respontas.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gomz e skoas outi gant ur wislenn-hud drouizel, ma'z ees-hi d'un serouant. Ha rektal e nijas kuit. Hag un serouant eo c'hoazh, ha bez' a vo da virvika

4.- AN ELERC'H WAR LOC'H DAIRBREAC'H

Evit Bodb Dearg hag an De Danann, betek glann Loc'h Dairbreac'h ez ejont. Hag eno kempañ ha selaou kan an elerc'h. Mibien Milead ivez a zeredas eus pep korn Iwerzhon da gempañ war c'hlann al lenn ha selaou. Rak, gouez d'an danevellourien, ne voe biskoazh klevet en Iwerzhon kanennoù da gefveriañ gant re an elerc'h. Hag e vezent bemdez o tislepegañ marvailhoù hag o tiviz gant tud Iwerzhon, hag o vreutast gant o mistri, o c'hendiskibien, hag o holl vignoned en hevelap giz. Ha bemnoz e vezent oc'h ober kanerezh-hud klemmvanus-meurbet, ma kouske flour ha didrabas neb a selzoue, ne vezn pe gleñved pe boan e oa warnañ. Ha laouen ha sedd e vezed goude-se.

E-doug tri c'hant vloaz e chomas kompèt mibien Milead hag an De Danann war-dro Loc'h Dairbreac'h. Neuze e lavaras Fionnguala d'he breudeur :

"Hag anaout a rit-hu, breudeur, amezi, e vo echu antronoz an amzervezh ho- aus da dremen amañ ?"

Glec'har ha saouzen e grogas o mibien Lir pe glevjont. Rak hufvel oa bet dezho bezañ tud keit ha ma choment war Loc'h Dairbreac'h, o tiviz gant o c'heneil. Ha bremañ zenkout mont war froud kounnaset araoùs er Macil en hanternoz.

D'an deiz diwezhañ, beure mat, ez ejont da gimiadañ diouzh Bodb Dearg hag o zad. Hag e kanas Fionnguala er genenn-mañ :

"Kenavo dit, Bodb Dearg,
Gouiziek, brudet ha fur,
Kenavo dit, hon tad,
Lir a Lez Fionnac'haid.

"Diwar an deiz-mañ 'vimp
Hep hor mignoned vat,
Hep klevout mouezh un den
War dourioù yen er Macil.

"Hon dilhad keer a vo
Tonnoù c'hwerv ar mor sal,
'Hed an deiz, 'hed an noz,
Pell diouzh ar re hor c'har."

Hag e kemerjont o nij, uhel, skafv, serel, betek froud er Macil, etre Alba hag Iwerzhon. Ma voe doaniet Iwerzhoniz. Dre holl e voe lakaet berz lazhañ un elerc'h.

5.- AN ELERC'H WAR AR MACIL

Fell e voe an anaout war ar Macil da vugale Lir. O welout an endoù ac'hon en-dro dezho e voent leun a reuz, a riv hag a rec'h. Ne voe netra dezho pep droug o doa gouzavañ betek-han e-skoazh an droug e c'houzavjont war ar froud-se. Un noz e teuas ur reklom bras.

"Ve breudeur garet, eme Fionnguala, hep mer e vimp rannet an eil diouzh ar re all gant ar barrad-amzer-mañ. Dibabomp ul lec'h eta ma c'hallimp en un gavout, mar deo youl Doue e vimp rannet."

"Dibabomp, va c'hoar, amazo, da lec'h emvodañ Karreg ar Reuniged, peogwir hec'h anavezomp holl."

Pa zeuas hanternoz e c'houzizas an avel, hag e kreskas leñs hag aroun en tonnoù, hag e tarzhas al luc'hed, hag e voe skubet an dour gant ar gorventenn c'hwerv, ma voe skignet bugale Lir war ar mor bras, pell diouzh an sod, pep unan hep gouzout da belec'h oa bet kaset ar re all.

En diwezh, avat, e sioulas an arnevann, hag e teuas ur c'halm flour. Hec'h-unan-penn an em gavas Fionnguala war ar Macil. Ne wela ket ha breudeur. An holl nozvezh e chomas war Garreg ar Reuniged, o sellout ouzh ar mor tro-wer-dro, betek ar goulou-deiz, ma verzas Conn o tont deveti, pouner e bann, glab e eskell. Ha deut mat a voe d'he c'halon. Fiac'hre a zeuas ivez, yen ha glab ha skuizh-divi. N'halled ket miziañ pezh a lavare, kement a riv hag a boan en doa bet.

"Ha teufe Aod davedomp, na laouen e vafemp bremañ !" eme Fionnguala. Damc'houde e weljont Aod o tont, dic'hleb e bann, didorr e eskell. Gagemaset mat e voe gant e c'hoar. Dindan pluv hec'h askre e lakaas Aod, Fiac'hre dindan hec'h askell dehou, ha Conn dindan hec'h askell gleiz.

"Breudeur, eme Fionnguala, daoust pegan garv eo bet an noz tremenet, neuze

a nozvezh heñvel outi hor bezo c'hoazh da dremen."

Pell amzer e chomes bugale Lir goude-se, o c'houzañv anoued hag azrac'h. Ken na zeus un noz ken yen, n'o doa gwelet netra a-raok heñvel ouzh rev, yen-ijenn, arc'h hag avel an noz-se. Hag e reas Fionnguala er ganenn-mañ :

"Fall ar bed-mañ,
Yender an noz,
Braster an arc'h,
Gervder er gwent.

"Dindan va flufv,
Kousket o daus,
Henozh an doan.
Fall ar bed-mañ."

He pell amzer adarre e c'houzañves bugale Lir. Ken na zeus un noz all, m'edont war Gæreg ar Reuniged. Kala genver e oa. Skornañ e reas an doursier, ha pep unen a voe skornet el lec'h ma edo; o zreiz hag o eskell a begas ouzh ar gæreg, ma n'oant ket gouest da fival. Ken start e strivjont koulskoude ma chome kroc'hen o zreiz ha plufv o brusik ha beg o eskell stag ouzh ar roc'h.

"Siwazh, bugale Lir, eme Fionnguala, e stad fall emsomp, rak n'hellomp mui gouzañv an dour sail, ha berzet eo ouzhimp bezañ e lec'h all. Ma teu an dour sail an hor gouliob, neuze mervel a rankimp."

Hag e reas ur ganenn :

"Gwall rec'het omp fenezh,
Gant hor c'horfoù diblufv,
Yen d'hor sol wiridik,
Ar zeier rust, diblaen.

"Kas hol lezvamm ouzhimp,
O c'hoari 'n hon eneb,
Ouzh hor c'hes war ar mor,
E stumm elerc'h marzhus.

"Hor c'houzonk war an aod :
Spoum an donn hag ar fru.
Hol lod e fest ar bier :
Holen c'hweir ar mor louet."

Padal e rankjont mont, ha deoust pegen flemmus ha krii e voe dezho dour ar mor, na oant ket evit tec'hout, hag evit en em wareziñ. En trubuilh-se e voant betek ma kreskas o flufv adarre wern hag o eskell, ha ma voe peurbareet o gloazic

Un deiz ma oant ast betek genou er Banne an hantarnoz, e weljont un anheuliadeg kaer hag unliv a varc'heien, dindano mirc'hed gwenn-dinann, o tont rag-beun aus ar mervent.

"Hag anaout e rit an anheuliadeg-se, bugale Lir", eme Fionnguala.

"Ne raomp ket", emezo.

War se ez ejont etrezek an aod d'o anavezout. Hag e weljont Aod Aitfiosac'h ha Fergus Fite'hiollac'h, mibien Bodh Dearg, hag an drederann aus strollad ar varc'hegourien ganto. O klask an elerc'h oant bet abace poll. Penses, a c'houl-annas Bugale Lir, ez es ar bed gant an De Danann, ha dreist-holl gant o zad, Bodh Dearg hag o zud.

"Met, emezo. Emaint holl a-gevret, e Luz Fionnac'haid, o tebrin Fest an Oad, drant ha seder, hep preder na skuizhvezh, na keuz nemet o vozañ hepdac'h."

"Evidomp, eme Fionnguala, reuzeudik eo hor buhez."

6.- AN ELERC'H EN IORRUS DOMNANN

Pa voe tremenet an amzer o doa bugale Lir da chom war ar Maol, e lavaras Fionnguala :

"Poent eo dimp mont ac'han."

Hag e tilezjont froud ar Maol da vont betek Beg Iorrus Domnann; eno e vanjont pell o c'houzañv, ken na zegouezjont gant un den yaouank, a ouann uhel (hag Aibric oa e anv), a voe tennet a evezh meur a wech gant an evned, hag a oa c'hwek dezhañ klevout o mouezh. En doare m'o c'hare mat ha ma veze karzet ganto. An den yaouank-se eo a urzhias hag e zisplegas an holl zervoude-mañ.

Un nozvezh a zeus ma voe ken spontus ar yenijenn hag ar frim hag an arc'h ma kreskas un dar skorn war ar froud a-bezh, etre Iorrus hag Acaill. Hag e stagas ar vredeur da glemm ha da hirvoudiñ.

"Va breudeur, eme Fionnguala, kredit er Gwir Zoue e splendeur an deus preat an Dabl hag o Coumoul, an Douar hag e Frouezh, ar Mor hag e Vurzhudoù. Skozzell ha frealz ho pezo neuze Digantañ."

"Kredomp", emezo.

"Ha krediñ a ran ganec'h, eme Fionnguala, er Gwir Zoue, peurakientek ha peurvot."

Diwar neuze e kredjont. Ha skor ha gwarez o devoe digant an Aotrou.

7.- DISTRO BUGALE LIR

War Beg Iorrus Domnann e vanjont betek diwezhañ an amzer o devoù da chom eno. Neuze e lavaras Fionnguala :

"Poent eo deomp mont da Lez Fionnac'haid, ma emañ Lir gant o goskor hag hon holl dud."

"Da eo ganeomp," emezo.

Hag i en o reok, aezel ha skefiv, betek tizhout Lez Fionnac'haid. Hag e kavjont al lez-se digenvez ha goull, gant netra nemet pelezioù glas didonn ha linadegoù; hep ti na tan na lec'h-annez. M'en em stardas ar pevar bugal en eil ouzha egile, ha teir leñvadenn a rejont. Neuze e kanas Fionnguala ar ganenn-mañ :

"Keresenn din gwelout al lez
Perok hep ti, perok hep tan ?
Pa welan al lec'h-mañ, siwazh,
Em c'halon ez eus c'hwervoni.

"Hep chas hag hep strollad kon,
Hep merc'hed hag hep rouaned vras,
An tachennou-mañ, hep hon tad,
Biskoazh n'hon eus anavezet.

"Hep kerniel, hep kiboù-evañ,
Hep evadeg er salioù sklaer,
Hep marc'haien ha yeouankiz,
Evel an noz-mañ ! Pebezh reuz !

"Evel m'emañ tud al lec'h-mañ,
Siwazh, c'hwervoni d'am c'halon !
Anet em eus merzet hanozh
Ne c'hal mui bevañ mestr an ti.

En noz-se e chomas bugale Lir e lec'h o zad hag o gourdadoù, al lec'h ma oant bet maget, o kanañ gwerzioù c'hwek, boemus; hag entronoz e savjont beure-mat da vont da Inis Gluair Brendsinn. Eno en em dolpe evned ar vro andro dezho war Lann an Evned. Bemdez oz bent da glask magadur e kornioù pellañ ar vro, en Inis Goad hag Acaill, hag e Teac'h Duinn hag inizi all ar C'hornog. Bemnoz e tistroent da Inis Gluair.

-o-

8.- KLOC'HIG MOC'HAOMOG.

Pell amzer a dremenas neuze, hag en diwzhañ e teuas Jezuz war an douar, hag an Aotrou Sant Padraig en Iwerzhon, hag an den santel Moc'haomog en Inis Gluair Brendsinn. En noz kentañ ma teuas, e klevas bugale Lir moulzhañ e gloc'hig o sanif matinezoù en o c'hichen. Hag i da skrijañ, ha da lammat tra-he-tro, brvouac'hed. He breudeur a lezas Fionnguala hec'h-unan.

"Petra c'hoarvez, va breudeur ?" emezi.

"N'anavezomp ket, emezo, ar vouezhig distez spontus hon sus klevet."

"Mouezh kloc'hig Moc'haomog eo, eme Fionnguala, hag ar c'hloc'hig-se ho tieubo diouzha anken hag enkrez hag ho frealzo hervez youl an Aotrou."

P'o devoù selaouet bugale Lir ouzha ar c'hloc'hig ken na vos echu ar ped-annoù beure :

"Bromañ kanomp, emezo, da Roue-Meur an Nefv hag an Douar."

Raktal e kanjont kanennoù klemmvanus, c'hwek, gorrek, boemus, o vualif an Aotrou hag oc'h azeulif ar Roue-Meur.

Hag edo Moc'haomog o selaou, hag o pediñ start, ma vije diskuliet dezhañ digant piv a teus ar c'hanennoù-se. Diskuliet e voe dezhañ e oa digant bugale Lir. Antronoz eta ez eas Moc'haomog da Lann an Evned. An elerc'h e welas war al lann. Hag en mont betek ar c'hilann, ha goulenn outo :

"C'hwil eo bugale Lir ?"

"Bugale Lir omp", emezo.

"Doue zo va meulet, eme Voc'haomog, rak en abeg deoc'h eo an deut d'an anezenn-mañ kentoc'h eget da holl anezennoù all Iwerzhon. Deut betek ar ribl bromañ, hag ho pat fiziañs annon."

Douarfañ a rejont. Hag en o c'hasas d'e beniti. Eno e pedent gantañ hag a kanent an ofezenn.

Moc'haomog a gemeras ur micherour ekeit gantañ, hag e c'houz'hemennas dezhañ ober chadennoù arc'hant gwenn-kann dezho. Ur chadenn a lakaas etre An i ha Fionnguala, hag ur chadenn etre Conn ha Fiac'hra. Ha lavenez o devoù c-fevar en o spered, ha lavenez a voe ivez o spered an den santel. Arvar ebet nag enkrez ne zeuas ken d'o heskinañ.

9.- MARV BUGALE LIR

An hini a oa roue e bzo Gonnac'ht d'an ampoent a oa Leirgenn, mab Colman mab Coctac'h, ha Deoc'h merc'h Fingin mab Aod Allain, da lavarout eo, merc'h roue Muma, a oa e vrag. Ha setu ma oa unanet Mouezh an Dehou ha Gour ar C'hleiz.

Pa klevas ar vouezh-se anv sus an evned, e voe leun e garantez outo. Hag ec'h espedas Leirgenn d'o reñf dezho.

Leirgenn a gasas kannaded da c'houllenn an evned digant Moc'haomog. Na voent ket roet dezho.

Bugale Lir

Droug bras a savas e Lairgnen. E-unan a teuas da beniti Moc'haomog, hag a c'houlennas outañ he gwir oa en doa nac'het reif an evned.

"Ewir eo", eme Voc'haomog.

Neuz a savas Lairgnen, hag a krogas en evned, hag o diframmas diouzh an aoter. Hogen karkent ha ma voe an evned en e serr e kouezhas o fluñv diouto, hag ez eas ar vibien da dri c'hoziad trout, roufennet, hag ar varc'h d'ur wzael, kozh roufennet, hep kig na gwad.

Spouronet a voe Lairgnen hag ez eas kuit raktal.

Neuze e laveras Fionnguals :

"Deus, den santel, ro deomp ar vedeziat, rak emañ tost hor marv. Hep mar ebet e vi ken glac'haret o vont diouzhimp ha ni o vont diouzhit. Evelse 'ta, toull deomp ur bez, ha lake fiac'hra a-zehou din, Conn a-gleiz hag Ad dirak va zremm."

Badezet e voe bugale Lir. Neuze e varvjont. Ha beziet e voent o-fevar hervez o c'hoant.

Glac'haret-holl a voe Moc'haomog goude-se.

Tonkadur bugale Lir betek amañ.

 NOTEANNOU

(1) Tonkadur Bugale Lir : Miret eo bet dimp an danevell en un dornskrid ne doa ket koshoc'h eget an 18^{vet} kantved. Se ne vir ket outi da dennañ d'un amzer ken kozh mervat hag padvezh registorel ar Maen.

Anat eo koulskoude ez eo bet gwall gemmat en danevell en ur dremen a-dreuz d'ar c'hantvedoù. Levezon ar spered bremañ, dreist-holl merk ar spered kristen a zo warni.

Aes anavezout a Tonkadur Bugale Lir mervailh-pobl ar vzaudeur troet en evn gant ul lezvam ha gwarezet gant o c'hoar.

(2) De Danann : Tud an douezs Dena, mamm an doueed. Hervez ar vojenn, ar pevar eus ar mouriadoù a aloubas Iwerzhon. Bez' e oant hudourien dreist ha mailhed war labour ar metaloù. Trec'het a voent en emgann Tailtenn gant ar pempvet mouriad alouberien, hini mibien Milead. Abaoe a vevont en torgannoù hag ar c'hrugelloù koant a weler e pep lec'h dre ar vro.

Bugale Lir

(3) Danda : Doue bras ha galloudus lesanvet "aotrou ar ouiziagozh vras" pe "mab an holl skiantoù". Ur garter vuzhodus a oa gantañ, hag a vane etav leun ne vern pagement o tenned diouti.

(4) Lir : Unan eus pennoù bras an De Danann a zo managet ar memes diinennad. Tad eo da Vanann, roue ar mor, Mansouezan a Kembra.

(5) Milead : Ar pempvet rummad alouberien a voe mibien Milead. An De Danann a voe trec'het ganta en emgann Tailtenn. Mibien Milead eo a voe gouzdataoù Iwerzhoniz bremañ.

-0--0-

gein. Sede ma welas ur brezelour e vlew melen rodellek, nevez-lamet e varv gantañ, war ur jav melen, hogen glas adal lein e zivhar a-drañv ha pennoù e zhaoulin betek en traoñ. En-dro d'ar marc'hag ur sas seiz melen, gwriet gent neud seiz glae; ouzh e gorn-klun ur c'hleze, dornell-sour, dezhañ ur gouin ler Kardova nevez, ul lerenn demngen, outi ur boukl sour. Bez' ez oa gantañ war-c'horre, ur vantall seiz melen, gwriet gent neud seiz glas, ha glas ar bevennoù anezhi. Kement tra glas e gwiskamant ar marc'hag hag a varc'h a an ken glas ha deil ar sapt, hag ar melen anezho ken melen ha bleunioù ar balan.

3.- IZOG KORZ PREDEN

Ken brezelgar e weljont ar marc'hag ma krogas son enno hag i ha tac'hout. Redek war o lerc'h a eure ar marc'hag. Pa gase ar marc'h e alan er-maez e pellau an dud-mañ dioutañ ha pa denne e alan e tedostaant ivez betek bruched ar marc'h. Pa voent tizhet gent ar marc'hag e c'houlennjont gantañ e druvez.

- Hag ho pezo, ez laouen, emezañ, hag arabet keout aon.
- A Aotrou, peogwir ec'h eus bet truez ouzhimp, ha lavarout a ri dimp piv out ? eme Ronaboe.
- Na guzhin ket buzhit va gouenn : Izog mab Menio. Hogen na deo ket dre va anv on an anavezatañ, dre va lesanv kentoc'h.
- Ha lavarout a ri dimp da lesanv ?
- Hag e rin : Izog Korz Preden (Rouetl Breizh-Veur) am galver.
- A Aotrou, eme Ronaboe, pe dre abeg az anver-te evelse ?
- Lavarout a rin dit perak. Bez' ez oan, en emgann Kamlan unan eus ar gannaded etre Arzhur ha Medreud, e niz. Un den yaouank pennadus oa ac'hanon neuze. Ken c'hoantek oan d'ar c'hrogad ma lekais trouz strezo. Sed amañ penaos e ris kement-se : pa'm c'hese an impalaer Arzhur davet Medreud evit degas duzhañ da goun ez oa tad-magar hag eontr dezhañ, ha goulenn ar peoc'h gent aon na vefe lazhet mibien roueed hag uhelidi Enez Vreizh, decout da Arzhur da gemann din ar c'homzoù bravañ ma c'halla, e kemennan-me ar c'homzoù-se ar c'hwezvañ ma c'hell da Vedreud. Ha diwar se eo e voe graet ac'hanon Izog Korz Preden. Ha sede penaos e voe iriennet emgann Kamlan. Koulskoude, teir noz arak diwez ar emgann Kamlan, o c'huitais evit mont da Lec'hlas a Preden da ober pinienn. Hag eno e chomis seizh vloaz evel penadour ha trugerez e voe ouzhin."

4.- RUON PEBR.

Neuze sede ma klevjont un trouz kalz gwashoc'h eget an hini kentañ. Hag i ha sellout war-du an trouz ha gwelout ur gwaz yaouank rouz hep barv no mouzenn, doare priñsel dezhañ, war ur pikol marc'h ruz. Adal penn an divskoaz, avat, diouzh un tu ha pennoù an daoulin diouzh un tu all ez oa melen. Hag en-dro d'ar

marc'hag ur gwisk e suizh ruz, gwriet gent neud seiz melen, ha melen ivez bevenn e zilhad. Kement a oa melen eus a varc'h hag a wisk a oa ken melen ha bleun ar balan ha kamant a oa ruz anezho ker ruz hag ar gwad rusañ ar bed. Ha neuze sed ar marc'hag ha tizhout anezho hag o c'houlenn gent. Izog ha led en defe eus an dudigoù-se gantañ.

- Al lod ma tere ouzhin roñ e roñ : bezañ konail dezho evel m'oa-ma bet.

- Ha neuze ar marc'hag ha mont kuit.
- Izog, eme Ronaboe, piv oa ar marc'hag-se ?
- Ruon Pebr, mab ar roue Dearzhac'h.

5.- KAMP ARZHUR

Hag i ha kenderc'houl da vont a-drouz da gompenn vras Argengroeg stre-zek Red ar Groez war Havren. War-dro nav c'hant gourhadad diouzh ar Roudouz, e bop tu d'an hent e weljont tinelloù, taltoù, ha maskadeg un armead vras. Dogouezhet war c'hlanñ ar roudouz, sede ma werzjont Arzhur en e goeaz an un enezenn gompenn en-dias d'ar roudouz, diouzh un tu dezhañ an eskob Botwin ha diouzh un tu all Gwarzhegit mab Kaw. Un duard yaouank 'oa en e sav dirazo, gent a gleze fourist en e zorn. Ur sas hag ur boned du-pod dezhañ, ha ken gwenn ez oa a zremm hag askorn olifant ha ken du e ziv-abrent hag ar jed. Ne wela den tra eus e arzorn, etre a vanegoù hag e vilginoù, ha na ve gwennoc'h eget al lili ha tevoc'h eget ufern ur brezelour. Ha neuze Izog ha dent gento direk Arzhur hag e saludañ.

- Doue a rioio mad dit, eme Arzhur. Pe du, Izog, ec'h eus-te kavet an dudigoù-se ?
- O c'havet em eus, aotrou, uheloc'h war an hent.
- Sede m'en devoe an impalaer ur c'hweziv a vcauc'hoarzh.
- Aotrou, eme Izog, perak e c'hoarzhaz-te ?
- Izog, eme Arzhur, n'eo ket c'hoarzhin eo a ran, nemet un drouz eo gent e ve tud ken dister o tiwall an enezenn-mañ, goude bezañ bet diwallet gent tud ken met.

Neuze e lavaras Izog :

- Ronaboe, ha gwelout e rez ar bizou hag er maun ennañ war zorn an impalaer ?
- Gwelout a ran, emezañ.
- Unan eus galloudezhioù ar maen eo ma talc'hi koun a gement ec'h eus gwelet henozh; mar n'ez pije ket gwalet er maen ne vije deut da goun dit netra eus an dro-mañ.

6.- AZAON MAB TELESIN

Goude se e welas ur strollad o tont war-du ar roudouz.

- Izog, eme Ronaboe, da piv an arme-hont ?

- Keneiled Ruon Pebr mab ar roue Deorzac'h eo ez int. Buz' e c'hall an dud-se kaout da enor mezeglen ha bragod⁽⁵⁾ hag ober al lez da varc'hed roused Enez-Vreizh hep ma ve kavet abeg enno ha dellozek int a gement-se, rak e pap enkadenn e taont er penn arak hag er penn a-drañv.

Ne welad liv all ebet na da varc'h na da zen eus ar strollad-se nemet ruz evel er gwad. Bep gwech ma pellae unan eus ar varc'heien diouzh an arme, ez eo evel pa ve ur post tan o vont dre an aar. Hag ar strollad-se da evel tinelloù uhaloc'h eget ar roudouz.

War gement-se e weljont ur strollad all o tont etrezek ar roudouz. Adal ar c'hrommellennou-dibr diouzh an nac'h ar mirc'hed a oa ken gwenn hag al lili hag aless d'an traoñ ken du hag er jed. Sede ma weljont ur marc'hag o tiareogif hag o kentraouif a jav ar roudouz ma strinkas an dour ouzh Arzhur hag an eskob ha kemant hini a oa e kuzul ganto ken a voent ken glebiet ha ma vijent bet tennet diouzh ar stâr. Hag evel ma troe penn d'e varc'h a skoas an den yaouank, a oa en a sav dirak Arzhur, war o fronelloù d'ar jav gant ar c'hleze feuriet ken a vije bet ur souez, ma'n dije skoet gant un direnn, bezaf chomet hep glozaf gwashoc'h pe gig pe askorn.

Hag ar marc'hag ha tennañ e gleze betek hanter ar gouin ha goulenn outañ !

- Perak ec'h eus-te skoet ve marc'h-me ? pe zimegafia pe ali eo evidon ?

- Da ober ez pos eus un ali. Pe stultenn a eure dit marc'heket ken taer ma'z eo strinket dour ar roudouz ouzh Arzhur, an eskob santel hag o c'huzulieria ha ma oant ken glebiet hag o vezaf tennet diouzh ar stâr ?

- Han degemer a zen evel un ali.

Hag ar marc'hag ha trañf adarre penn d'e varc'h war-du e arme.

- Izog, eme Ronaboe, piv ar marc'hag-mañ ?

- An den yaouank a reez anezhañ ar sevenañ hag ar fuzañ au- en unezann-mañ, Azaron mab Telesin.

- Piv eo an hini a skoas gant ar marc'h ?

- Un den yaouank taer ha buanek : Elfin, mab Gouezno.

7.- KARADOG VREC'HVRAS

Neuze e lavaras un dremm geer a zen balc'h, dezhañ ur giz-pezug halaver, disocouzen, ez oa ur marzh dorc'hel un armead ken bras en ul lec'h ken strizh, hogen ez oa, d'e veno, marzhusoc'h c'hoazh e ve amañ d'ar c'houlz-mañ tud hag o doa lavaret bezaf en emgann Vazon⁽⁶⁾ a-benn kreisteiz da stoum ouzh Dala Gontellveur.

- Dilenn-te, emezañ, pe korzhout a ri pe na ri ket. Me a gerzho !

- Gwir a lavarez, eme Arzhur, korzhomp ni ivez a-gevret.

- Izog, eme Ronaboe, piv ar gour a gomzas ouzh Arzhur en un doars ken eston ha ma reas hemañ ?

- Ur gour hag a c'hellfe komz outañ ken disocouzen ha ma karfe : Karadog Vrec'hvras, mab Lir Mauni, penguzulier ha kendriv dezhañ.

War gement-se e kemeras Izog Ronaboe war dalier o varc'h hag e loc'has an armead vras-se, pep baged en e lec'h, etrezek Kein Digoll.

8.- TUD MARC'H HAG EOERN

Goude degouezhat e-kreiz roudouz an Havren, e troas Izog penn d'e varc'h hag e sellas Ronaboe ouzh traonienn ar stâr. Sede ma welas douz strollad o tont gorrak war-du ar roudouz. Unan anezha oa gwann-skedus, ur vantell swiz gwenn en-dro da bep den anezhañ gant bevennoù du-pod; adal pannoù o daoulin ha lein o divhar ar mirc'hed a oa du-pod hag a-hand-all damenn; o arouzinti a oa gwann-kann ha beg pep-unan du-pod.

- Izog, eme Ronaboe, piv an arme gwann-kann-hont ?

- Tud Lec'hlen eo ar re-se ha Marc'h⁽⁷⁾, mab Neirc'hon, a zo ar penn anezho. Kendriv eo da Arzhur.

War gement-se e welas ur strollad, gwisket a du-pod pep-unan anezhañ ha bevennoù pep mantell gwann-kann; adal lein o divhar ha pannoù o daoulin ar mirc'hed gwann-kann ivez, hag o arouzinti du-pod, gant ur bag gwann-kann da bep hini.

- Izog, eme Ronaboe, piv ar strollad du-pod-hont ?

- Tud Denmark, hag Edern, mab Dudd, ar penn anezho.

Pa dizhjont an arme, ede diskennet Arzhur ha kadorien Enez ar Gadorz kalz izeloc'h eget Kaer Vazon. Gant an hent ma karzhe Arzhur e soblante da Ronaboe korzhout ivez gant Izog.

9.- KEI

Goude diskennet a-ziwar varc'h e klevs trouz bras ha safar gant an arme. An dud a oa e kern an armead a zistroe d'ar c'hreiz hag ar re a oa er c'hreiz d'ar c'hern. War gement-se, sede ma welas ur marc'hag o tont, ur roched-houarn en-dro dezhañ ha d'e jav, ken gwenn al lagadennoù anezhañ hag al lili, ha ken ruz an tachoù anezhañ hag ar gwad rusañ. Marc'hakaat a rae dre greiz an armead.

- Izog, eme Ronaboc, daoust ha war dec'h emañ an armead dirazon ?
- Biskoazh n'eo bet an impalaer Arzhur war dec'h, ha ma vija bet klevet er c'homzoù-se az kanou, a vijes un den marv. Ar marc'hag a welez ahont a zo Kei; bravañ den a varc'heka e lez Arzhur eo Kei. An dud e kern an arme a heñt afo d'ar c'hreiz evit sellout ouzh Kei o varc'hekaat hag ar re a zo er c'hreiz a dec'h d'ar c'hern gant son da vezañ glozet gant ar jav. Sed aze an ebeg da vesk an armead.

10.- KADOUR KONT KERNEV

Neuze e klevjont hopal war Gador kont Kernev ha sede heñt o sevel gant kleze Arzhur en e zorn, skeudenn div naer aour war ar c'hleze. Pa denned hemañ diouzh ar feur, aval daou flamm tan a waled o tont diouzh genou an nared hag ses n'oa ket da rikun sellout outañ, ken mezvennus ez oa. Ha sede neuze an arme ha gorregeñ hag ar safar o tevel. Hag ar c'hont en-dro d'e deltenn.

- Izog, eme Ronaboc, piv oa ar gour a zougas a glaze d'arzhur ?
- Kadour, kont Kernev, an hini a dle gwiskañ e armoù d'ar roue da zeiz kad hag emgann.

11.- AR C'HOARI GWEZBOELL

Kerkent goude e klevjont hopal war Eirenwec'h Amhebin, maval Arzhur, den ruz garv, dic'hrad e zore, mourennoù ruz dezhañ, houpet ar blev anezhe. Sede heñt o tont war ur pikol marc'h ruz, rannet e voue a bep tu d'e c'houzoug, ha warnañ ur pezh bes keer. Diskenn a eure ar maval dirak Arzhur ha tennañ diouzh ar bes ur gador aour hag ul lenn seiz marallt hag he displegeñ dirak Arzhur. Un aval aour ruz oa e pep korn anezhi. Ar gador a lekane war al lenn; kement lenn hag gador ma c'hella tri brezelour armet-holl azezañ warni. Gwenn oa anv al lenn hag unan eus he gallouderzhioù oa heñt : an hini a c'hronnod enni, den n'e wale hag heñt a wale an holl. He vize al lenn liv all ebet marse nemet ha hini heñt unan. Azezañ a eure Arzhur war al lenn, Owen, mab Urian, un u sav direzañ.

- Iwen, eme Arzhur, ha dont a rez da c'hoari er gwezboell ?
 - Hag e rin, Aotrou, eme Owen.
- Hag ar maval ha cegas er gwezboell da Arzhur hag Owen, aour ar warin anozhi ha, arc'hant an daolenn c'hoari. Hag u stagjont gant ar c'hoari.

12.- BRINI(B) OWEN

P'edont en o gwellañ gant ar c'hoari, stouet a-us d'ar gwezboell, sede ma weljont o tont, diouzh un deltenn wenn, penn-ruz, gant skeudenn un naer du-pod war he gorre, ruz-bev binimus an daoulagad en he fenn hag he zoad ruz-tan, ur floc'h yacouank, blev melen rodellek, glas e zaulagad, nevez-lamet a varv gantañ, e seiz melen ses ha paitok en-dro dezhañ, ur re loeroù mezh ar tanav melen-glas en e dreid ha war-c'horre ur re votoù ler Kordova marallt gant kloc'hedoù aour d'o c'hlozañ war choug e dreid. Santañ ur c'hleze, dornell aour, ponnar, tairdremm, ur gouin ler Kordova du dezhañ, gant ur soc'h aour ruz digemmesk ouzh ar penn anezhañ, e teuas betek al lec'h m'edo an impalaer hag Owen o c'hoari ar gwezboell. Hag ar floc'h he saludif Owen. Souezhot a vou hemañ gant ar floc'h ouzh e saludif hep ober komend-all d'an impalaer Arzhur. Ansaot a eure Arzhur pe soñj a oa e spared Owen hag heñt ha lavarout dezhañ :

- Ne da ket da vezañ souezhet dre ma'z eo ta e salud ar floc'h bremañ; va saludet en deus ergentaou; hag ouzhit eo an deus da ober.
- Ha neuze ar floc'h he lavarout da Owen :
- Aotrou, daoust ha gant da aotre-ta eo emañ mevalien vihan Arzhur hag e floc'h o hegasañ, o heksañ hag o feazhañ va vrini ? Mar ne deo ket gant da aotre, laka an impalaer da virout outo..
- Aotrou, eme Owen, klevout a rez a lavar ar floc'h ? Mar deo da ganaz, pella anezho diouzh va brini.
- C'hoari da c'hoari, emezañ.
- Ha neuze ar floc'h ha mont en-dro war-du an deltenn. Kas da benn an teol-se a rejont ha stagañ gant an all.
- P'edont war-dro hanter ar c'hoari, sod emañ un den yacouank, flamm e liv, damrodellek e vlev du, legedek, nourist keer, nevez notennet e varv, o tont diouzh un deltenn melen-aour, gant skeudenn ul leon ruz-tan war al lein anezhi. Bez' un doa en-dro dezhañ ur sez seiz melen betek e zoad ufer, guriat gant neud seiz ruz, hag en e dreid ur re loeroù bougaran⁽⁹⁾ gwenn tanav ha, war-c'horre al loeroù, ur re votoù ler Kordova du gant boukloù alscuret warni; ur c'hleze bras ponnar, tairdremm en e zorn, dezhañ ur feur heizergen ruz gant ur soc'h alscuret, e teuas d'al lec'h m'edo Arzhur hag Owen o c'hoari ar gwezboell he saludif hemañ. Droug a savas an Owen dre ma eo saludet heñt e-unan, Arzhur, avat, ne gavas ket gwashoc'h dezhañ eget kent. Hag ar floc'h he lavarout da Owen :
- Daoust hag an desped dit eo emañ floc'h an impalaer e vouchañ da vrini, o lazhañ lod hag o feazhañ lod all ? Mar deo an desped dit, ped-hañ da virout outo.
- Aotrou, eme Owen, mir ouzh da dud, war deo da ganaz !
- C'hoari da c'hoari, eme an impalaer.

sour, skedus teirdremmet, gouriz ar c'hleze e mezher sour melen, ur boukl
waznañ en abrentoù morvarc'h du-pod, un deodenn sour melen war ar boukl. Un
tokarn skedus war benn ar marc'hag, en orjel Bro-Spagn hag ennañ ur maen
strink lugernus; war gribell en tokarn skeudenn ur grippi bras, ur maen strob-
inellus en e benn. Ur goaf, e fust on kreñn, en a zorn, livet e glas-pers,
nevez enwedet ar penn anezhañ, ha kinklet ar fust gant arc'hant digemmesk.
Hag ar marc'hag ha dont konnaret holl d'al lac'h m'edo Arzhur ha lavarout o
dos ar brini lezhet e goskor ha mibien uhelidi an enezenn ha goulenn gantañ
lakaet Dwen da virout ouzh e vrini. Hag Arzhur neuze ha goulenn ouzh Dwen
herzel e vrini hag e waskas ar worin aour a oa war an daolenn ken o bruzunas
holl. Hag e c'houlennas Dwen ouzh Gwers mab Reget gouzizañ ar banniel. Gouzizet
e voe ha kerkent e voe peoc'haet pep tra.

Neuze e c'houlennas Ronaboe ouzh Izog piv oa an tri den kentañ a zeus
daveit Dwen da lavarout dezhañ edod o lazhañ e vrini. Hag ez eilgerias Izog :

- Tud, droug enno gant kolloù Dwen, kenbennoù ha keneiled dezhañ :
Selif mab Konon Garwen aus Fowis, ha Gougaon Klezeruz ha Gwers mab Reget, ar

gour a zoug a vanniel da zuiz kad hag emgann.
- Piv, eme Ronaboe, an tri gour diwezhañ a zeus davet Arzhur da gemenn
dezhañ edo ar brini o lazhañ a dud ?

- Ar wezed wellañ ha kalonekañ, eme Izog, ma'z eo ar c'hweverfa gantañ e
rafe Arzhur koll ebet : Blazhaon mab Mourhezh, Ruaon Pebr mab ar roue Deorzhaç'h
ha Heveiz Unlenn.

13.- AN ARZAV-BREZEL

War gement-se sede pevar marc'hag war-nugent o tont e-borzh Dala Kontell-
veur da c'houlenn gant Arzhur un arzav-brezel ur miz hanter. Hag Arzhur neuze
ha saval da vont da gemer kuzul. Mont a sure war-du al lac'h m'edo un den bras
duerd, rodallek a vlev, nepell dicoutañ. Hag eno gervel d'e gaout a guzulieta an :
an eskob Setouin; Gwarzhegit mab Kaw; Marc'h, mab Meiro'haon; Karadoq Vrac'hvras;
Gwalc'hmei mab Gweaz; Edern mab Au; Ruaon Pebr mab ar roue Deorzhaç'h; Riogan
mab roue Iwarzhon, Gwerwennwin, mab Nav; Hoel mab Emer Ledao; Gwillm mab roue
Bro-C'hall; Danet mab Gzh; Gorou, mab Kustennin; Mabon mab Kadarn; Gebros, mab
Paladr Hir; Heveiz Unlenn; Touz'h mab Perif; Nezzh mab Kadarn; Gebros, mab
Ec'hel Vorzed-Toull; Gweiz, mab Gwestal; Adwy mab Gerant; Drestan mab Tallouc'h;
Morien Maneog; Granwen mab Lir; Lac'hou mab Arzhur; Lanvrouz Varveog; Kadour,
kont Kasnev; Morven, Eil Tegit; Reoad Eil Morgant; Devez, mab Alun Deved;
Gouzhir Gwelstel lezheaz; Azson, mab Telissin; Lara, mab ar roue Kasnar; Fleudir
Flam; Graidiaol Galldoved; Gilbert, mab Katgevro; Menw, mab Teirvweaz; Gourzh-
moul ar Roue; Kaourda, mab Karadoq Vrac'hvras; Gildaz mab Kao; Kaderieizh mab
Seidi; hag e-leizh a dud Lac'hlan ha Dermark; ha kalz a dud a Vro-C'hvras a-garret

gantañ. Un toullad tud aus an arme a zeuas ivez d'ar guzulietaeg-se.

- Izog, eme Ronaboe, piv an duard ma tujad betek ennañ bremaik ?

- Run, mab Maelgoun a Wenez, gour m'az eo e wir e taufe an holl da
guzulieta gantañ.

- Penaos ez eo bet galvet, e kuzul tud a gen uhel dere hag ar re-hont,
un den ken yaouank ha kaderieizh mab Seidi ?

- Dre ma ne deus o Breizh gour ken talvoudus an ali anezhañ hag e hini.

Ha sede neuze barzhed o tont da gantañ ur ganenn da Arzhur. Ha na oa den
hag a gomprenfe ar ganenn-se, estroget Kaderieizh e-unan, nanet ez eo ur meul-
gan da Arzhur.

War gement-se sede pevar azen war-nugent o tont gant o sammoù sour hag
arc'hant, un den skuizh-divi gant pep unan anezho; o tegas da Arzhur tzuaj
enezennoù Bro-C'hvras. Neuze e c'houlennas Kaderieizh mab Seidi ma vije roet
da Dala Gontallveur un arzav-brezel ur miz hanter, ha d'ar varzhed an azen a
oa deut gant an tzuaj hag ar sammoù anezho eval gopr-chomadenn; ha da zibenn
an arzav paeañ o c'hanannoù dezho. Sede a voe divizet.

- Ronaboe, eme Izog, daoust ha ne vije ket bet ur gaou mirout, ouzh un
den yaouank en deus roet un ali kan brokus, da vont o kuzul o sotrou ?

Ha neuze Kei ha sevel ha lavarout :

- Piv bannak a venno mont da heul Arzhur, bezet fenezh e Kernev gantañ.
Piv bannak ne fello ket dezhañ, bezet enep Arzhur betek dibenn an arzav-brezel.

Ken bras tourni a savas ma tihunas Ronaboe. Ha pa zihunas edo war ar
c'hroc'hen leue melen, goude kousket gantañ teir nozvezh ha tri devezh.
An danevell-mañ e reer anezhi Hufvire Ronaboe. Ha sed ennañ puzak ne oar
den, na barzh na danevellour, an Hufvire hep levr : abalamour da niver al livioù
lias-douere hag espar a oa d'ar mir'hed(12), d'an armoù ha d'an harzoù, d'ar
mentell prizius ha d'ar main strobinallus.

troet diwar ar c'hembrog-krunn gant
Abozan (Gwalarn, n.13, 44-53)

NOTENNOU
=====

- (1) Hufvze Ronaboe a zo ur gentadenn savet war-dro an 12vet kantved, an amzer Madag, mab Marediz, roue Powis. - Kembre oa anezhi en amzer-se Gwynez (an Hantnoz), Dehauberzh (ar C'hreisteiz) ha Powis ar reter-kreiz d'an div lodonn-se.
- (2) pranteulu, ar penntiegezh a oa anezhaf an den a rank uhelañ goude ar roue. Soñjal er gallez : mair du palais, pe majordome.
- (3) cymmwd, ar c'hombod a oa ur rann eus ar c'hentrev. En 12vet kantved, Gwynez oa anezhaf 12, Powis 6, Deheu 29 kantrav.
- (4) gocchu latin a zeu d'ar c'hembraeg coch (Y Odraig Goch = an Aurouant Ruz). Ar brezhoneg ruz, a gever ivez e kembraeg. Kv. Gougaon Klezeruz.
- (5) brauawt, ar "bregod" a oa un evez graet diwar heiz, dour ha mal.
- (6) Bedan : emgann menez Vazon a voe anezhaf e 493, hervez Bede. Un teol herz efedus a voe da argadennoù ar Saqon ouzh Breizh-Veur.
- (7) March e zo pried Izold hag eontr Tristan, Trestan.
- (8) Brini Owen. Meneg a ruz eus Branes Owain, Strollad brini Owen a dibenn danevell Owen ha Lunet (Gwalarn, niv. 30).
- (9) hwrcen, ar hougaran a oa un doare lien reut.
- (10) Iwtne, anv ur ger a Gerne-vour.
- (11) syndal, ar "candal" oa anezhaf un danvez seiz, ruz peurvuiañ.
- (12) Ur pennad eus an Notennoù, IX, p.240, a gomz eus ar c'hiz da liveañ ar c'hezeg en Iwerzhon un amzer 'voe. Levezon danevellierion Iwerzhon a zo anet e-hand-all war Hufvze Ronaboe.

-0-

PEZHIOU - C'HOARI
=====

A-hell'zo eo douget ar Vrotoned d'ar c'hoarive. Ar pep buhezkañ eus hol lennegezh eo hor pezhioù-c'hoari. N'eus ket kalz anezho da vezañ bet an-bannat hag an dornskridoù, skignet e nousep levracoug, n'int ket bet lennet gant a-walc'h a basiañted hag un akad pannaek. N'eus forzh penedo, avat, na zure ket seurt trajediannoù hir ouzh hon amzer. Ha koulskoude, koulz e Bro-Wened gant Job ar Gifan hag a gouelioù ar Bleur-Brug, amañ hag ahont, e kendalc'hed da ziskleriañ pezhioù enno arvestoù niverus, alies re halavar, hag a c'houlenne strolladoù c'hoarierien diaes da vodañ ha da zaskia.

En am c'houlenn a reer ha soñjal a rae e gwirionez el laurenn c'hoari Malmenche pa save Gurven ha Jakez Riou pa roas dimp Nomeneg-De ! Ha pedal ha Gwren an Toer a c'hall bazañ diskleriet gant daou ha pemp c'hoarier.

Adel en derou en deus klasket Gwalarn merkañ spis an hent a oa fur da gomer e brio ar brezhoneg en amzer-vremañ. Ha skouerioù a zo bet kemeret dreist-holl digant Kalted Tremor. Meneget eo bet lod anezho e-touez an troidipezhioù. Kentañ pezh a savas Roparz Hemon war ar patron-se a voe Lina e 1925 hag Un Den a Netra e 1927. Langleiz a embannas an Div Zremm e 1933. Maevann, Youann Brezon ha Jakez Konan o deus ivez en amzer Roazhon-Breizh savet pezhioù a-seurt-se. Jari Priel, bet dinden levezon c'hoarive Dullin ha Jouvet (a ranke keout tri arvest evit sevel un abadenn) a zo deut koulskoude da greskiñ niver hor pezhioù c'hoari a c'houlenn un niver bihan a c'hoarierien ha nebeut a viroù kinkladur. Kavet e vo amañ war-lerc'h tri fezh-c'hoari berr a ziskouez pa zoure obazonnoù a c'hall derc'hel pe gentoc'h reiñ buhez d'hor c'hoarive dre na ne verniant ket ar skoilhoù a bep seurt dirak strolladoù n'eus ket anezho tud a vicher.

Deut eo ouzhpenn ar skingomz da zigriñ un dachenn nevez d'hor saverien pezhioù-c'hoari. An tri fezh a roomp a zo bet skignet a zeur gant Roazhon-Breizh. Div anezho zoken e zo bet savet a-ratozh evit ar radio. Aas e vo d'al lennerion merzout ez eo kalz bihanoc'h enno (egset en ail) lodenn ar justroù, graet evit an deoulagad.

(Hiroc'h e vo kavet en Istor... diwar-bann ar pezhioù-c'hoari berr savet gant hor skrivagnerion a-vremañ.)

A R Z A R C'HOARIVA

(...) Ne fell ket din lavarout petra e tle bezañ ur pezh mat. Kaur am befe klask, ne vefen ket gouest d'herf ober. Pezhioù-c'hoari mat e zo, ha pezhioù-c'hoari fall. Netra ken. Ha da sevel ur pezh mat e ranker bezañ donezonet-dreist, pe neuze bezañ lennet, ha gwelet, ha studiet pezhioù mat, ken na zeuer da heugañ rak kement a zo fall hag izelbriz.

A dud donezonet-dreist, n'hon eus ket re, ha gwelloc'h eo taval warno. Lenn, avat, ha gwelout ha studiañ pezhioù-c'hoari mat, sed a c'hallomp holl ober. N'eo ket da sevel diwarno eil-skeudonoù treut ha diwirion. Hogen da gavout hepken ar vuhez a zo enno.

*

Bremañ, an neb a skriv avit ar c'hoariva, - mar fell dezhañ da vihanañ me vo c'hoariet e bezhioù, - a dle soñjal ez eo heñvel e vicher ouz hini ur saver-tiez, ha disheñvel diouzh hini ur saver-huñvreoù.

Perak sevel pezhioù, enno pemp pe c'hwec'h "arvest", tenn da zeskñ, skuizhus d'ar c'hoarierien kenkouls he d'an arvesterien ? Perak lekaat enno un niver bras e c'hoarierien, dises da gavout, dises da zestum dez ar c'hoari, a vo koustus o gwiskañ holl, hag a vo fall, hep mar ebet, en darnvuiañ anezho ? Ha ne gomzen amañ c'hoazh numut eus hon dienez ha peourontez hor goevredoù. Perak avat, sevel pezhioù-c'hoari hir, pe n'ouzoc'h ket hen ober ?

Fur e vefe da gentañ, - hen lavaret em aus alins, - tremen gant pezhioù berr, aes da stummañ, aes da c'hoari; enno pemp pe c'hwec'h c'hoariar d'ar vuiañ; pezhioù marc'had mat d'an neb o c'hoari, - hag e vo marteze, prizius o pep l'arvor all.

Peseurt pezhioù, he diwar-bonn petra ? Na ouzon ket. Treoù e raio plijadur : plijadur d'ar selaouerien, hag - eus amañ an dalc'h, - plijadur d'an oberour.

Roques Nounou (Gwalarn, Gwalv, 1926)

UR BUGEL A ZO GANET

Mister Nedelec a deou arvest
(C'hoarist evit ar wech kentañ e Roazhon-Greizh)

(24-XII-41)

Tud ar c'hoari :

Biel, un den kozh
Tina, ur vaouez kozh
Tujen, un dan yaouank
Janed, ur vaouez yaouank
Lola
An Dan

ARVEST KENTAN

En unan eus fabourziou Brest, e penn pellañ ur stroad hanter-echu, etru
kêr hag ar maeziou, ez eus un ti bihan nevez, heñvel-mik ouzh an tiez a c'heller
gwelout e-vil-vezn en-dro d'ar c'hêrioù bras.

Noz eo. Brumoniñ e ra. Ur gambr en ti-se a zo sklerijennet. Bez' e talv
da gegin he da sal-dobriñ war un dro. An arrebeuri a zo, lod anezho, eus ar
suurt a c'heller prenañ er stalioù bras n'eus farzh e pelec'h dre ar bad-holl.
Lod all a zo arrebeuri a c'hizh kozh, bat gwechall hep mar an ti-faurm war
ar maez.

Un den kozh a zo azezet en ur gador-vrec'h e-tol ar fornaz. Emañ a vutuniñ.
Ur wech an amzer e ra war-dro an tan.

Ur vaouez kozh gwisket hervez giz Bro-Leon, a zo e vont-dont dre ar gambr.
D'trasañ an daol emañ.

-0-

-0-

Tina - Poent eo dezho dont en-dro eus ofereñ ar Pallgent. An dud yaouank na
soñjont ket kalz en dud kozh. Abaoe nav eur emeon o labourat. Me a
lavar dit em bije kavet gwoll mont d'am gwela.

Biel - Te ivez, Tina, e gara mont gwechall da c'haloupat.

Tina - N'eo ket me da vihanañ em bije lezet va mamm da c'hortoz, ha da derrañ
he c'hein oc'h ober er gegin. Met bremañ, an dimezelled a ra pezh a
blij dezho.

Biel - An dimezelled ? Dimezet eo Janed moarvat.

Tina - Ya, dimezet eo. Ha n'eo ket o timeziñ he deus kavet er skiant. Me a
gave din e oa Tujen ur peotr fur. Bremañ e welañ na ra nemet sentañ
ouzh e wrag, hag e teu da vezañ sotoc'h egeti.

Biel - Priedoù nevez ! A-boan dimezet ! Evidomp-ni, dimezet omp abaoe deou-
ugent vloaz, hag atav e sentan ouzhit, n'eo ket gwir ?

Tina - Ya, chom azezet war da gador eus ar mintin betek an noz, ha lezel
oc'hanon d'az servijañ evel pa vijes ur bugel.

Biel - Te 'oar, gant ar remm...

Tina - O, ar remm ! Me em eus remm ivez, ha ne glemman ket, hag e ran va
labour heñvel. Panevedon, an ti-mañ a vije gwashoc'h eget ur c'hraou-
moc'h, pever den annañ o louzañ, hag unan hepken o nastaat.

Biel - Ober a rez da labour, Tina, mat evit klemm, na rez nemet an dre-se eus
ar mintin betek an noz, hag alies eus an noz betek er mintin.

Tina (hep seiñ) - Teir loa ! N'eus mui nemet teir loa en dirutañ... Petre
'ra Janed gant al lozioù ? Pa'z eus div vaouez en un ti, ha deou war
ouzhpenn, den ne oar morse da balec'h ar a an traoù. (Furchal a ra e
pep korn eus ar ganastell). Ya, poent eo da Janed mont kuit da lojañ
en un ti all gent he gwaz. Neuze n'o devo ket komant e amzer da fringal,
hag e c'hallin diskuizhañ un tammig e fin va buhez.

Biel - Lez en dud yaouank, Tina, da gemer o flijedur. Amzer o devo tapred da
labourat. Digarez o devo atav d'en em chalañ. Daoust ha droug e zeont
o vont da ofereñ ar Pallgent ? Gwashoc'h a c'hallfent ober da dremen
nozvezh Nedelec.

(An noz, a sko en diavaez, e zigor simulik. Ur plac'h yaouank ugont
vloaz a lake ha fenn e-barzh ar gambr.)

Tina - (imoret)- N'out ket aet da gousket, te ?

(Ar plac'h a van difiñv, ur mousc'hoarzh iskis war he dramm.)

Tina - Ma n'out ket aet da gousket, deus tre. Na lez ket an nor digor d'ar pevar avel da dremen da sklesañ ac'hanomp betek mel hon eskern.

Biel - Deus tre, Lola, deus da azezañ e-tal ar fornez. Ur gouign ez pa mar deut fur.

(Ar plac'h ne flach ket en disterañ)

Tina - Dont a ri tre, pa ne ri ket ?

Lola - Ne felle ket deoc'h lezel Lola da vont da oferenn ar Pellgent. Tujeñ ha Janed a zo aet, ha ne felle ket dezho kemer Lola kennubout.

(Dont a ra tre er gembz. Azezañ a ra war ur gador e-kichen Biel. Hemañ a grog en he daouarn)

Biel - Tina, yen-skorn eo he daouarn da houmañ. Da belec'h eo aet adarre ?

Lola - Chomet on e-tal ar prenestr da selaou ar c'hleier, pa ne felle ket deoc'h ve lezel da vont d'an oferenn. Met n'em eus klevet netra. Neuze on aet war an hent.

Biel - He dilhad a zo gleb-teil.

Tina - Ha dont a ra gent he botoù leun-fank da vastarñ din va flañchod. Ma hag e zo bet a koerañ anezhañ darc'hent deoc'h.

Lola - Aet on war an hent. Gwellet em eus ar pezh n'hec'h eus gwelet biskoezh. Ar pezh n'o deus ket gwelet ar re a zo aet d'an iliz. Ar pezh o dije tud pinvidik roet kalz arc'hent da welout.

Biel - Tamm dezhi ur banne laezh, Tina. Hemañ o verzal gent ar riv. Ret eo dilwall na gouezhe klafv avel warlene.

Lola - Gwellet em eus un den.

Tina - Un den ? siwazh va Jezuz !

Lola - Un den en deus komzet ouzhiñ.

Biel - Dav e vije bet dit prenañ dor an treañ, Tina.

Lola - Un den en deus komzet ouzh Lola.

Tina - Pesoux den ?

Lola - Me a oar piv eo an den-se.

Biel - Un amezeg moarvat ?

Lola - N'oa ket un amezeg.

Tina - Un den o vont d'an oferenn ?

Lola - N'ado ket o vont d'an oferenn.

Biel - Klasket en deus ober droug dit ?

Lola - N'en deus ket klasket ober droug din. Me a oar piv eo an den-se. Pensaos en dije klasket ober droug din ? An den-se a zo ur sant bras. An den-se a zo Sant Jozeb.

Biel - Ya, ya.

Lola - Edo gent ar Werc'hez Vari. Met Lola n'ha deus ket gwelet ar Werc'hez Vari. Ar Werc'hez a oa chomet pelloc'h e-tal ur bed spezn. Sant Jozeb a zo deut d'am c'haout. "Plac'h yaouank, amezañ, dre drouez, deut da reiñ sikour d'am gwreg a zo klafv ha tost da gant ur bugel. Skuizh eo o vale. N'hell ket mont pelloc'h. Estrenien omp. N'anevezomp den dre amañ ha n'hon eus ket a arc'hant."

Biel - Ha petra ac'h eus respontet ?

Lola - Lola a oa re souezhet. N'ha deus respontet netra. Neuze Sant Jozeb a zo aet pelloc'h e-kreiz an defvalijenn.

(Tina a zegas ur banne laezh tomm da Lola.)

Tina - Ev ar banne laezh-mañ, ha ro peoc'h gent da zintachoù. Goude se ez i prest da gousket.

(Lola a ev al laezh goustadik. An nor a zigor, he daou zen yaouank, ur peotr hag ur plac'h, a zou tre.)

Tina - N'loc'h ket re abred ho-taou. Gwechall ne bade ket kuit-se ofezenn ar Pellgent.

Tujeñ - N'omp ket chomet da c'henaouegif koulskouds. Ra yen eo an noz. Grunnañ a ra, ur spont.

Janed - Sell 'ta, Lola 'zo amañ ?

Tujeñ - Oc'h evañ amañ dija ? N'ha deus ket gortozet ac'hanomp ! Pensaos ez a er bed, Lola ?

Biel - Lola a zo aet da boumen. Gwellet he deus Sant Jozeb a oa gent ar Werc'hez Vari. Un temm kaozeadenn he deus graet gentañ.

Tujen - N'he deus ket pedet anezhañ da fiskoaniañ ?

Janed - Ni ivez hon eus gwelet Sant Jozeb hag ar Werc'hez Vari, Lola. En iliz emaint, er c'hraou Nedeleg. Werc'hoazh ez i d'o gwelout. Hag a weli ar Mabig Jezuz, hag ar bastored gant o defved, hag ar steredenn, hag an ajen hag an azen, he tout.

Biel - Ar Sant Jozeb he deus gwelet en doa ezhomm anezhi da reiñ sikour d'ar Werc'hez.

Tujen - Na leouen e vije bet ar Werc'hez Vari da gaout sikour digant Lola !

Janed - Douget ez piñe ar Mabig Jezuz war da varlunn, n'eo ket 'ta, Lola ?

Tujen - Ne respont ket. Mouzet eo. Mouzet out, Lola ?

Biel - Laz anazhi.

Janed - Ar re a gomz gant ar sent hag ar santezed ne gevont mui brav kaozeal gant tud dister evoldomp.

(En-dra ma komze ar re all, Tina a zo bet o tiskenn kafe ha laczh er bolennou)

Tina - Aree, tudañ, n'hoc'h eus ket kollet amzer a-walc'h, a gav deoc'h ? Frest eo ar c'hefe. Douit da azezañ. Ar wech diwezhañ eo din d'an em vreviñ eval-se d'ober plijadur d'ar re all.

(Azezañ a reont ouzh taol. Lola a van war he c'hador e-tal ar fornez.)

Biel - Brav oa an oferenn ?

Janed - N'oa ket ken brav ha warlana.

Biel - Morte ne vez oferenn ar Pellgent ken brav ha warlana.

Tujen - Keer oa ar sonerezh.

Janed - Leun-tenn oa an iliz.

Tujen - Ret eo bet din en em gannañ da gaout div gador.

Janed - Kalz tud o deus ranket chom war sav.

Tujen - Ur c'hamarad din a oa ena, unan hag a gave din ne lakae marte e droad en iliz.

Tina - Ha te ne lakez ket kalz da droad en iliz ivez.

Tujen - Gant hor gwraez edomp hon-daou.

Biel - Ya, ar baotred, pe zimazont, a ya d'an iliz da blijout d'o gwraez. Se ne bed ket stav. Biskoazh n'an aet d'an oferenn nemet goude va aured. Tina a felle dezhi ez ajen ganti. Aet on ur wech, div wach. O'an trade gwech he deus lavaret din hec'h-unan n'am boa ket ezhomm da vont ken.

Janed - Tav'ta. Ne glevit ket un dra bennak ?

Tujen - Un dra bennak ?...Palc'h ?...

Janed - Selaouit 'ta !

(An hall a chom difiñv da sulnou.)

Mouezh en Den, er maez - Tud 'zo en ti ?

(Ur pennad.)

Mouezh en Den - Tud 'zo en ti ?

(Tina a ya da zigeriñ ar prenestr.)

Tina - Petra ' glaskit ?

Mouezh en Den - Dre druez, douit da reiñ sikour d'am gwreg a zo klav ha tost da gaout ur bugel. Skuizh eo o valc. N'hell ket mont pelloc'h. Estrenien omp. N'anavezomp den dre amañ he n'han eus ket a arc'hant.

(An hall a zo savet, nemet Lola)

Lola - (sioul-maebet) - Sant Jozeb.

Janed - Petra ober ?

Tujen - Chomit eze. Mont a ran.

Tina - Mar fell dit ober un dra bennak, Tujen, ez i da gerc'het ur medisin. Evit ar vacuez, se 'zo afer ar marc'hed. Deus, Janed.

Biel - Hag hor fiskoan ?

Tina - Hor fiskoan he deus gortozet pell a-walc'h. Bez' e c'hello gortoz c'hoazh.

(Tina he deus gwisket he chal ha kemeret he disglavier. Janed ha Tujen a lake o mantell. Mont a reont kuit a-zri. Biel a serr ar prenestr hag a zeu en-dro da azezañ.)

Biel - O kousket emañ, Lola ?

(Lavarat e vefe emañ Lola o kousket. A-droal-trumm o sav hag ez a war-du en nor).

Biel - Lola, da beloc'h ez ez ?

Lola - Ne welez ket ?

Biel - Cham emañ, Lola.

Lola - Na welez ket eze dre ar prenestr ? Evel e Bezleem gwechall.

Biel - Serr eo ar prenestr. N'eus netra eze.

Lola - Ar steredenn ! ar steredenn !

(Redek a ra er-maez)

EIL ARVEST

An havelep kambr, div eur diwezhatoc'h. N'eus mui goulou. An tan a zo marv. Goude ur pennad, dor an diavaez a zigor. Ar goulou a ya war anaou, ha setu Tina o tont tre, gronnet en he chal, he disglavier gleb ouzh he brec'h. Tina a ya raktal davet Biel, morgousket war e gador.

Tina - Amañ out chomet ? Abade div eur ma'z omp aet kuit ?

Biel (o tihunif) - Te eo, Tina ?

Tina - Ya, me eo. Va Doue, lazet ec'h eus an tan da vervel !

Biel - Pelec'h out bet ?

Tina - Pelec'h on bet ? N'ec'h eus ket soñj da belec'h omp aet ? Ur vaouez o pacuez gwilioudif en ul lochenn a-kreiz ur park. Biskoazh kemend-all ! He nozvezh Nedelez war ar marc'had ! Den ebet war he zro, nemet he fried, un didalvez, he da verc'h Janed, a oa ken spontet ma n'eo ket bet evit ober netra. A, ma ne vijen ket bet eze ! A drugarez Doue, ar medisin a zo deut.

Biel - Emañ atav ar vaouez el lochenn du-hont ?

Tina - Kaset eo bet d'an ospital gant karr ar medisin. Hag ur c'hozh tamm pilhou hepken da lakaat en-dro d'ar bugel. A-boan ma'z eus bet kavet dour da walc'hif anezhañ. Me 'lavar dit ez eus tud a rankfe bezañ krouget.

Biel - Anscut a rez ar vaouez-se ?

Tina - Honnezh ? N'eus ket ezhomm d'hec'h anscut da c'houzout peseurt maouez eo. Hag he fried... me ! lakaomp ez eo he fried... N'en deus ket lavarot din bennozh Doue.

Biel - Pelec'h emañ Tujen ha Janed ?

Tina - Chomet en un tu bennak adarre. M'o deus c'hoant da fiskoaniañ, fiskoaniañ a reint o-unan. Mont a ran da gousket.

Biel - Ha Lola ? Lola a oa geneoc'h ivez ?

Tina - Geneomp edo, digor-bras he genou ganti en holl amzer. Emañ atav gant Tujen ha Janed moarvat. Dont a rez ?

Biel - Dont a ran. Skoznet on bremañ. Se ne reiz ket a vad d'am ramm.

Tina - Deomp.

(Mont a reont kuit. Goude ur pennadig, Tujen ha Janed a zav tre.)

Janed - Daoust ha ne oa ket koant ar bugelig ?

Tujen - Koant ? Morse n'em eus gwelet tra ken divalv.

Janed - O, Tujen ! Ne gav ket dit ez eo koant gwelout ur bugelig bihan ? He gav ket dit... (dirollañ a ra da lefvañ).

Tujen - Janed, Janed, va floc'hig keezh, petra 'zo ?

Janed - Netra... Netra... Poan ac'h eus graet din o lavarout a oa divalv ar bugelig.

Tujen - Petra 'ra se dit ?

Janed - An tad hag ar vamm a oa tud darsat, avito da vazañ psour. Sur on a ee. Ar gwaz a oa un den kaer, hag ar wreg ur vaouez kalonak ha karentezus. Hag ar bugelig a oa koant, n'eo ket 'ta ?

Tujen - Ya, ya, koant a oa.

Janed - Koant evel un ael.

Tujen - Koant evel ar Mabilg Jazuz.

Janed - Arabat dit ober goap, arabat dit, Tujen.

Tujen - Ne ran ket a c'hoap. Iskis ez kavan, Janed. Petra 'c'hoarvez ganit, plac'h paour ? Lavar din... Skuizh out. Gortoz, ez an da dommañ dit ur banne kafe. Fiskoaniañ a raimp memes tra.

Janed - N'em eus ket c'hoant ken da fiskoaniañ. Skuizh on, ya, skuizh on. Kemer a rin ur banne kafe evelato. Hag un tamm bara. Nann, c'hoant kousket am eus. (Trumm) Tujen, me 'gred hor bezo dizale ur bugelig, ni ivez.

Tujen - Petra 'levarez ?

Janed - Marteze e lavari ez eo divalav da vugelig.

Tujen - Biken ne lavarin seurt tra, Janed. Met hor bugel na vo ket ganet en ul lochenn. Ha dilhad hor bo da lakeat en-dro dezhañ.

Janed - Ya, dilhad hor bo da lakeat en-dro dezhañ. Peur e vo prest hon ti nevez ?

Tujen - Prest e vo kerkent ha ma vo errou hon arrebeuri. Ar miz a zeu moarvat.

Janed - Gwriad a rin a-hed an devezh. Brochennat a rin a-tal an tan pa vo deut an noz. Ha mont a raimp da breañ dezhañ ur c'havell kaer. Na trist e oa al lochenn-se, e-kreiz ar parkeier dindan ar glav !

Tujen - Arabat dit soñjal ken en dud-se, Janed. N'omp ket peozien evelto.

(Mont a reont kuit o-daou, brec'h-ouzh-brec'h. Ar gambr a van goulo adarre. N'eo mui sklerijennet nemet gent ar goulo gwan oc'h en em silañ eus an diavaez dre waskoù ar stalafioù.

Neuze Lola a zeu tre, dre zor an diavaez. Kerzhout a ra betek kreiz ar gambr.)

Lola - N'an ket aet d'an ofereñ. N'o deus ket lezet Lola da vont da ofereñ ar Pellgent. Hogen ma eo a zo bet galvet gant Sant Jozeb. Ha gwelet em eus Sant Jozeb, hag ar Werc'hoz hag ar Mabig Jezuz binniget. Gwelet em eus ar Mabig Jezuz war ar plouz, ha mousc'hoarzh et en deus din. Mousc'hoarzh et en deus da Lola en ur astenn a zivrec'h. Hag e oa ar steredenn o lugezinañ war ar c'hraou, dres a-zioc'h an noz. Ar steredenn vras, melen sour, evel ur vleunienn. Hag e oa ivez ur bod roz. Kutuilhet em eus ur rozenn hag he c'hinniget em eus d'ar Mabig, hag adarre em deus mousc'hoarzh et din, ha hejet e zornig kuilh da lavarout : "Bennozh Doue dit, Lola". Klevet em eus azele o kanañ e doue an Nefiv, ha gwelet azele o tiskenn war an douar, e-giz ur chapelad tan.

(Mont a ra etrezek dor an diabarzh. Salaou a ra, ha neuze e tro gant fae.)

Hag ar re-se ivez o deus sellet. Gwelet avat n'o deus ket. Dall eo o daoulegad. Dall eo ar vacuaz kozh gant an imor hag ar c'hwarveni. Dall eo an daou zen yaouank gant levenez ha leunder ar vuhez. Met Lola a sell, hag a wel, hag a oar. Ha Lola n'eo ket ur follez, evel ma lavaront. Hag a wel, hag a oar. Ha Lola n'eo ket ur follez, evel ma lavaront. Trugarez deoc'h, va Doue, trugarez deoc'h. En anv an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. E nozvezh Nedeleg, kement paour a red an hentoù eo hag ar Spered Santel. E nozvezh Nedeleg, kement paour a red an hentoù eo ar Werc'hez Vari, ha Sant Jozeb, ha kement paourez a red an hentoù eo ar Werc'hez Vari, ha kement bugelig astennet war ar plouz, paket en un tamm torzhouez, eo ar Mabig Jezuz.

*

(Istor..., p. 143)

A N D A K E N N ' D D U R

pezh-c'hoari en un arvest

gant

JARL PRIEL

Ar pezh-c'hoari-mañ, daoust dezhañ da vezañ diembann, a zo bet c'hoariet e Priel (Bro-Dreger) evit ar wech kentañ d'an 2 a viz Mae 1942, e Landreger evit an eil gwech d'an 30 a viz Eost 1942 da gefver gouelioù ar Bleun-Brug hag e Roazhon evit an trede gwech d'an 11vet a viz Here 1942 da gefver ar gouel en enor an Ac. an Estourbeillon. Ar c'hoarierien a oa : Jarl Priel : Gwilho; Mañ Broudig (e Priel hag e Landreger) ha Mañ Rannou (e Roazhon) : Kato; Odette ar C'hoz : ar glaskerez-vara.

Ouzhpenn-se skignet eo bet dre Radio-Breizh d'ar 17 a viz Here.

TUD AR C'HOARIGwilho, ur pasketaerKato, e wregUr glaskerez-vara

-o-

DIVIZ IAN

E ti ur pasketaer eus va bro, damdost da Landreger, un devezh bennak goude kreisteiz, e-karz an hafv.

E-kreiz leur an ti, un deal derv gant ur bank a-bep tu.

E-traoù al lec'h-c'hoari, ur siminal a c'hiz gozh. War ar siminal, ur groaz, daou gentalar kousev, hag ur vag vihan dre lien.

A-zehou hag a-gleiz, un nor. En ur c'horn, en tu dehou, ur prenest. Harpet ouzh ar voger, e-kichen ar prenest, ur roefv hag un avenell.

Den en ti, pe sav ar ouel. Ur skrilh a gan e-barzh an oled; dre ar prenest hanter-digor e klevet ar gelven o filipat dindan an doenn ha war ar c'harzh.

A-greiz holl un den a huch er-maez, e toull ar porzh, moarvat, ha goude, en-dro d'an ti.

"Kato !... Kato !...Kato-o-o-o-o-o !... "

Ar skrilh a dav hag ar gelven ivez; ur vran o tarnijal e-drek al liorz a laosk ur wac'hedenn hir, evel m'he dije c'hoant d'ober goep, met tanfoslir mouezh ebet a-hand-all...

Neuze e tired Gwilho dre an nor dehou, hag a huch war an treuzoù, e-leizh e gorzeilhenn :

"Kato !... Kato-o-o-o-o-o !... "

Respont ebet c'hoazh.

Gwilho, un trouc'had mat a zan, a zeu emichañs diouzh an aod, rak lec'hid a zo c'hoazh peget ouzh e heuzoù ha war e c'hlin. Gwisket eo gant ur c'hozh stamenn dislivet hag ur bragou gant meur ha meur a dakon. War e vroc'h ez aus ur c'havell hanter-leun a vezhin.

Treuzif a ra Gwilho leur an ti, ha goude bezañ digoret an nor all e huch c'hoazh ur wech :

"Kato... Bouzar out, pe betra ?... "

Gwilho a lam e dog koaret, a laka e c'hig-butun en e c'henou hag e skrab e benn, nac'het bras.

Gwilho - Aet eo adarre, am aus ar gradenn, da glekenniñ e ti ur strakell bennak !... (en ur astenn e zorn war-du an deal). Ur pennad brav 'zo eo sonet kreisteiz, ha kelou ebet eus marenn amañ... (Mont a ra en e geaez ouzh taol). Gwerzhet am aus un toullad peked !... Nebeud a dre : ur silienn, daou pe dri levneg, ul legestr hag ur vozad vilget... Feiz 'vat, pezh am bos... Kato !... (E zivrac'h e kroaz) Daoust ha palec'h an diaoul emañ en deffadez-se ?... Gwir eo, menet on er bouk da evañ am aus redet d'ar gdr, ken na fin-Bolc'h he fañch Karlouer, met goude am aus redet d'ar gdr, ken na fin-daone va zreid; berr eo warnon c'hoazh... Kato !... Oal 'ta, ne a gove din e kleven trouz he botoù-koad... Ous da vazo meulet ec'h on me erzu ar c'hentañ; evel-se, da vihanañ, ne vezin ket pouilhet gant va zurzunell, hag e c'hellin kroazal, ha kanañ dezhi dam zro he Santa-Maria... Rak, edalek

ma laec'h Kato he zeod da fraofval, kaer am bez en em chalañ ha touiñ Doue, n'on ket barrek da lavarout kaoc'h evit ur gwenneq !

DIVIZ 2

Gwilho, Kato

(Mont a ra en e sav) Kato !... Aet eo da droadañ, 'm eus aon bras !. Koulskoude, an ozhac'h a die bezañ mastr ha roue, ar wreg, evet, gwellañ tra he deus d'ober eo tevel ha plegañ... Ya, merc'hed !.. Ne laran ket "ya, poutred", rak gouzout a ran, kement gwaz a welan eze direzon a zo a-du ganin... N'eo ket gwir, kanfarded ?... (Bale a ra e-dreuz hag a-hed, evel pa vije war glesk un dra bennak) Naon bras am eus, ha sec'hed 'ta, Sant-Erwan ! met amañ e vez prennet hag alc'houezet war ar jistr hag ar gwir betagoùt na gouzufe warno va faour kaerzh dorn... Lennomp bepred ar gelaouenn da c'hortoz.. Dal 'ta !... Perwanon : E ti intañvez Lazbleiz ez eus bet laeret un hanter-dougen vioù, ur c'hartourenn chikore, ur gelaouenn hag ur billig nevez-flamm... (Paeuz a ra da lenn) Intañvez Lazbleiz ?... Honnezh, a gev din, 'oa gwechall merc'h sakrist kozh Planiel... Ya 'vat, ha c'hoazh e veze graet anezhi an Dougn, daoust d'he fri bezañ hiroc'h ha moanoc'h eget ur minaoued !..Daomp dezhi c'hoazh (Lenn a ra ar gelaouenn) Kamlez... Disul diwezhañ e-pad an oferen-bred ez eus bet adarre un tamm sach-blou etre Luch ar Gonideg hag e vamm-gaer, Fant Merrien. Dimarc'her kentañ e tleont mont dirak ar barner da Landreger... Ret e vo din mont ivez; c'hoarzhin a rin o wabout al Luch hag an hini gozh en em zifredañ... (Lenn a ra e gelaouenn) : Langoad... Anton ar Bitouz, troc'her moc'h, en deus hanter-lac'het a wreg a deolioù troad-skourjez... Sell 'ta ! c'hoari a ra an dud war an tachen-pri mañ ! (Lenn a ra adarre) Anton ar Bitouz a zo bet pemp gwech intañv ! (Ar gelaouenn a gouezh diouzh e zeouarn) Sant Erwan ! pemp gwech intañv ?... Neuze 'ta, ar Bitouz, a oa dimezet evit ar c'hwec'hvet gwech !... 'c'hanta, diouzh va diviz-me, e-lac'h bezañ bountet e-barzh an toull, ar balbouzeg-ez en deus gounezet ur verda-ann... (En ur skrabat e benn) Dimezif c'hwec'h gwech ! Pa n'amañ ket Kato war-dro, e lavarin deoc'h ar wirionez : un den evel hennez a renk bezañ Yann al Leue, pe ur sant bras addeut war an douer evit ober pinienn... (Deut e-barzh dre an nor dehou, Kato a dreuz an ti hag a ya er-maez dre an nor all.) Cho'ta, Kato, cho... De balec'h e redex ken reut ha ma'z pijs lonket ur vevh-yod ?... (Digerif a ra an nor gleiz) Selaou 'ta, va flac'h, da bet eur e vo merenn hiziv ?

Kato - Hag abaoe pegoulz ac'h eo sonet an Anjeluz ? Sed amañ marteze ur pezh divergont hag a gomz ouzh e-nen, gwashoc'h eget ma vijen ur c'hi... Chomet oc'h adarre, emichañs gant ur bagad lonkerien eveldeoc'h da glekaf e-barzh un ostaleri bennak ? (Astenn a ra Gwilho e vrec'h evit komz, hogen Kato a droc'h dezhañ e c'har) Serrit ho kenou, c'hwaz ar gevier a zo geneoc'h ! Sellit ouzh ho fri ! arvu eo kan ruz hag ur vouarenn hanter-dore !

Gwilho - N'am boa ket lavaret deoc'h ?... Adalek ma krog houmañ da gant va fegement, e red he zeod ken prim ken na vezan mezevennet...

Kato - Mezevennet, emezañ ?... Ha palac'h amañ an arc'hant ? (Stlepel a ra Gwilho war an daol un dornad pezhioù monreiz) N'hoc'h eus nemet se ? (Troc'hañ a ra dezhañ ar gomz.) Gortozit, bremaik ac'h an da furchal ho kodalloù... Serrit ho kenou, pe lavarin deoc'h ! Marteze n'hallin ket rannañ ur ger em zi ?... (Gwilho en em lake da checkat) 'Oc'h adarre gant ho check !... O tispign ho tammoù gwennañ gant al loua-toni-se, ha goude e vint o valbouziñ hag o libouzañ din va faour kaerzh plefached !

Gwilho - (o skeif gant e zorn war an daol)- Arse ! ne vin ket leosket da zis-tagañ ur ger ?

Kato - (o skeif kreñvoc'h eget ho den) - Ger ebet !... Hiziv ec'h eo va zro da zisammañ va c'halon ha kaer ho po lammat ha sailhat, e klavot ho kentel penn-da-benn... Ya, sed amañ un ibil !... D'ar gêr a teu pa vez skuizh o tigeriañ e c'henou 'lec'h all, ha kerfant he ma lake e droad er porzh : Alo ! buan ! trec'ho war an daol evit an Aotrou !... 'c'hanta, merenn ebet n'ho po, na koan kennebuet-all ma na vezit ket furoc'h !

Gwilho - Rrrrrrr !... Rrrrrrr !... mont a ra ar vilin-wenterez an-dro !

Kato - Oc'ho ! grit rrrrrrr pezh e garot !... Houmañ n'eo ket ur vuhez !... Erru ar gont e vevh, ec'h a ar peour da ouz !... A-walc'h va faotr ! ne c'houlenn ket bezañ moustrat geneoc'h... (Gwilho a stow e zicu-skouarn) O, kaer hoc'h eus stouvañ ho tiouskouarn, va goupaou n'int ket echu c'hoazh !... Me am eus merennet, pell a zo, ha prad ebet na vo war an daol-mañ arsak c'hwec'h eur...

Gwilho - Te ac'h eus merennet ?

Kato - Ya 'vat, hag ur verenn eus ar c'hentañ am eus bet : soubenn ar c'hig, ha goude ur pikol plaisenn, rouzet 'barzh an amann... Lipet ho piñe ho pizied, met siwazh, lonket am eus anezhi an he fezh !

Gwilho - De'h ober goap emañ emichañs ?

Kato - Fidendoula, n'emañ ket avat !... Ar wirionez a lavaran ha n'eo ket kêjoù !

Gwilho - Alo, Alo, va flac'h, kerzh, ha digas din emañ war an daol, ar bara, ar jistr, ar bezv hag an tamm pesk; ma'c'h eo yen, n'eus forzh !

Kato - M'hoc'h eus neon, gouzout a rit, Gwilho gaezh, pelec'h emañ ar gonastell; eno e kavet penn ar blaieenn hag an drein, mar n'int ket eot gent ar c'hazh...

Gwilho - Salsou 'ta, va gwreg, n'emañ ket ar chiz em bro da zebrif em sav evel un anevad e-barzh ar marchosi. Amañ, ouzh tool, e fell din mandrouilhat va samm boued, evel ar gristenien all.

Kato - 'C'hanta, ma na lavaran mann anep da se... Moarvat n'hoc'h eus ket a gloger dindan ho treid... Kit da gerc'hat pezh hoc'h eus ezhomm, hag am loskit emañ d'ober stamm, pe da vareilhat, ma karan, rak faezh ec'h an bezañ ho matezh !

Gwilho - Paouez da vlejat bepred ! Ma a zo sur e vez klevet oc'han betek an eod... N'ac'h eus ket a vezh ?... Rak an dud...

Kato - An dud, emezañ ?... An dud a oar pell a zo peseurt poñsin ec'h oc'h !

Gwilho - Marteze, hogen keuz az pozo ma talc'hez evel-se... Sell ! Bountañ a rei va daouarn em godelloù, rak debron a reont din...

Kato - Debron, sell 'ta !... E señj oc'h da skeif, va factr ?

Gwilho - Allas, Kato, zo peoc'h !... Kenez da lunedoù ha lann pezh a zo skrivet emañ dindan va biz : an triec'her mac'h eus a Langoad en daus hanter-bruzunet e wreg a deolioù troad skourjez...

Kato - Ac'han ?... Evel-se emañ ho kont, Yann lip-e-werenn ? O Santez Anna Wened ! pebez trubuilh a rankan gouzav gant un emprevan evel-hen !... ha c'hoazh hep lavarout ur ger !... O, va divhar a gren dindanon; ec'h an da geot ur fellodenn, ec'h an da vont ar bord all !... (En ur huanadif hag en em vranskellat, Kato a sempl etre divroc'h ha den; Gwilho gwall-nec'het ha mezhek a re dezhi emezañ war ur gador.)

Gwilho (o skrabañ e benn) - Alo 'ta, Kato, alo !... o farsal a oan.. Ma na oan ket e sell da... (Goude ur pennadig, e skop war ar plañhod hag e hej e skoaz) 'c'hanta, cheoua !... pa garo e savo alse... 'keit-se ec'h an da glask un tamm bennak da zebrif, rak, Sant Erwan ! naon daonet am eus, ha m'aus aon bras ne vo ket gwall zruz va merenn hiziv... (Mont a ra er-maez dre an nor gleiz; kercent Kato e aeilh en he sav.)

DIVIZ 3

Kato - Tremen poent eo din mont da gerc'hat an archarien war-dro an ebeul-mañ !... (Redek a ra betek an nor dehou.) Sell 'ta, piv a zo aze ? (Dont a ra e-barzh an ti ur baourez kozh ha truilhennek, ur baner ganti.)

DIVIZ 4

Kato, Ar Baourez

Ar baourez - Un dra bennak d'ar paour, mar plij !

Kato - Ac'han !... kouezhet-mat oc'h, va moereb; bremaik e roin deoc'h an aluzen evel ec'h eo dleet, hogen da c'hortoz, azazit emañ !

Ar baourez - Panaos emañ ar bed ganeoc'h ?... Tud klavv hoc'h eus ? Diouzh troad ur c'hra e klevan unan bennak o krial hag o ouello !

Kato - Den klavv ebet ne'z eus am zi, mat un tammig muioc'h e vije bet ur c'horf marv...

Ar baourez (spontet, en he sav) - Ur c'horf-marv ?

Kato - Chomet en ho kozez !... C'hwil a zeuio ganin da dest.

Ar baourez - Da dest ?... evit petra ?

Kato - Setu petra ! Va den an daus, emezañ, c'hoant da derriñ din va funn a deolioù troad-skourjez... (Ar baourez a sav en he sav hag a fell dezhi mont kuit.) Chomit aze 'ta, a lavaran deoc'h !

Ar baourez - Ya, mat ma tapan ur mesteal bennak ivez, war ar marc'had ?

Kato - N'hoc'h eus ket ezhomm da geot eon !... Biken ne gredo ober dirak un estren...

Ar baourez - Petra, va merc'hig, ur gwall zen eo ho pried ?

Kato - Ur gwall zen, emezi ?... Gweshoc'h eget an diaoul ruz dichadennet !.. Kement si fell a zo anezhañ !... Ne vez tomm dezhañ nemet pe n'hell ket... Ur gwall besketaer eo, ne lavaran ket nann, hogen pezh a c'hounez a zispignfe diseblent, mar ne vefen ket war va jou....(Ar baourez a fell dezhi komz met Kato ne ro ket amzer dezhi da zigeriñ he genou.) Gortozit, ma larin deoc'h !... Dalc'hmat e vez e chack brein en e c'henou... Sellit penaos en deus mesteret din laur an ti gant e zourjostr... Selnoit !...en deiz all e oamp o vont da vale, hag o tremen ar bourk, ur barr avel a ziskabellas Gwilho. 'C'hanta, soñjal e ra deoc'h en devoz redet war-lerc'h e dog-da-sul ?... Ne oa ket, laouen ! Da bavar lamm ruz en devoz skarzhet da zastum e chaok-butun, ha laosket e baour kaszh tog nevez da ruilhat e-barzh ar fank hag ar c'haoc'h kezeg !.. (Ar baourez a fell dezhi lavarout ur ger) Ya met, va Doue, gortozit 'ta, 'm eus aon bras, c'hwi ec'h eo Mari strap-lapenn ! Ma chom Gwilho er gêr, peoc'h ebet n'em bez gantañ diouzh ar beure betek an noz tefval, ha, pezh ec'h eo ar gwashañ, ne fell ket dezhañ am c'hlevout o lavarout ur ger... ur ger, intent mat a rit, ur ger hepken !... Petra larfec'h war se ?

Ar baourez - Feiz, va merc'hig ! truez am eus ouzhoc'h... Met ma karit, me roio deoc'h un ali mat.

Kato - Ken daoubennet on, ken ec'h on barrek da selaou n'eus forzh piv... Hag ouzhpenn-se, mar diboniit ac'hanon, ne gollot ket ho tevezh.

Ar baourez - Ho ten, am eus aon bras, a zo klañv... Ya met ho tro a zo bremañ da deval... Ya, klañv eo ho pried ha me a zo gouest d'a wellat.

Kato - Penaos 'ta ?

Ar baourez - Sez' hoc'h eus aze ur vured vihan ?

Kato - Ya vat, n'eo ket se a vank din.

Ar baourez - Roit anezhi din 'ta !.. (Kato a ya da gerc'hat ur vured; ar baourez a denn diouzh he faner ur voutailhad douz) Hemañ, va merc'hig, a zo dour sorset...

Kato (en ur c'hoarzhin) - Oho ! Gwilho ne gemer takenn dour ebet en e c'henou, pe 'vez sorset pe ne vez ket !

Ar baourez (o lakeat laun ar vured = zour) - Met n'eo ket ho ten a evo diouzh an dour-mañ.

Kato - Piv 'ta neuze ?

Ar baourez - C'hwi, va merc'hig !

Kato - Me ?

Ar baourez - Ya 'vat, ha den nemedoc'h.

Kato - Met ma ran...

Ar baourez - Grik !... Lavaret am eus deoc'h e oa va zro da gamz... Pe viot gant ho pried, mar deu dezhañ da grozal, d'ober poan deoc'h gant ur ger garv bennak, kemerit raktal leizh ho kenou eus an dour sorset-mañ, ha kaer en devo ar paotr c'hoari a zioul, kerkent e torro dezhañ...

Kato - Hala vat ! Poan am eus o kredif ac'hanoc'h !

Ar baourez - Ne werzhan ket va dour, hen reif a ran evit menn; en anv Doue, gant se ne gollot ket nemeur, mar karit ober un teol-ese...

Kato - Ar wirionez a zo geneoc'h !... Neuze 'ta e kemerin leizh va genou a zour, hogen pegoulz e rankin evañ anezhañ ?

Ar baourez - O salokras !.. n'evit ket anezhañ !... Mirit an dour dalc'hmat en ho kenou, keit ha ma vo ho kwaz en ho kichen... Me c'houlann geneoc'h tra pe dza, roit dezhañ pezh a c'houlenns...ho kenou leun a zour !.. Mar deu dezhañ sevel a vouezh, ma fell dezhañ divergant, ma ra goap, ma tou Doue, n'eus forzh, ho kenou leun a zour sorset !

Kato - Ya, ha ma c'hoante skeif ?

Ar baourez - Biken ne raio, va merc'hig, ma heuilhit va gourc'hamannou... (Kato a gemer laun ho genou a zour).

Kato (o skopañ an dour-se) - Fidandoula, diaes eo mirout kement-se a zour em genou !... Lonket am eus ur bannac'h... n'eo ket fall, evit dour sorset... (Klevet a c'heller Gwilho o c'hwitellat) Tavit, ma gav din eo erru va den... Deomp d'al liorz... Ret mat eo din 'n am gus-tumif. Neuze 'ta, arabat eo lonket an dour a-raok me... (Mont a xant kuit dre an noz dahou. Dent a ra Gwilho e-barzh, en ur dorcheñ a vourennou hag e varv.)

DIVIZ 5

Gwilho - Feiz ! n'am eus ket da glemm !.. Gaoù a lavare, rak kavet am eus 'barzh ar genastell un tamm brav eus ar blaisenn... Hag en tu-hont da ee, ankounac'hast he doa alc'houezif ar pres, ha va dorn a zo kouezhet war an dousenn krampouezh-gwinizh, kuzhet ganti 'drak al liñselioù...

Peket am eus anezho betek an disterañ... Ha ma c'houlenn diganin : Pelec'h emañ ar c'hampouezh ? Aet int gant ar c'hezh, emezon. Grik ! ...ne lavarit ket dezhi, hañ !... E-barzh korn ar pres, am eus ivaz kavet ur voutailhad hini-dous gant gant ilident...⁽¹⁾ hag am eus, evel just, gwintet ar voutailh... Flip ha flap, leizh va c'horzailhenn !... O Sant Erwan ! hennezh a oa met !.. Ma 'c'h afen c'hoazh da glekaf ur bennoc'h all ! Diwallomp !.. erru eo ar vaouez ! (ar geleouenn en e zorn, mont a ra Gwilho en e goezez war ur gador. Kato a zeu e-barzh dre an nor dehou; kerkent ha ma wel he den, e kemer leizh he genou a zour diouzh ar vured.) 'C'hanta, Kato gaezh, torret eo dit ?... Aon am boa e rankjen mont da gerc'hat ar medisin pe ar person war da dro... Met peoc'h war pezh a zo tremenet... Anzav a ran ec'h oan diwezhet o tont d'ar gêr; ur wech an amzer, 'veljust, e talv ar boan kroazal din, n'on ket ur sant, pell ac'hane, hogen te n'out ket ur santez ivez !.. N'eo ket gwir ?... Hala 'vat, gwall goefvet eo da zivjod !.. Poan dent hoc'h eus ?... (mont a ra en e sav, droug ennañ) Setu emañ un houezh !. Keer em eus en em izelaot direzi, bepred ne lavar ket ur ger !... Daonet e vo kroc'hen va c'hoazh ! N'in ket da 'n em etlaberif direzi war va daoulin da c'houlenn pardon, nann, ma karan !... Kato, kavet am eus an tamm plaisenn az pos mirut evidon, trugarez dit ... (Goude ur pennedig) Ahañ ! evel-se emañ ar bed ganit... Selaou 'ta va flac'h, mat e oa ar c'hampouezh, ha n'am eus ket laosket unan evidout... hag an ili-dant ne oa ket blazet fell ivez ! Petra, ne lavarez ger c'hoazh ? ...Klañv out 'ta, Kato, ha klañv-mañ, peogwir a c'hellan anzav va fec'hejoù, hep klevout diganin pet eur eo... Alo, Kato, alo 'ta, n'ez pos ket ezhom da gacout son, ma n'on ket un den fall, ur Ravachol bennak... Soñt a rez a-walc'h, keer am boe blejal pe skeñf war an daol, biskoarh n'am eus savet va dorn warnout... N'eo ket me, moarvat, troc'her moc'h Langoad... Selaou 'ta, Kato, dek vloaz ec'h omp dimezet bennak... Soñt a rez a-walc'h, keer am boe blejal pe skeñf war an daol, biskoarh n'am eus savet va dorn warnout... N'eo ket me, moarvat, hag eizh vloaz bennak n'am eus ket poket dit. 'C'hanta, evit va finijenn setu emañ ur magnig... Neuze 'ta mut ec'h out, ha mut e chomi, keer em bo troidellañ en-dro dit ? Mat, kas da gac'hat 'ta !.. (fuloret-meurbet, az a er-moaz a gemmedoù bras).

(1) *ixin* er-moaz eus Treger.

DIVIZ 6

Kato (goude bezaf tufet he gennoued dour)- O pebezh burzhud a zo c'honvezet ! Gwir e lavere ar wrec'h-se, raktal 'vel ma eo set an dour sorsot em genou ec'h eo torret da Wilho ! Pegen brav ivez 'ta e komze ouzhin, gant pebezh karantez e troe hag e tidroze an-dro din !.. Ya, ret eo kredif ec'h eo gwall grefv ha gwall c'halloudek an dour-mañ !... Betek dont da boket din !!! Ac'han ! ne oa ken e benn gant troidioù troad-skourjez !... Arabat e vo din fotaf an dour burzhud-mañ rak a dra eur, nag evit gour nag evit arc'hont na vez kavet kemend-all da branañ e ti an apotiker e Landreger... Arsa, ankounet am eus goulenn digant an hini gozh pegement e tlaon dezhi... Moarvat e kousto din pikez ! (Mont a ra betek an nor gleiz.) Deuit emañ.... Deuit emañ 'ta, va moereb kazh !.. (Dont a ra tre ar baourez)

DIVIZ 7

Kato, Ar Baourez

Ar baourez - 'C'hanta, va merc'hig, penaos emañ ar bed gant ho kwaz ?

Kato - Doue ra vo meulet !.. Yac'haet hoc'h eus anezhañ, yac'haet, ya, an taol kentañ, gant ho taur sorsot !... Bennañ Doue deoc'h !.. Ha pegement e tlaon deoc'h ?

Ar baourez - Petra a rofec'h din ?... Nebeud a dra : un tamm bara hag amoni, ha ma c'hellit, un toullad gwenneian, hag ivez ur bedann evidon ur wech an amzer...

Kato - O ja 'vat, biken n'ankounin ac'hanoñ... Grae deoc'h, ec'h omp da vevañ emañ, Gwilho ha me, evel e-barzh ar baradoz... Pe atardo an troad strezomp, hop !... un dakenn dour sorsot em genou, ha setu echu ar pardon...

Ar baourez - Ret eo din, va merc'hig, anzav ar wirionez war he hed... An dour-mañ n'eo ket sorsot... Dont a ra eus ar c'hrev gozh, diouzh faunteun Sodez Prijent... Bremañ, p'hoac'h eus komprenet va c'hentel, e laosket ar vured a-gostez... Met pe vist gant ho ten, raktal 'vel ma teulo droug annoc'h, grit evel ma vije leun ha kenou a zour, na lavarit ger roit peoc'h, tavit !.. Doujit d'ho kwaz, ur vicher griz, ur gwall vicher eo e hini... Po zeu d'ar gêr diouzh an eod, faezh ha skuizh,

petra en deus ezhomm?... Douster ha karantez, va merc'hig, douster ha karantez, ha netra ken... Ha bremañ, ec'h an da vont kuit, Doue d'ho pinnigo ho taou !..

Kato - Gortozit, deut dre amañ, ma roin deoc'h an aluzen ha n'eus forzh petra a gemerot, betek ar marv e vin-me dleourez deoc'h...(Mont a reont er-maez.)

D I V I Z 8

Gwilho, Kato

(Gwilho a zeu-tre e gorn-butun en e zorn hag en ur c'hwitellat.)

Gwilho - Alo, mat eo din paouez da c'hwitellat, pe am bo trouz adarre...

(Kato a zeu-tre, leouen meurbet.)

Kato - 'C'hanta, va faotr?... Ne oa ket gwall zruz da verenn hiziv, met gortoz, emberr e raimp amañ un tamm pred mat (Chom a ra Gwilho gant e c'henou digor bras da sellout ouzh e wreg, ha goude en em laka da furchal e c'hodelloù.) Ur chimikenn ac'h eus ezhomm, Gwilho?... Dal 'ta, mabig, dal 'ta !.. Marteze ac'h out skuizh?... Azez war ar gador-mañ, va faotr kaezh !.. (Squezh-mik, Gwilho ne denn lagad ebet diwez Gato.) Ur bannac'h kafe ne rafe ket a zroug dit, hañ ?

Gwilho - Me n'am eus tanfoeltr ezhomm a gafe...

Kato - Ur bannac'h likur neuze ?.. Ur bannac'h ili-dant ?...

Gwilho - Tafvaet am eus anezhañ dija...

Kato - 'C'hanta, va faotr, ne vi ket mezv, ma kemerez ur bannac'h all..... (Mont a ra er-maez.)

D I V I Z D I W E Z H A Ñ

Gwilho, Kato

Gwilho (e zivrec'h e kroez) - Deonet e vo kroec'hen va c'hazh !... Petra an diaoul a c'hoazi gant ar bompinell-mañ ? (Adkregiñ a ra da c'hwitellat hogen paouez a ra e-grenn, keskent ha ma'n em ziskouez e wreg.)

Kato (war an treuzoù) - Dalc'h da c'hwitellat 'ta, Gwilho... Te a c'hwitell ken brev, ur blijadur eo klevout ac'hanout !.. (zeñ a ra d'he den ur bannac'h likur)

Gwilho - Selaou 'ta, Kato ?

Kato - Petra, va faotr ?

Gwilho - Yac'h-mat ec'h out ?... N'out ket klev ?

Kato - Nann, avat, da c'hraes Doue !.. (Evañ a ra Gwilho e vannac'h likur.) Ur bannac'h all az po c'hoazh, va faotr bihan ?.. Alo, Gwilho, bec'h d'ar voutailh !..ur vicher griz, ur gwall vicher eo da hini !... Erru eo gwall voan da yalc'h vutun, emberr pa 'c'h in d'ar bourk e prenin evidout un tamm brev e vutun karot... Ha ma'c'h eus c'hoant da skopañ war ar pleñchod, gra hardiz, a-deal-dak ! Fidamdoulig, goude e vo skubet !.. Ha neuze, Gwilho, ur pak a dean dit, dal, sell' ef aze ! (Pokat a ra da Wilho.)

Gwilho - Arsa, Kato, petra ac'h eus avet hiziv ?

Kato - Nebeud a dra, un dakenn dour...

Gwilho - 'C'hanta, va flac'h, ma'z eus manet ur bannac'h c'hoazh 'barzh ar vou-tailh, e rei din ivez da dañva !..

(An daou bried en am vriata.)

(SAV. N. 25, 1942)

(Istor..., p.159)

M A R V E R G Ê R

Pezh-c'hoari gant F.R. MEAVENN

Tud ar C'hoari

LIZ - CHANN - ANTON -

Emeur e ti un den-a-voiz e Gro-Leon. Marv eo eizh deiz 'zo. Emañ an intañvez, Liz, oc'h evañ kafe gant c'hoar an hini marv, Chann, a zo plac'h yaouank kozh, ha kemenez eus he micher. Emañt er sal vras en traoñ, e-touez an arrebeuri eus ar vro hag an holl draoù a vro estren bet degaset gwechall gant an hini marv. A bep seurt ez eus, armoù dreist-holl, ha pennoù koad du renket ingal war ar mogerioù. An noz a zo deuet, koan a zo bet debret. Pell 'zo dija he deus lavaret Chann e rankfe mont d'he gwela, er gambr war lein.

Chann - Nann, Liz, anzer 'zo. N'ouzon ket ha ma'z oc'h graet evel don, c'hwil ivez. N'on ket morse evit komz eus traoù sirius goude koan. Cham a reont war va c'halon ha ne c'heller ket kousket goude-se. N'oc'h ket skuizh, c'hwil ? C'hoant am eus da vont da gousket, evit gwir... Ya, 'vat, ur banne kafe ho pijs c'hoazh ? Ne rankfen ket, sur... Ma vijen an ho lec'h, a atlapfen an holl bennoù-du-se e-barzh an tan. Dañjerus int. Dañjerus int, m'hell lavar deoc'h. Lavaret e vije o deus un dra bennak da lavaret.

Liz - N'int ket bev, Chann. Kemezit un tamm sukr. Petra o dije da lavaret ?

Chann - Evel m'o dije gwelet un dra bennak an ti-mañ.

Liz - Heur a dra o deus gwelet... Ho preuz a nastas anezho bep gwener. Ha marv eo d'ur gwener ivez.

Chann - Ganet d'ur gwener, marv d'ur gwener. Pep hini, a gev din, en deus un devezh dezhañ e-unan e-giz-se... hag ez eus devezhoù a gasaan me, al lun, ar merc'her, n'ouzon perak. N'eus ket un devezh hag a zo deoc'h ? Nann ? Souezhus e kavan ac'hanoc'h, Liz. Mestrez-skol oc'h chomet atav. Lavaret e vije emañt e-touez tud hanter ziot hag hanter zrouk, evel

bugale, ha neuze n'hoc'h eus fiziañs nemet annoc'h... Sellit, eot on bet da gemer kafe ur wech all. Santout a ran va c'halon o piltrotat....

Liz - Skuizh ez oc'h, Chann. Labourat a rit un hanter re.

Chann - O, ne ran ket mui. Dres evel va breur e teuin da vezañ moarvat. Dec'h e selacouen ouzh va c'halon e-pad an noz. Mont a ras evel un trañ-pstetez diviet. Ne gleven nemeti en defvalijenn, hag ar razhed...

Gwechall, Liz, en ti-mañ e oant dahserien dispar, ar razhed. Bremañ int labourerien. Ret e vije deoc'h kaout ur c'hazh pe kemer arsenik. N'hoc'h eus ket soñjet prenañ arsenik morse ?

Liz - Nann, sur, perak ?

Chann - Met evit ar razhed evel just.

Liz - Me 'm eus eon rak an holl loened.

Chann - E-giz ur gwir vestrez-skol, a lavaran deoc'h, e-giz ur plac'h savet e kêr... Atav ez eus bet razhed amañ. Karout a ran selacou outo e-pad an noz. Soñjet em eus em bugaleaj, a zo bet ken hir, ken hir.

Liz - Ar bugaleaj a vez bepred re hir.

Chann - Marteze a-walc'h. Hag en ti-mañ e kreden klevet a-greiz-holl, hep soñjal, mouezh va mamm, mouezh va breur. Soñj hoc'h eus aus mouezh va mamm pa oa mezvez ?

Liz - Met, Chann...

Chann - Gouzout a ran. Ne oa ket ho mamm deoc'h. Ur vamm-gaer a c'hell ober n'eus forzh petra, ne c'hortozit nemet dispiljadur diouti. Marv eo avat, dre c'hras Doue. Marv eo va breur ivez... Ret eo da bep hini mervel, a drugare Doue. Ha ne vije ket lavaret pa weler an holl ardoù a ra an dud war-lerc'h o zud marv. Daoust hag ez omp gret da bedout ? Me, petra 'fell deoc'h, ken iskis eo speread an den, ker pell dicuzh ar wirionez, n'eus nemet gwelet ar gevier a zo er c'hennlavarioù, ar re anezho n'int ket diot penn-da-benn, evel :

Keuz arak pa n'eus ket
Keuz war-lerc'h ne dalv ket.

Pebezh sotoni... Ar marv da skouer, me a zo sur a teu deoc'h e-giz ar c'houked pe ur bugal, d'an diaesañ. Ne vije ket diaes lazhañ unan bennak pa ouzer petra eo ar marv e gwirionez.

Liz - Met, Chann...

Chann - Setu, n'eus ket tu da geozsal. Gant gerioù e vezit kaset en tu all eus ho soñjoù. A, sellit, ma 'zo 'vont da gousket bremañ avat. Ui levr a gemerin evel dec'h da noz. Lenn e-barzh va gwela, ha dijuniñ ivez... A-wechoù, Liz, e savan d'ober va dijuniñ, hag ez an en-dro e-barzh va gwela da zebriñ. A, va Doue, setu plijadurioù ar plac'hed yaouank kozh...

Liz - Sellit ho piñe dimeziñ, Chann.

Chann - Un tammig muioc'h e vijen bet dimezet, va Doue. D'ar mare-se ne gerzhen mui war an douez ha ne sellen mui ouzh an horolaj. Ma, ma, Ken buan ha tre e vijen aet skuizh gantañ goude an eured, c'hwil 'oar penaos e vezen pa oan yaouank. Nenn, ne ouzoc'h ket : heñvel e oan ouzh va breur. Gwelloc'h eo chom hoc'h-unan-penn p'emaoc'h e-giz-se, n'eo ket gwir ?

Liz - Ho breur a oa un den mat, Chann.

Chann - Ya 'ta, un den mat. Ne ouien ket petra e oa un den drouk e-raok ma vije deuet en-dro eus ar C'hreisteiz hennezh. N'ho pos nemet aellout outañ.

Liz - E zecoulagad...

Chann - Dres.

Liz - Met ne ran fozh, Chann. Diseblant oan deus.

Chann - Truez am boa.

Liz - Ar vuhez a oa e-giz-se.

Chann - O, n'eo ket. Ma 'm eus klasket evañ neuze evel va mamm. Met ne oan ket avañstoc'h. Ar c'hontrol eo. Ker eklaer a teus diabarzh va fenn, ma welon pep tra du war wann, kalz gwashoc'h eget boas. Avañstoc'h, avat. Ha c'hwil 'vije bet kemend-all evidoc'h. N'hoc'h eus ket ur penn da c'hellout evañ. Ur penn laun a basientad hoc'h eus, penn unan en deus gortozet rumadoù bugale berzboell da respont goulennoù ar c'hatekiz. N'eo ket gwir ?

Liz - Marteze avat. Ma n'ouzon ket.

Chann - Laun a basientad da welat, kompren a rit, da welat. Ha dindan ez eus ten. Al levr tev-mañ a gemerin, war plij deoc'h. N'it ket da gousket c'hwil ?

Liz - Nenn, ket diouzhtu.

Chann (o sellat ouzh al levr) - Daoust hag e vefe anv en dan yaouank en deus lefvet da zeiz en intezamant ?

Liz - Ya.

Chann - Perak en deus lefvet, Liz ? Met, penaos e c'hellfec'h gouzout ? Hag e c'heller lefvañ evit kement a abegoù. Gwechall e lefvan bemnoz e-barzh va gwela. Tremen a ra, sur, met da gantañ oc'h tust da grediñ ho pezo un dra bennak dic'hortoz dre forzh lefvañ. Petra 'ra ar paotr-se ?

Liz - Mestr-skol eo.

Chann - Hañ ! Mestr-skol. Hañ ! Hag e lefve. N'oa nemetañ o lefvañ.

Liz - Ya.

Chann - Ur paotr mat eo ?

Liz - Ya.

Chann - Ma, gwell a se. Mont a ran da gousket srfin ivez. Nozvezh vat, Liz.

Liz - Kouskit mat, Chann. Ma'z eus un dra bennak hag a vank deoc'h...

Chann - O, ya, diskenn a rin.

I I

Liz a chom hec'h-unan-penn, difiñv, kollat en he soñjoù. Skeif a zveer ouzh an nor ha kerkent goude a teu ar mestr-skol e-barzh. Yaouank eo, bras ha kaeroc'h eget ne vez ar vistri-skol war ar maez, bev-tre da welat. E anv a zo Anton.

Anton - Evel just ez eus c'hwet ar c'hafe amañ. Petra a rafec'h hep kafe war L. enezenn didud ?

Liz - Ya sur, szezit, petra 'rafen ? C'hwet ar vakañsoù a zo warnoc'h, ha liv an hañv.

Anton - Ar porpant navaz eo. Hag ul lisher an eus bet. Ne chomin ket pell fenezh. Deuet on da zentañ deoc'h ar re-mañ ha kemer rooù all war plij. Hemañ, sellit, ne dalv netra. Hemañ a zo gwelloc'h, nemet kalz re speredek. N'eus ket unan enezho a zo bet skrivet abalamour ne c'halle ket chom hep bezañ skrivet.

Liz - N'eus nemet al levrioù e gont evidoc'h. Kemerit ur banne kafe c'hwi ivez. Lavaret hoc'h eus ho poa bet ul lizher.

Anton - Ye.

Liz - Kelou mat ?

Anton - Ye.

Liz - Swell a se.

Anton - N'eo ket al levrioù hepken a gont evidon

Liz - Nann.

Anton - Laouen e oan, sur, p'em eus anavezet ho kwaz da gentañ da zont amañ da gerc'hat levrioù ha da gaozeal, ken alies ha bemnoz, a-wechoù. Hefvel e oamp evit traoù 'zo, ne gav ket deoc'h ?

Liz - Ye, sur.

Anton - Lavaret a vije n'oc'h ket sur. Eval just ne oan ket un den evaltañ. N'am eus ket bevet, me. Gortozet em eus en ur sellout ouzh an deiziadur. C'hwi foar, c'hwi a zo bet oc'h ober skol ivez. Ne reer nemet kontañ an devezhioù, hag o renkañ hag o direnkañ evit gouzout peus e vo graet ar genstrivadeg jediñ hag ar genstrivadeg istor. Pa selaouen outañ a soñjen: "Ma labourfen da dec'hout kuit, ma studifen bemnoz..." Netra nemet ar soñjoù-se dija e oa un tec'h. Hag annoc'h a soñjen ivez, ya, gwir, penaos e eblante ar vuhez bezañ ses evidoc'h, aval n'ho pije bet ur c'hevren bennak d'ho aoulaet, d'ho laouanaat, ya, gwir..., set eo ?

Liz - Ur c'hevren a oa. Ha yaouank ez oc'h.

Anton - Ne vin ket atav. Hag en ur soñjal annoc'h a-giz-se... Ye, set eo da lavaret marteze, soñjal a reer: "Poent eo din dimeziñ, rak memes tra."

Liz - Ye ?

Anton - Netra.

Liz - Paour emac'h o vont kuit ?

Anton - A-benn seizh deiz marvat, n'ouzon ket c'hoazh, gortoz a zan unan bennak, dres.

Liz - Da zont amañ ?

Anton - Ye.

Liz - Amzer 'zo neuze, aval e lavare va c'hoer-gaer bremaik. Un dra em eus da lavaret deoc'h, diass. Marteze e skrivin kentoc'h. Diass eo, abal-lamour n'anavezit ket ac'hanon mat.

Anton - Eo, avat. N'on ket fall da varn an dud. Ho kwaz, da skouer, diouzhtu em eus gwelet pebezh teñzor am bos kavet he penaos e kare ar vuhez dres natur he n'eo ket evel tud ar vro-mañ, an ur c'hortoz un dra bennak da c'hoarvezout... Fiv a zo o tiskenn ?

(Unan a zo klevet o tiskenn gant diri-diabarzh an ti.)

Liz - Va c'hoer-gaer eo. Ha setu unan n'anavezit tamm.

Chann (a zeu e-barzh) - Ho tironkañ a ran ho-taou ? Liz, ur werennad dour, mer plij, da lakaat va dent da drempañ evit an noz. C'hwi a zo an hini en deus leñvet da zeiz an interamant, 'keta ? Azezit 'ta, arabat chom en ho sav dirazon. N'on nemet ur plac'h yaouank kozh. Ne vezn pesaurt gwerenn a raio, Liz, arabat deoc'h klask pelloc'h. Pebazh amzer vzein evit ar miz, 'keta ? Liz, ne c'hellin mui kousket. Ma n'ho tironken ket ur banne kafe am ba c'hoazh ? Azezit 'ta, den yaouank.

Anton - Poent bras eo din mont kuit.

Liz - Amzer hoc'h eus.

Chann - Amzer en deus, sur, azezit, azezit, me a chomo amañ. Perak oc'h set da leñvañ e-pad an interamant ? An dra-se eo en deus lakost ac'hanon da brederiañ...

Liz - Marteze, ne ouzoc'h ket, Chann, e oa Anton mignon bres d'ho breur. Dont e rae amañ bemnoz, koulz lavaret.

Chann - Drez, mignon d'am breur. He neuze ne gomprenit ket, nag en ail ne j gila ? Ne ran forzh ebet ma'z oc'h en em glevet ho taou. Gwazh a se svitañ.

Anton - En em glevet d'ober petra ?

Chann - Va Doue banniget, daoulagad em eus. Gwazh a ze evitañ. Eñ hag e grade abaoe pall ne vije ket marvat ar gêr abalamour d'ur sorsaraz bennak a vro estren he doa prometet dezhoñ e vije bet lazhat. He div wech e-rook kuitañ ar mor e oa bet hanter-lazhet, ur wech e Chang-Hai hag ur wech en Hapt-Navez. Ha neuze e oa deuet da grediñ ne c'hallfe ket an Ankiou tapout krog ennañ.

Liz - Salsouit, Chann...

Chann - Salsou petra ? N'emac'h ket o vont da lavaret din penaos a c'heller

lazhañ un den a zo klafv e galon, gouzout a ran... Penaos eo marvet va mamm, a gev deoc'h ? Ho kwaz a ouie. Ha pa lavaran deoc'h e komprenan ac'hanoc'h ho-taou... Hemañ a zo ur paotr mat, Liz; unan a c'hell leñvañ; va Doue, n'eo ket ho kwaz ho pijs gallet lakeat da leñvañ... Ha ma kev deoc'h ez in da lakeat brud fall war an ti-mañ... A-walc'h em eus bet gant va mamm pa'z ae da zafsal war blasenn an ti-kêr, meyv-dull. N'eo ket bremañ, pa'z on deuet sioul war an oad, ez in da lavaret dezho eo bet lazhet va breur-gant e wreg, dre garantez ouzh ur meatr-ukol hag a zo mat ha kaer, feiz...

Anton - Foll ez oc'h pe n'oc'h ket ? N'hoc'h eus ket a vezh ? (D treñ war-du Liz). Penaos e c'hellit komz a-giz-se ? Lazhet dre garantez, c'hwi 'zo foll ps betra ?

Chann - Sioulc'h, sioulc'h, den yaouank. A-benn bloez, e c'hellit dimeziñ gant...?

Anton - Met gant piv ?

Chann - Sant an intañvez.

Liz - Klevit, Anton, gwell e vije deoc'h mont kuit. Rak bremañ c'hoazh na da ket re fall an traoù ganti, met bremañ na vo ket brav na da welet na da glevet. Alies eo bet e-giz-se. Alies he deus ijinet traoù spontusoc'h c'hoazh. Arabat enkounac'haat oc'h bet c'hwec'h miz e ti ar re foll a Montroulez, Chann. Kement-se...

Chann - Brav-tre, Liz, brav-tre a gwirionez. En em zifenn a rit. Kement-se a zo brav, kement-se a vije brav, ma ne vije...

Liz - Kasoni ouzhin hoc'h eus bet atav.

Chann - Arabet deoc'h klask kompren ac'hanon, paour kaezh Liz, ne c'hellit ket. Marteze a karan ac'hanoc'h, piv 'oaz, hag e komprenan ac'hanoc'h. Ma n'am bije ket bevet eizh deiz gantañ.

Anton - Mont a ran kuit.

Chann - Anzer hoc'h eus. Petra hoc'h eus da lavaret ? An hoc'h eus bremañ ?

Anton - Razoc'h ?

Chann - O, ket. An da vazañ tapet a-gevret ganti p'ho pezo gouezet ar pezh em eus da ziskouez...

Liz - N'hoc'h eus netra.

Anton - N'am eus ket aon, hag un dra c'hoazh a lavarin arack mont kuit. Me'zo 'vont da zimeziñ ar miz a zeu. Lavaret he deus ya, hag em eus bet al lizher hiziv. Sklaer eo ? Komprenet hoc'h eus ? Ma karfec'h dont d'ar skol, Liz, ha n'eo ket chom gant ur follez. Lec'h a zo e ti er rener hag e vije lavaret ez oc'h klafv pe un dra bennak e-giz-se. Ar plac'hed yeouenk kozh, ya...

Liz - Kit kuit, Anton, mar plij. Chom a rin.

Anton - Me a c'hellfe chom ivez; marteze, geneoc'h.

Liz - Nann, avat, kit bremañ.

Chann - (Anton a ya kuit goustadik en ur saludiñ reut-tre Chann. Un dozmad-fiziñ de Liz. Chom a ra an div vaouez o-unan. Ne lavaront tra e-pad ur pennad hir a-walc'h.)

Chann - Neuze ne ouie ket ?

Liz - Nann.

Chann - Ha n'ho poa morse diskouezet dezhañ...ho karantez ?

Liz - Nann.

Chann - Ha bremañ ez a da zimeziñ gant unan all.

Liz - Ya, ar vuhez a zo e-giz-se.

Chann - O ! n'eo ket... Ha bremañ na welin nemet egile, gant e zaulagad, agile merv ar gër, da virviken...

(Kouezhañ a ra war ha-daoulin, ha leñvañ sioul.)

(Gwalearn, niv. 160, Kerzu 1943, p. 219)

ROMANTOU, DANEVELLOU, KONTADENNOU

=====

Ne saver ket nemeur a wir romantou e brezhoneg. Lad eus an abegoù a zo displeget er pennad a zeu da heul hemañ. Ne vefe ket hir ar roll, diglok tamm-pe-damm, hogen kentelius, a c'hellfemp sevel eus an doare oberoù-se.

Ar Roc'h Teull gant J. Kerrian, e 1926. An Aotrou Simbochet a Breizh (e Gwalarn e 1927, e stumm ul levr e 1927, advoulet e 1942), savet gant Roparz Hemon. Staget en deus rener Gwalarn, e 1928, da embann Ar Vugale Fell, oadet diechu. Itron Varia Garmez gant Youenn Drezen, e 1941. Herveline Garsouell gant Abeozen, e 1943. En ur rambreal, gant Y.V. Kerwerc'hez, e 1943. Enez er Rod gant Langleiz, e 1949. (Edad avet, ouzh e voulañ e 1944.) Evit Ket ha Natra gant Abhorri (R. ar Mason), e 1951. An Teirgwerz Pembroke gant Jerl Priel, e 1959.

Ha pa vefe daougementet ar roll-se a chomfa anat evelkent ne deo ket hor skrivagnerien saverien romantou. Douget int kentoc'h d'an danevelloù pe gontadennoù : traoù war batrom ar marvailhoù pobl, traoù a c'hiz bremañ. Kalz diasesoc'h e vefe sevel ur roll eus an oberoù-mañ hag eus o oberoùrien.

En dibab a roomp amañ, ne vo ket kavet ar re wellañ, kentoc'h ar re asañ da embann dre ma n'int ket re hir evit al lec'h a c'hellomp reiñ dezho. N'an deus ket felllet dimp distagañ un darn nag eus ur romant nag eus un danevell vras, na lakeat amañ unan eus kontadennoù brudet Geotenn ar Werc'hez adambonet e 1957. Dastumadoù a vez embannet a vare da vare dindan anv an danevell gentañ. Menegomp da skouer : Dremm an Ankou gant Abeozen e 1942; Kleier Fured gant Roparz Hemon e 1943; Ar Fest-Noz gant Youenn Olier e 1960.

Mar ne dint ket niverusoc'h eo hepken dre m'eo re verr bepred an arz'ant gant an embannerien ha re zister niver al lennerien. Skignet a vez ar c'hontadennoù er c'helecuenoù ha kalz diasesoc'h eo mont d'o c'hiosk eno e-benn un nebeut bloavezhioù.

NOTENN

=====

Nemet evit un nebeut barzhoniezhoù ne zav ket an dibab-mañ tostoc'h ouzomp eget 1945. Da lavaret eo ez eus danvez da sevel ur bedarvet lodenn gant an oberoù embannet e-pad ar penzek vloaz diwezhañ.

AR ROMANT HAG AN DANEVELL

Skrivañ ur romant a zo hir. Mar deo da vñhanañ ur gwir romant evel ne weler mui anezho e nep yezh. Ar Roc'h Toull J. Kerrien, hag An Aotrou Bimbochet e Breizh, an daou romant n'eus nemeto (1925-1930), a zo romantoù berr, hogos danevelloù. Un druez eo n'en defe ket kendalc'hst Kerrien : an hent-se e oa donezenet ar gwellañ. Berzh An Aotrou Bimbochet a ziskouez peseurt lunnegazh a gav an esañ degemer gant al lennerien a-vremañ. Troet o spered droist-hall ouzh an amzer-da-zont, o flijadur a gavont an ur romant a dremen en amzer-da-zont, evel m'o dije kavet o flijadur, kant vloaz 'zo, en ur romant o tremen en amzer-gwechall. An Aotrou Bimbochet a zo bet an obereñ gentañ o sunañ he sañt rag-eeun diouzh an Emsav-Breizhek, kentañ edsked an dihun broadal e meleziour al lennegezh. Ar Vugale Fall a zo muioc'h c'hoazh stag ouzh kig ha gwad an Emsav, o vezañ n'eo nemet istor romantoc'h ar rumad tud yaouank a groues hag a heulias er bloavezhioù kentañ strollad an emzenerien. N'eo ket embannet c'hoazh al levr avat. Hiroc'h a c'hella bezañ lavaret diwar e benn.

En danevelloù eo o deus displeget ar gwellañ hor skrivagnerien yaouank o ijin hag o stummoù-spered disheñvel. Un danevell a vez skrivet buan, lennet buan, ses da embann. Tri abeg d'an danevelloù da ziwanañ stank en hor yezh, keit ha ma vo ar skrivagnerien tud paour, o skrivañ war-lerc'h o devezh-labour, skuizh ha berr-awenet, avit tud a lenno, ken skuizh hag ac'hub o spered hag i (...)

(X., Pemp bloavezh e Lennegezh Breizh (1925-1930),
e Gwalarn, niv. 21, 1930)

YUN AR C'HALVEZ

(Istor..., p. 145)

P'an em gavas ar c'hemenar ez vintinvezh-se er Gêrnevez, edo ar wreg oc'h sozañ lein. Lakeat he devoa krampouez sec'h e-barzh ar skudilli ha sobunn da donnañ war an tan.

- Salud deoc'h, Gaid, eme ar c'hemenar, sichant-tre dezhañ, en ur zont dreist an treuzoù.

- A ! Demat deoc'h, Yann, a respontas ar wreg yaouank, n'emaoc'h ket diwezhat o tant d'ho tevezh hiriv. Ha kouezhet oc'h bet eus ho kwele 'ta p'emaoc'h war sav d'an eur-mañ ?

Klask a reas paotr e nadoz treiñ er gaoc, rak ne blije ket kalz dezhañ dezhañ. E gwirionez, evel ar gemenerien all, e oa un den diegus, atav o tere'hel a-dreñv, hag aliseoc'h eget d'e dro da ziwezhañ o vont d'e zevezh.

- Sell 'ta, emezhañ, en ur sellout ouzh ar peder skudell a oa war an daol-voued, ne vin ket va-unan o tevezhiañ er gêr-mañ hiriv 'm eus aon ? Pe zeuan davedoc'h, na welan peurvuiañ nemet toir skudell war an daol : hoc'h hini, hini Tin ho kwaz ha va hini-me. Petra 'zo a nevez emañ hiriv 'ta ?

Nevez-dimezet e oa Tin ha Gaid. N'o devoa ket bugale c'hoazh hag o-unan o lebruc'ent o ziegazh hep kaout ezhomm eus mevel na mitezeh ebet, rak ne oa ket bras o stant.

- Hezve an Ti-Gwenn, e lavaras Gaid, a zo bet goulennet ganeomp da zont d'ober ur c'hoatall-karr nevez ha levarat an deus e vije deut hiriv. E skudell eo an hini e zo aze war an daol e-kichen hor re-ni.

Un diaoul e zen e oa ar c'hemenar ha natur fall a oa ennañ. Pe c'halle ober droug n'eo ket ved a reas. Ouzhpenn, kasoni en devoa kemeret ouzh ar c'halvez, n'ouzon ket war zigarez petra.

A-hand-all, yaouank e oa Gaid ha nebeut a skiant-prenet dezhi. Ma oa be-, pe oa plac'h yaouank, e breuziezh Bugale Mari, n'he devoa ket kavet c'hoazh (1) en tu da vont e breuziezh Sant Tomaz, rak ken kredik e oa ha Yann Seitek e-unan.

- Paour kaezh merc'h, eme ar c'hemenar d'ar wreg, ne dalv ket ar boan deoc'h sozañ e lein da Herve an Ti-Gwenn. N'ouzoc'h ket 'ta emañ goul Sant Jozef e-benn werc'hoazh. Derc'hent ar goul-se e ra ar gilvizien yun ha vijil hag Herve a zo boazet da heuilh etrizh al lezenn-se.

- Fei 'vat, a lavaras Gaid, ne ouien ket an dra-se.

Hag hi da dennañ skudell Herve diwar an daol.

(1) Yann Seitek ez c'hontadennoù pebl a zo ur paotr mat, sur, nemet ne deo ket fin-fin. Ase eo da lakeat da gredif n'eus forzh petra.

Ur pennad goude e tegouezhas Herve a kêr. E-lec'h mont d'an ti e yess, evel kustum, d'ober ur c'hrogad labour d'ar c'hærddi da c'hortoz mare lein. Peurvuiañ ne veze ket dev dezhañ deport pell-bras. Dont a reas an ozoc'h pe ar wreg da lavarout dezhañ e veze ar prud war an daol.

En deiz-se, avat, kaer en devoa gedol, na zeuas den war e dro hag e renkas ober bouzellenn voan e-pad ar mintin. Un tammig kas a oa ennañ ha dizant a lope gant e vailh war ar gizall evit ober trouz ha reiñ da c'houzout da dud an ti, en doare-se, edo oc'h ober kofig moan.

War-dro unnek eur e teuas ar wreg d'ar c'hærddi.

- Un tamm rubanoù ha skolpoù am eus ezhomm, emezi, da boazet marenn.

- Sell 'ta, a respontas Herve, abaoe pe da vare eo deut ar c'hiz ar gêr-mañ da boazet marenn arack sozañ lein ?

- Lein hon eus debret pell 'zo, eme C'haid, ha penave d'ar c'hemenar em bije lakeat ac'hanoc'h merteze d'ober ur pec'hod. Lakeat em boe ur skudellad voued evidoc'h war an daol, met Yann ar Veakenn an deus bet skiant a-walc'h da zigas din da soñj e rank ar gilvizien ober yun ha vijil derc'hent goul Sant Jozef.

Herve, pe glavas kement-se, a chomas e c'henou war nav eur. Ouzhpenn souezhet e oa gant tro-gamm ar c'hemenar. Droug ruz a yess ennañ, met gant aon e vije graet goap outañ e kavas gwelloc'h kuzhat war e gounnar.

- A ! Yann a zo deut d'ober un devezh gwriet d'oc'h hiriv ? eme ar C'halvez. Mat, mat... O ! un den a-zoare eo Yann, avat, daoust d'an holl draoù diot a gontar diwar e benn.

- Traoù diot ? a c'houlennes Gaid, savet ha ekouarn ganti.

- Ya, diotachoù, kaozioù gwrac'hidi. An dud o deus teodoù fall, paour kaezh merc'h.

- Ha petra 'ta a leverer diwar-bann Yann ?

- O ! nebeut a dra... Un tammig eo trest da vont d'ar mar-'had, c'hwil'oar.

- Chê ! n'em boe ket klavet kement-se c'hoazh. Ne dalv ket ar boan kaout fiziañs e-barzh lod eus an dud memes tra ! Fei ! brav amean ganti avat ! N'eus nemedan en ti gant ar pemoc'h-se. Tin a zo oc'h eret douar avaloù-douar er Saouleg-Kerc'h. Petra 'rin mar teu ar c'hemenar-lad-se da glask afer ouzhin ?

- O ! eme ar c'halvez, n'ho po nemet bezañ war svezh outañ. War em eus klavet n'eo ket diaes gouzout pe da'vare e teu e gwiad dezhañ. Pe walc'h ar c'hemenar o lammet gant e zent ouzh e neud hag e strilhañ e benn, nsuzo e vo poent deoc'h diwall. N'ho po nemet bannañ ur geuneudenn ouzh e benn ha kerkent e wellay dezhañ.

Mont a reas Gaid d'an ti gant ha zavañcherad rubanoù ha skoloù. E-barz maskeñ ha chidhouarned yod kerz'h e taole a-gorn selloù truilhennek ouzh ar c'hemenes. Hemañ a oa e kreiz an daol-voued o pladorennañ war e dorchann. Mont a ree lijer e nedoz en-dro ha war e vuzell danav e pare ur mousc'hoarzh tronk ha goapad. C'hoariet en devoa an "troad-leue" d'ar c'halvez braw ha kompenn, ha kement-se a ree dezhañ bezañ laouen evel un eostig.

- Falloc'h 'zo deust naon da Herve, emezañ. Me 'zo sur ne chomo ket ar pouloud bremañ e toull e c'houzoug.

Hag e-sar lavarout ar c'homzoù-se - hiñgn, hañgn ! - e lamme gant e zent ouzh e neudenn o klaek ha zrouc'hañ an tostañ 'r gwellañ d'ar mezher. Un neudenn vat a oa gantañ en e nedoz pe, merteze, e oa loskaet e zent en e c'hencou. Ne voe ket evit trouc'hañ an tamm neud en taol kentañ. Hag hañ, neuze, hep diskrugiñ dioutañ, da strilhañ a benn en ur charoñsaf e zent. Met Gaid o oa war evezh.

! ! pitaouer, emazi d'ar c'hemenes, 'mañ ho kulad o tont deoc'h ? C'hwï, ken nebeut, ne chomo ket ar pouloud da wekañ war ho kalon ! Gortozit ma vezoc'h dizout diouzh ho tech fell !

Hag hi o tistagañ ur mell taol krog-yod dezhañ a bag e viz ken na strinke ar yod tomm a bep tu.

- forzh va buhez ! forzh va buhez ! a hope ar paour kaezh kemener. Homañ eo kallet he skiant-vat ganti !

Hag e tilmess diwar an daol da glask tonneñ ar c'hrog-yod digant ar wrog. - Tourc'h kozh ! emazi, n'hoc'h eus ket bet a-walc'h ? Setu emañ un tamm all evidoc'h !

Hag en taolioù e gouezhe dizement war chouq Yann ar Veskenn. Hemañ, e c'hallit krediñ, ne chomas ket da gozhañ en ti. Ne voe ket pell o pekañ had e c'har hag o skarzhañ ar-moer. Treuziñ a reas ar porzh d'an dou- lann euz, Laid o tont war e lerc'h gant ha c'hrog-yod.

Pa yejont e-biou d'ar c'hazad e teuns ar c'halvez da hopol d'ar wrog : - Hep, Gaid ! emezañ o c'haelc'hin e walc'h, ma renk ar gilvizion ober yon desc'hant goul Sant Jozef, n'eo ket dav dezha, avalato, dibriñ yod losket d'eo merran. Arbet deoc'h lauskal ar yod da gziannañ re !

(Gouezh, niv. 55, 1942)

FANCH AR GIOC'H

Fañch ar Gioc'h a oa o chom er Frankezig, e parrez Lokavred, war gribenn Menez Arre, e-kichen an Dorjoù. E tu ar sav-heol ne weler nemet lenneiz ha brug ha reier; pa seller ouzh tu ar c'huzh-heol, avat, e weler douaroù pinvidik hag un dremmwel kaer-maerbet, gant ar gwez frouezh leun a vokidi en nevez-amzer hag an eostoù er parkoù diniver.

Fañch, ur paotr treut ha sec'h oval ur gioc'h, a oa krafer eus e vicher; bep lun vintin e veze gwelot o tiskenn eus e glud gant ur sac'h ouzh e gostet da lakaet e vinaouedoù, ur pakad disglevierioù kozh dindan e gazol, ur vazh penn-kamm en dorn all. Gwisket oa e giz ar vro, da lavarout eo ur chupenn groc'hen dafved war e chouq gant ar gloan en diavaez, ur bragoù berr e lian gros ar vro, - n'ouzon ket hag eñ e veze gwalc'het marse, - dalc'hat en nac'h gant ur pezh ibil beuz; ur bodreoù ler hag ur botoù koad gant un torchad mat a blouz enno.

Al lunvezh ma komzan deoc'h anezhañ, a-boan ma oa deust eus e di ma'z eus da welout al lassoù en devoa stignet e-pad an noz. Ur c'hozh konikl a oa en unan eus al lassoù. Lakaet e voe al loenig ar sac'h e-touez ar minaouedoù ha kent tra all. "Evit hemañ, emezañ, em bo arc'hant va lein e Bresparr; an s'froz a wezhañ edo, rak en deiz-se e vez marc'had ar gâr-se.

Mont a reas war du ar Run Du, e lec'h ma klavas ur yar o kanañ e-touez ar reier bras. "Gounezet he devezh ganti, emichañse", ha Fañch war-du ar gonerz. Ne voe ket pell o kavout an dozedonn : buan-ha-buan e hastas da lakaet ar vicoù er sac'h gant e gonikl e-touez ar minaouedoù ha mil dra all, hep kemer ar boan d'ober ar gont anezha; hag eñ hag ober an dro vras da dremen e-biou kêr gant eon bezañ gwelot gant unan bennak.

Tonton Gregor, o tont eus penn e vern plouz, p'her gwelas o treuziñ ar warann gant kement a bres, en an c'houlennas patre oa war-lerc'h ar c'krafer, rak hemañ a oa boazet da zont en ti da lakaet an tar war e vutun ha d'ober ur pennad marvailhat an ur gonerz ur skudellad eistr.

E-pad an amzer-se ez as Fañch gant kalz a dish war-du Bresparr, e lec'h ma vez marc'had d'al lun, an ur geozal outañ e-unan : "Hiziv, emezañ, e rin un devezh mat, rak Doue a zo a-du ganin." En holl gaziadennoù ma tremene drozu eo chomet sebezet an dud ouzh e welout; a-boan ma tigre e c'hencou da lavarout "ya" pa veze goulnennet outañ ha pres oa warmañ. Lad e lavare edo o vont da glask an amieguz, nemet evit piv ? rak dizement e oa.

En un gavet e Bresparr e tegouezhas gant Suez ar Vi, marc'hadourez vicoù e Komane; setu ma kinniges e varc'hadourez dezhi. Pa voe digorvet ar sac'h e oa torzet al lodenn vrasañ eus ar vicoù hag ar paour kaezh konikl a oa bet lakaet

an ur stad divalav gant malen ar viod o tiversañ dioutañ. Ar viod dibistig a oa ivez ar memes stad. Evit mirout na vije etlabezet he marc'hadourzh dezhi, e-lec'h teurel ar viod dibistig-se er baner e voent kontet da Fañch war e zivrec'h; ha bremañ ma oa ret ober ar priz e kinniges Soaz ur priz izel abalamour ma oa lous ar marc'hadourzh.

Nemet fañch, tostadenn ha pannek, ne rabate tanfoaltr gwenneg. Ast skuizh o chipetal hag o welout en niver a dud en em zastumet en-dro dezhi, e c'houlennas Soaz ur wech adarre : "Reiñ a ri anezho ?" Ar respont a vos "Nann". "Ma, neuze peotr, e rei anezho evit netra", a lavaras-hi en ur denneñ an ibil beuz a oa o tarc'hel e vragoù en nec'h. Kerkent e kouezhas ar vragoù a-blad war e votoù, ha setu lostenn e roched o vont en aur gant an evel. Ar peour kaezh krafer a selle en-dro dezhañ gant ar viod war e zivrec'h o c'hortoz unan bennak d'hen disammañ evit gellout sevel e vragoù. "Gortoz, eme Soaz er Vi, ma 'ya da zisammañ ac'hancout", ha kemer ar viod hini hag hini da stlepel dezhañ ouzh e ziadrañv, ma rankas ar peour kaezh Fañch lezel ar peurrest eus ar viod a chome gantañ war e zivrec'h da gouezhañ d'an douar, evit sevel e vragoù ha klask un ibil all. Hag en holl ha c'hoarzhin en ur lavarout : "Ar chas a gavo an alumenn viod-se da lipet n'o devo ket ezhomm a fourchetezioù evit hen debrñ."

"Gwelout a ran, eme Fañch, n'eo ket Doue a oa a-du ganin, nemet an diaoul a oa o c'hoari troioù lous din, hag ouzhpenn, war a welan, gant en traoù laeret ez eus nebeud a c'hounedigezh."

(Arvor, niv. 160, 1944; Sell. Istor..., p.142)

AR BANNE GWIN

(Istor..., p. 116)

Skleur lous tarzh en deiz emgann a zispak d'ar selloù un douar torgennek dic'hlesvez, hep na gwezenn na bod bev. Strobet eo pep pentenn gant druin dir a-ispilh ouzh postoù o kosteziañ a-us d'an toulloù garv stok-ouzh-stok.

Sede ma tibouk diouzh ar c'hevioù soudarded gwisket ha tokaret glas. C'hoarzhin sioul a reont hag en em renkaf divall, harnezet-holl. Erensik e kenent ken dibreder ha tra, trelatet o empenn diwar en hanter-kartad gwinn-ardant drammet, dinaouet dezho arak mont d'an drailh. Ur barrad tannoù kanol o tarzhañ tostik-tost en deus lakeat ar ganerien da steuziañ evel koniklad en o ribouloù.

Emañ erru kouz an arsilhadeg. Taren ar c'haneliadeg e zo ken iskis ma ne ziforc'h mui ar skouarn an eil strakadenn diouzh eben. Pep atrollad en deus kemeret e lec'h. N'ouzer dare hag en abeg d'ar vogidell pe da uloc'h ar genol-iaedeg en an deus ar beuz kement a boan o splannast. Ne greek tamm ebet an deiz. Petra 'vern ? Dizala na welo nemet re sklær an Ankou bieniet gant ijin an dud.

Loc'het eo en arjadourien : tennadeg-ruilh ar seizh pemp oc'h ogetañ en o raok, e treuzont an draonienn d'ar red. Erwan, a lintern arouezier ouzh e skoaz, e vasionetez ouzh bag e fuzuilh, a gerzh buanañ ma c'hall, e-kichen ar pevar arouezier all, da dizhout traoù tor en dorgenn 344, kent ma tiorle tennadeg-harz an enebourien. Re ziwazhat ! Un tarz spontus a-zig ar-harz e draid, ur genou ifern o tisteurel krogailh hag houarnaj. Dibradet-krenn, a plav Erwan war e benn d'an douar, ur stok begek o pistigañ e c'houzoug.

- Graet eo ar stal ganen, a soñj-heñ en ur gouezhañ. Nann, n'emañ ket c'hoazh en hent strazek ar bed all. Ne sant na gwad na goulid dindan e vizied. Hag heñ ha sevel ken prim ha tra, e-kreiz ar c'hleswon a glav tro-dro dezhañ, da redsk adarre war raok. Kravezhourien a ru dije war dro ar re c'hlozet. N'ous mui nemet daou arouezier en e gichen. Kzepeñ e reont ouzh ar run hep ober ken a van ouzh an tarzhedennoù. Sklerijenn an deiz e dreuz-gwelloc'hik ar vogidell ledet war an arjadourien. Ar bataillon kentañ, a renk-adoù skignet rous en arak, hag, en adreñv, an daou vataillon all, stok-ouzh-stok, zenket start, hag e atrad an draonienn koabrenn luc'hadennek tennadeg-harz an enebour, stignet en oner. Youc'hadennoù a-zehou. Bagadoù soudarded tokaret plat a ziskenn a-benn-harz, o divrec'h sonnet d'an nec'h : prizonidi o pillast diouzh en dochen vracouc'hus.

///

Sed amañ kentañ lein an dorgann. Fozioù-difenn dispennet, harnezioù atlapet amañ hag ahont gant ar c'heezh tud e dec'h war du peoc'h ar c'hampoù prizonidi. Pelloc'h ur c'hev o tisonkañ ten, avel genou ur farn o c'horin, hag ofiserien alaman o leskiñ en don anezhañ. Ne deus ket fellet dezha soublañ d'an daskor.

Ne deo ket c'hoazh tizhet ar pal. War-raok e kerzhar atav. Gant sked en heol ez en em skign an emgann en oabl. Strekal a ra ar mindrailherazed eus un nijerez d'eben. Sed amañ unan, tangwallet-holl, o kouezhañ a dammoù, an eskell diouzh un tu, avel delioù sec'h, hag ar stern diouzh an tu all. Erwan puchet an un toull, e-harz troad an eil run, a sell, gant ouzh ha truez, ouzh korfoù muturnist, toullgofet, dibennet, saotret-holl e zouar, o weañ, lod anezho, avel buzhug trouc'het, dirak genou ur c'hev. "Ar brezel flour he drent !"

///

Tizhet eo pal bataillon Erwan. An daou all a gras e-biou dezhañ, tizh warno, da ziskenn gant pantenn all er run etrezek harzoù "Samogneux". Hag Erwan ha stagañ a-gevret gant ur soudard all, e vourrennoù rouz, - ur gwir C'herman, war a leverer, kuzhet dindan un anv gall boutin, ne vez graet gantañ, er bataillon, da jubenn, - da zietredif gant a bal-harnez unan eus daou c'henou ar c'hev, ma c'hellint kaout repu a-berzh pe ziroello kanoliadeg an eilstourm. Prizonidi, Galloved glozet a ye dibaeuez a-biou dezho war-du Torgenn ar Febr. Sed amañ daou Alaman oc'h ambroug ur Gall dallet. Sed ahont lod all o stempañ dillo, pennfollet-holl. A-vez de vara un hinienn bennak anezho a vez ledet war an douz noezh gant tarzh trum un tenn kanol aostrian e goualed ar saonenn. Seder ha drent eo kelon Erwan an e greiz. Betek-han en deus c'hwitad an Ankou war e daol, hag, e kreiz palst, eo darbet da Erwan stagañ gant ur gannaouenn a leverez e yaouankiz gwadek an deiz.

///

Sell ! ur prizonied o tont devstef, lent-brez, sann a zivrec'h, liv ar spont war e zrem, o krenañ avel un defved dere da vazañ plaouist gant ar bleiz. Yaouank-flema eo. Marbhev e zivjed ne deo biskoazh but sotennet.
- Deus amañ ! ta, gonaouek, he bez dizonn ! N'ammuz ket e soñj d'ez tibrin !
- Goulenn outañ, eme Erwan ouzh e anezeg e vourzennoù rouz, pe oad eo hag e baloc'h e tau.

Checkat a reont etrezo gerioù dianav, Erwan o sellout outo.
- Eus ar c'hlas c'hwazek eo...
- Evoldon !
- ... Genidik eus Stuttgart.
- Deus amañ, paotr ! Sec'had eo'h eus, moarvat ?

Hag hep gortoz un ailgiriadenn, eveljust, Erwan a dap krog an e gart soudard, hag en daou litrad gwinn divoulc'h a zo ouzh e gostez, ha dinsoñf d'ar German ar c'hentañ banna anezhañ.

An den, gwisket e gwer-louet, a stag ouzh an died e ziveuz skarnilet gant an derzhienn, e selloù damsouzhet o parañ war an enebour medaluzhus.
" An neb a roic ul lommig douz d'ur paour em anv..."

Lennet o deus er c'hamzoù-se an tu bennak o-daou, an o yezhoù disheñvel, en amzer ma taremprodent ar c'hatekiz.

Echu gantañ, a taskor ar prizoniad ar c'hait, hag e zoin a chom astennet, o kinnig e stardadenn kent kimiadañ. Gwelat met en deus Erwan ar just: trest en deus e benn, avat, evit tremen hep nac'h han degemer. Ul liv re zisheñvel a zo war o dilhad. Enebourien int, war a lavar o blazierien.
- Kemar dillo penn da hent, va faotr. Ne deo ket kear chom amañ.

Hag ar German kuit, mall wernañ. Treuzet en deus ar saonenn, dibistig, etre div darzhadenn.

- Barrek eo, eme Erwan outañ a-unan, ma ne vez ket lozhut un hent gant unan eus tannoù dall e vreudeur.
Hag a tap krog en e bal adarre.

(Dremm an Ankou, p. 77, 1942 - Istor..., p.118)

UR VAQUEZ VAT

Kement-se a c'hoarvezas, peogwir an ispiserez, - a oa en deiz-se, moarvat, soñjezonoù all en he fenn - a reas ur fazi bras.

Kas a reas d'an dimezell Mari Klec'h ar pakad a oa bet gourc'hamennet evit an dimezell Mari Doz.

Ar pevarzek a viz Eost e oa.

An dimezell Mari Klec'h a zigoras ar pakad nevez degaset dezhi gant merc'h an ispiserez. Kavout a reas kartenn he nizez hag en ur sac'hig koant madigoù chokollad, sus ar re a zo traoù kalet a-barzh, a ranke kaout dant etart evit o zrouc'hañ.

An dimezell Mari Klec'h n'he doa ket a zent. Lavaret he doa a-viskoazh ne gars ket ar chokollad. Bez' e oa ur plac'h yaouank kozh hanter-kant vloaz. Pinvidik e oa.

Mari Doz a gavas madigoù eukr blot en he fakad. Hogen se ne sell ket ouzhip.

*

Div eur goude, pa zeuas nizez an dimezell Mari Klec'h, un torked blaenigoù gwenn en he doarn, da welout he moereb, kear he devoe sachañ war ar c'hloc'h, den ne zigoras.

An dimezell Mari, kuzhet e-drañv etalef ar gegin, a welas he nizez o pellant, hag a etardas he muzelloù etre he javedoù dizant.

*

Ne oa ket ar wech kentañ he doa an dimezell Mari da glemm sus he nizez. Mores ne oa traoù bresoc'h eget an dra-mañ. Netra evidoc'h marteze.

Hogen kalz evit ur veouez n'he doa netra d'ober sus ar mintin betek an noz, hag sus an noz betek ar mintin, nemet soñjal he soñjal he treñ en he fann ur barn menazioù bihan, stav en hevalop re, hag a yec bapred war drankast gent an oad.

Ar wech-mañ e oa re.

Gaskañ a raje d'he nizez.

*

An nizez a oa dimezet, alzus-meurbet gent he fried hag he deou vugal, ur mab hag ur verc'h.

Pa welas penaos e oa troet he moereb, ne glaskas ket kompren, nag en em zigereziñ.

Deiz ar bloaz e dremenas hag an nizez e chomes pell diouzh dor an dimezell Mari.

Ar verc'h henañ, he filhorez, a reas he fask kentañ e Mezheven goude. He ne voe kaset na lizher, na skoudenn, na netra d'ar voereb. Evel-se e-pad tri bloaz. Pep unan diouzh he zu.

*

Ha setu ma varvas pried an nizez un deiz.

Ar voereb a zeredas da di an hini marv. Seilhañ a reas un noz. Karzhout a reas e-kichen he nizez a-doug an douaridigezh.

Ha goude echu. Doz an ti a vanas serrist evel a-raok.

*

Da veiz kalanna e touas ul lizher digent an nizez, ul lizherig keazh, mezhek, truezus. Hetiñ a rae d'he moereb ar bloavezh mat, hag ar vugale ivez, he komz a reas alies anuzhi, ha gouzout a rae pegen fall e cant bet hall en he c'heñver, ha pegen madeleuzus e oa, ha keuz o doa d'ar pezh o doa graet, ha bec'h o doa o vevañ, ha ne chome mapn sus arc'hant he fried, he kavet he doa ur plas da vont en tiez da glesk gwerzhañ gwerzazed, ha ne c'hounaze ket e-walc'h, he ret a vije tennañ ar vugale sus ar skol, hag he poka d'he moereb gent anaoudegezh-vat he karantez. Kement-se a oa skrivet en un doare dispart, hag en dije torret kalon ne varn piv. - nemet an dimezell Mari.

E oa e-kichen an zan o lenn al lizher. Kregiñ e reas ar pifesterioù, hag e lakaas ar follenn da rostañ, goustadik.

*

E-pad seizh vloaz, ne zeuas ken a galou sus an nizez.

An dimezell Mari a glevas koulskoude penaos e oa broueañ a Nannad hec'h-unan-penn; ar mab a oa set da soudard a-raok e omzer, ha lizhet e oa bet e Maroko. Evit ar verc'h, ne dalvezas mui ar boen komz anuzhi.

*

Un deiz, e teuas ul lizher adarre. An nizez a oa klav-bras hag e c'houlenne skoazell. Re bell he doa gortozet da vont da di ar medisin, he choust e oa toc'hor da heul un operasion.

An dimezell Mari ne zevas ket al lizher en dro-mañ. Hogen e regiañ a reas, ar pzh a zo tost heñvel. En doare ma varvas an nizez deou viz goude.

*

Neuze, an dimezell Mari a brenas dilhad kav, hag a lakaas korf he nizez da zont en-dro eus Naoned, da vezañ douëret e kav-bez an tiegezh. Bep bloez a vez paset ganti un oferenn evit repoz an ene. Hag heñvel-gonñv ez eus bleunioù keer war ar bez, hag ez a an dimezell Mari da bediñ weznaf bep sul, goude ar gousperoù.

(Kannedig Gwelarn, niv. 6 ; Arvor, niv. 25, 1941)

SANT EVARDON

Aze, e korn an iliz, tafval, e tu kleiz ar groazenn, ma ne dro marse nezennoù fresk an abardeez, ma sav eus an deroù ledan c'hwaz ar c'hantvedoù, al leizhded, an dour binniget, an dour gleb, ar c'hoar teuzet, an aznfa kozh, ar vered, an dilhad gwasket en armelioù kizellet ar sakristiri, e-rez ar peulioù tev, goustad e teue ar marc'hed, skeudoù didrouz en amc'houloù. Ha neuza desoulinañ war ur gador. Difiñv, o pediñ.

Unan, ur wech an amzer, a save he fenn. Ar Sant koad a selle outi gant daoulagad bres-bourbell souezhet. Sant Evardon. Un eskob bihan, harpet war ur vazh hiroc'h egetañ. Dilufr. E viftr dialsourt ken hir, damdest, hag e garf. Pa lintre an heol e veze soubet e see dielivet en ur mor glas. E zorn an nac'h o vinnigañ.

Atav e veze bleunioù nevez trouc'het war ar sichenn direzañ, en ur wezenn sklaer loun a zour feunteun.

Atav, da zeiz ar pardon, e veze douget gant pevar gwaz, ar re vrasañ eus ar barrez, abelamour d'ar marc'hed, a dramene hall dinden ar c'hraevazh war leurenn an iliz war-lerc'h ar brosesion.

*

Ar person nevez a erbedas d'e barrezioniz lenn La Croix du Dimanche. Prenañ a reas ur fiñvekdannerez evit ar patronaj. Difann a reas ouzh ar marc'hed traman dinden kraevazh Sant Evardon.

*

Ar marc'hed devot a brenas La Croix du Dimanche, hag a lannas bep korpren eus krec'h an talbenn betek linenn diwezhañ an embannoù : yec'hed hon Ted Santal, kaleier ar Meksig, nijadenn Lindbergh, gant devozion.

An dud a yeas da welout ar fiñvekdannoù. Ar brud en doa redet ar vourc'h o dije gwelst Charlie Chaplin. E-lec'h-se e voe diskouezet kutuilhadeg ar c'hoar e Brazil hag Itron Maria Loretto. Karzet e voe pep unan.

Pa voe difennet ouzh ar marc'hed traman dinden Sant Evardon, betek ar re zavotaf e voe droug enno. Ar gwerc'hed kozh o skignas o dent. Ar plac'hed yaouank a vouc'hoarzhos. Ar wazed kozh o c'hroazselas. Ar beotred yaouank a reas gaop. Droug enno.

*

Ur bloaz war-lerc'h, avat, e voe ar cholari bras.

*

Brav e oa koulskoude delwenn Santez "Jeanne d'Arc". Nevez-flamm o flammañ. Arc'hantet he hobregon. Ha zog-houarn ouzh he zreid. He blev trouc'het hervez ar c'hiz. O sellout etrezek an Neñv gant daoulegad aspedus, e waskf start war hec'h askre fust ar banniel flourdilizet. Eus Paris o oa deut d'ar gwener. En ur voest prenn gant e-leizh a skolpad hag a baper. He ma vije torret ! Nann, aze edo, naet ha lufr, harp ouzh ar voger velen kozh, hag an trobez-houarn dirazi gant pileroù-koar war enaou. Laeret oa bet an trebez digant Sant Jozab eviti.

Ne oa ket a werenn evelato, nag a zour feuntaun, nag a vleunioù. Aet kuit ar waxenn. Lemet ar sichenn a gichen ar prenestrig glas. Aet kuit Sant Evardon.

*

Padif a ramp evit hor c'herent hag hor medoberourien....

Nebet a dud a badas koulskoude evit ar vadoberouriez nevez : an intañvez voan dabulinet war bank an aotrou person, mar plij, e-kichen an ograou. Daou vloaz 'zo he doa lakapt sevel ar "villa" du-hont war an tevenn, gant al liorzh vras plantet a wez-pin hag a damariskl. Hi he doa roet arc'hant da breññ ar fivskudennerez, - torret breññ. An intañvez eus "Valenciennes". Ne zeus ano nemet an hafv. Hi he doa prenet delwenn Santez "Jeanne d'Arc". Mat e oa gant ar person. En abeg dezhi, ec'h embanne gouelic'ho ar sizhun e galleg.

*

Pa lennas ar person roll ar pardon, ne lavaras ket anvioù dougerien Sant Evardon. Pa ziskennas eus ar gedor-bruzeg, Saig Fulup, Biel Vras ha Reun Talibar an ur dreññ o c'hadorioù, a lezas anezho da gouezhañ e-rotzh.

*

Deiz ar pardon, d'ar brosesion vras, e voe nubeutoc'h a baotred. Tra ma teus er-maez ar c'hoefoù gwenn dre ar porched evel an erc'h, Saig Fulup, Biel Vras ha Reun Talibar a chomas a tavarn an Tri Golvan war leurenn an iliz. Mellioù baotred pamp vloaz war-nugent. Dougerien Sant Evardon daou vloaz 'zo. Saig Fulup, stamp gantaf, plantet war drouzoù an noz, sanket raut a zeouarn a

godelloù e vragoù. An daou all a-dreñv o c'hodisat er skoud evel diaouled feyv. An holl verc'hed gwitibunan a oa eno. Sentus. Bugale Vari, gwiskot kran e giz kêr, o kanaf kantikoù gallek. Un drugar salsou. Un drugar sellout outo.

*

Hag e tremenas an davezh er peoc'h hag el levnezh. Hag a kouezhas an abardeez ken sioul ha tra war an iliz. Pa'z eas an aotrou person, habask ha diankrez d'a wele...

*

A-hed an hentoù kamm hag ar c'harrhentoù, ur mor a dud. Evel merien war al lann oc'h aloubiñ an noz du an tevenn. Merc'hed ha baotred. Darn o vont eun dirazo, sounn, stardet o muzelloù, stouet war o chapeled. Darn o vransigellat. Darn o kousket, douget gant fraud an engroez. Darn o sellout mat, war o avezh, aon ganto da strabotifi ouzh ar mein ha da risklañ war ar geot strewet a gorfoù merv an tousegi bihan fruket.

*

E penn ar brosesion, du, e-us linenn an dremmwel, kravazh Sant Evardon, o ruilhaf hag o lammet evel ur vag war ur mor punnfollet, war ziskoz Saig ha Biel ha Reun hag un den all dianev.

Evel an amzer gwechall, a zeas ar brosesion tro an tevenn.

En ur vont a-hed liorzh ar "villa", ar gwerc'hed a ziframmas mouded diouzh ribl ar wenodenn, ha vloañ ! ouzh mager an intañvez gant pedennoù da Sant Evardon.

Hag e tremenas ar merc'hed, pep unan anezho, dindan ar sent. Da ziwezhañ holl, he peogwir ne oa ket a veleien war o zro, e zeas ar pevar douger ur c'hoefad mat a blijadur : o c'horren ar c'hrevazh, hag ouzh he c'houzizañ buan da virout ouzh unan vras a dremen. Ha neuze oc'h ober krog-gouren hag a zeññ lamm d'unan dev. Ha garmoù... kounnar... c'hoarioù... pifheadeg... c'hoarzh bugale Vari o tasseniñ dreist an tevenn a roc'h da roc'h betek ar c'herrek eonannet-gwenn a-kreiz ar c'haummoù er pelder.

*

Ar c'hloc'her antronoz a gavas Sant Evardon war e sichenn en iliz.
 Ha dalwunn Santez "Jeanne d'Arc" en ur c'horn e pinijenn.
 Abao e tou evel a-raok ar merc'hed da zaoulinañ dirak ar sant.
 A-feur ma tоста deiz ar pardon bras, e kresk strafuilh an aotrou person.

(Gwolar, niv. 15, 1928)

DRAILHENNOU DIWEZHAN AR PARDON

An heol o tiskenn a-dizh davet gwaremmeier er Genkiz e verke e tles
 bezañ tost da seizh eur hag e oa poent da dud ar pardon tostaat ouzh ar gêr.
 A-nebeudoù e kuitaed ar vourc'h, hag ar varc'hadourien a groge da frouzhañ
 o stal. War hent an Arvor, kirri-dre-dan e c'halve an dud diwezhat.
 D'ar mare-se, Yann ha Perig, daou baotr seitek vloaz a yeas da gemer
 bep a bakad butun ha da evañ bep a vanne a-raok mont d'ar gêr.

Pa guitajont an ostalari, an heol e oa kuzhet, hag e nije en noz en-
 dro d'ar girzhier. Un tammig e oant badaouet, hag o fenn a vouldinelle, un drugar,
 evel ma vije ar c'hleuzioù o kanañ da heul an evnedigoù evit an daou baotr, dro
 ma tremenent, hag ar roned ivez er poull-dour founneg an Droell-vihan.
 Evit laverout gwir e oa deut ar baotrad gwall zrav gant o bannaoù, skañv
 o zroad ha lemm o spered. Sofjit ivez ez oa unan eus ar gwechoù kuntañ ma'z
 aent da bardonañ o-unan. Ne oa ket en o soñj ober fall koulskoude. Gouzout e
 rit avat petra e c'hoarvez, dreist-hall gant ar baotrad o deus tremenat o annez
 o huAvreel a traoù espar diamen, er frankiz hag er pallder.
 Mevel Kervelenag e oa bet o kerc'hat ur c'harrad melchon ur wech deut
 d'ar gêr. Edo o kanañ ur son yaouankiz, hag an daou baotr, en ur glavout se e
 oa kroget ar c'hoant kanañ enno ivez. Ha setu int da vlejfal ar gencouann vrudet,
 pa ne ouiant hini all.

Ma 'zo bet en ifern 'pad ar miz Gwengolo
'C'h ober a votoù d'an diacul kamm
haq o trouc'hañ de'nañ e vary.

Sklintinet a ree ar pozioù war ar maszioù maredet, hogen hep chan e tava
 ar rondonenn :

Ma 'zo bet en ifern 'pad ar miz Gwengolo...

- Ni hor buzo eskandal p'en em gavimp er gêr, va faotr !
- Stank da veg, ha kan un draig all dimp, te 'car ?
- Netra ! eo gortoz...

Kalz maez em eus kallet !

- Nann gant ! ne deu ket ! gortoz 'ta :

'Vit sourpren en durzunell.

- Lez 'ta !

Kelz amzer un eus kollet o furchal ar c'headoù,
Iec'het eo an durzunell ha nijet er c'head all.

Degouezhet e oant e-tal pont en hent-houarn.

- Ha soñj ec'h eus, Yann gaszh, pegement a "voulê" hor bea, p'edomp er skol, o stilepel mouded war dreañ marc'hadourezh peder eur hanter ?
- Ha ma welfemp adarre. Skeñv eo va zroad hiziv, gouzout a rez !

Hag e savjont war an aspled - ha brallañ war an eil kostez goude egile evit gwelout pelec'h edo ar c'hempouez gwellañ. Aon a groge enno pe deurvezent diskregiñ ha sachañ o daouarn davsto. Tamm-ha-tamm, avat, ec'h hardiasent, avat ma hardias tamm-ha-tamm ur gaeñvihan o c'hoanta trauziñ an hent.

Int ha mont eus an eil penn d'egile eus an aspled, fouge enno. Mont ha dont a raent evel-se, ken prim ha ken asur ma tafsajont da ziskouez o lovenez. Pell diouto koumoul raterel ar menezioù belc'h.

War bouez mont, dont, ha trañ ec'h en em gavont fri-ouzh-fri, ha kregiñ an eil o diskoaz egile. C'hoant dezhe trañ hep tapout lamm a gen uhel all ? Spered ar warez ouzh o heñchañ goude milvedoù ? Trawalc'h e vos evito evit klevout ar gwad o varzholiañ o ividigoù, o c'halen o skeiñ a-brim en o bruched.

Red ar gwad a lakans kerkent o spered da zigariñ ouzh ar bad diaveez : holl drouzioù en natur varedet-se a redas hed-ha-hed o gwezhiad, a silas betek mel o eskern, ken ne chomjont ebaf. An dour o scurral en ur gouezhañ diwar rafwell ar Souer Glas, an adenn o kanañ he diskan kafvaouus ha dibouez a kadoù ar Run, ha chas o harzhal hep peouez a-dreuz bouilled an abardoz a gemeras perzh en o frederioù.

Ma vos troet o soñjoù.

Erret er penn - tavedek, evel ma vije bet un unglev kuzh etrezo - e chomjont da arvestiñ ouzh an div linennig houarn a red, gwann-lufus ouzh sikleurioù diwezhañ an deiz. Toullus ha lezhus.

Perig ha lavarout neuze :

- Klev ! n'ouzout ket patre 'm eus huñvret mour a wech ?

- Nann !

- Setu. Ni a ren amañ ur vuhez c'houllio, goullio, goullio... dont a ra da soñj din en ur welout al linenn houarn-se... huñvret em eus mont evel-se, hep ehan, dieub ha drant, en dianav. Ha labourat neuze diouzh nerzh va divrec'h evit gounit va zamm kreun, ha mont, mont, gwelout broioù ha traoù dianav, deskiñ traoù e-leizh hag o c'hontañ dre ma'z in. Gwelout a rez, ni n'omp nemet hanter dud.

- Gouzout a rez koulskoude omp stag. Stag ouzh hen ti, hor c'hêr, hor chatal, stag ouzh ar zo a anavezomp hag a gazomp. Stag, stag da vikan.
- Ya, stag.

Tavedek e chomont o sellout ouzh al linennou-houarn o tefvaisat hag o steuziñ dre ma vouka ruzder ar c'hornog, eus an hevelap doara ma steuz pap huñvre en o buhez. Kroget eo enno ar c'hoant kantren. Gouñ a ra en o ampen, ha birvilhañ, ha trañ ha distreiñ. Galv ar pallder, ar broioù dianav ha klouar, en evel drant war ar menezioù...

Ar vuhez dieub, birvidik.

(Gwalarn, niv. 60, p.42, Du 1933)

AN HINI BIHAN

Hanter-kant bugel an eus, ha teodoù hir dezho. Hogen, krediñ a ran ez int holl aslez vihan diskennet eus an nefv evit va flijadur. Holl ? Anat eo n'eo ket gwir. Kaer am eus klask en hemañ an ael bihan pe vras, - ne gavan nemet ul loen drok evel ki gouez va moareb.

Sed aze er pezh am eus lavaret n'ouzon pet gwech d'am rener, e-pad m'eo chomet Perig Abalan em skol.

Perig !

Ur fri lous gant kleier hir o ruilhañ war e vuzelloù, daoulagad glas louet kuzhat gant blev ruz a-fuilh war e zivjod, bregoù a oa bet du gwechall, - hogen Perig en doa ruzet e-barzh meur a gleuz kent dont d'ar skol bemdez ! - hag un daveañjer re hir, a oa re verr evit e c'hoar henañ.

Perig ! Truez ve skol !

Ne felle dezhañ na skrivañ, na lenn, na c'hoari gant ar re all. Un dra hepken a blije dezhañ : ober netra, netra 'vat eo. Rak bemdez a teus ar vugale da ziskouez din ur c'hoar freuzhet, - ul levr louzet, ha : "Pelec'h emañ va botoù-koad ?" - ha : "Pelec'h emañ va gwestell ?"

- Perig ? Pelec'h emañ ?

Ur mousc'hoarzh evit respont, - ur mousc'hoarzh karantezus, - netra ken. Ha pa zeus an eur da lenn !

- Perig, sell ouzh ar vazh am eus graet war an daolenn du. Pessurt lizh- ezenn eo ?

Perig a vousc'hoarzh, hag a lavare en ur vousc'hoarzin : a pe a, pe ne vern petra, nemet i.

Amzar an danevelloù.


Prifsezig an Dour a zeus e-barzh ar sel deñval gant he mignon Lagad Teñ, hag evit he gwelout gwelloc'h, evzh bras a launie daoulagad va bugale. Perig, hañ e-unan-penn, a chome diseblant ha meur a wech a veze garmet a-daol-trumm :

- AI ! AI !

Amezeien el lakepod o doa tefvaet ur wech c'hozh an douster da vezañ en e gichen.


Koulskoude, un deiz heoliet (Krediñ a ran e levezon en heol...) ur burzhud bras e c'hoarvezes war an douar. Pa sellis ouzh daouarn Perig er mintin, gwelloc'h e oant bet. A-hend-all an hini bihan a oa en e rank pa sonas ar c'hloc'h. Evit a galonekaat e rois dezhañ ur skeudenn livet a gwer : - liv ar goanag eavet ennon diouzhtu.

Siwazh ! Dek gwech siwazh !



Maodez GLANNDOUR .
Sten KIDNA(11.2.62) F.ELIES-ABEOZEN

Pêr DENEZ (18.2.62)
Ronan HUON .



Pêr BOURDELLES.

F. KERVELLA
M. LERGR. ER MASON.
Jarl PRIEL.

freuzhiñ a reas er skeudenn kerkent ha roet dezhañ - hag e voe droek
evel morse a-hed an devezh.
Hag en em c'houlennis pegoulz e kavjen hent e galon ? Biken...biken.
Ar yaou e oa leouen, - tremenet a-kichen va zud.
D'ar gwener pa erruis evit seniñ ar c'hloc'h, ur paotrig a zeuss davedon,
gant un neuz c'hloc'haret :

- "Dimezell, ... Perig Abalan, ... ur c'harr-dre-dan... marv eo, o deus
laveret.

Marv.

Adwelout a ris dremm Perig golc'et gant blev ruz, - hag e vouc'hoarzh, ...
glozet e voen.

Biken ne gavin hent e galon.

(Gwalarn, niv. 33, 1931, p. 17.- Istor, ... p. 159)

SANT EWAN E-TOUEZ E BEORIEN

A-rank ar merer a zo bremañ e Kervarzhin, edo o chom eno un den pinvidik a-walc'h, e anv Loeiz ar Yaouank.

E Kervarzhin bep bloaz emañ ar c'hiz santel, en añvor d'ar sant bras a vos genet eno, da sozañ boued d'ar re baour a zeu da glask goudor gant pardon Landreger. Ha Loeiz ar Yaouank a zalc'he d'ar c'hiz. Kemeret en devoa ar c'hustum da ober soubenn al laezh d'ar beorien, ha ken niverus e oa ar re a zeue da glask en aluzon dezir ar pardon, ma ranke Loeiz hag e wreg ober ur geoteriad soubenn bep bloaz.

Er bloaz-se, avat, d'an triwec'hvet a viz Mae, da enderv, e oa ken fall an amzer ma leveres ar merer d'e bried :

- Ne zoug ket kalz a beorien feteiz gant an amzer lous-mañ.
- Nann, emezi, ha ne gredan ket e talvezfe ar baon ober kalz a soubenn, bete-gout na vanfe. Gant pemp pe c'hwec'h litrad laezh e vo tra-walc'h.

Ha hi, oc'h ober diouzh se, da gregiñ gant he labour.
Hogen setu ne savas an amzer ha ma sklaerac an oabl, a bep ma tostas an abardaez. Hag ar beorien a srurus oval er bloavezhioù all. Re gamm a oa, re vofa, re vut-ha-bouzar, re gozh ha ne cent ken evit gounit o zemm kroun, hep kar na par war an douar; an tad hag ar mab diall a oa eno ivez : holl kustum da redek dre Vreizh-Izal eus an eil pardon d'egile war bouez ho flac'hioù hag o bizhier derv, pe bleniet gant o chas. Bez' e oa reoù hag a zeus a-stlej, koulz lavarout; holl "hep ti nag aoz na gwela da gouaket an noz", hag anavezet mat e Kervarzhin.

E-mesk ar re gentañ oc'h erruout an dezir-se e oa un den kozh, kromm gant an oad, gwisket truilhannek, blav gwann-louet ha hiz o kouezhañ war e c'houzoug hag a zivskouarn. Ur c'hozh tog du distum a c'hloae e benn. He disout ne vanke ket a blas war ar skinvier an-dro d'en daol, ez eas da azezañ war an oaled. Den n'anoveze anezhañ he padal, diskouez a ras anavezout doare an ti.

Pa voent un toullad ouz tnoñ, gwreg ar Yaouank a drempas ar soubenn; zeif a reas e skudelled da bep hini hag ivez d'ar paour en a goarez war an oaled.

- Bannozh Doue, eme hemañ, ...met, 'm eus oon, n'hec'h eus ket gread kalz a zispign evit ar bloaz. Nebaut a zoubenn a welen nza er pod !
Chom a reas-hi sabedennet, sobotust-nat. Ho fried a zeuas war he sikour :

- Sed amañ, avat, a respontas Loeiz ar Yaouank, ur pezh divergant !
En em amell eus da bemp krampouzhenn ! ha debr pan out servijet !
Hogen e gwirionez e teue ar merer hag e wreg da vezañ nsc'het o welout pegen niverus e talc'he ar beorien da zigouezhout, rak gwerzhet oa bet e Landreger peurrest laezh ar goro enderv.

Evel ma oad o tiskenn soubenn da zecu baour nevez-erruet ha ma teue tri pe bevar all en ti, ar paotr kozh war an oaled a savas e vouzsh adarre, o lavarout dezho :

- Kouls eo deoc'h monet da glask e lec'h all, a c'hoapaas-heñ, amañ eo treut an traoù hiziv.

- Sapre teod ! Te, paotr kozh, eme Loeiz rust a-walc'h dezhañ, pan ec'h eus bet da lod, n'ac'h eus nemet reif peoc'h bremañ ha lezal ar re-mañ da dostaat !

Kounnaret, Loeiz ar Yaouank hag e wreg a zalc'has da servijet ar beorien o soñjal en draog o devoa ouz an den kromm en a goarez war an oaled. A sav-taol, avat, e tacljont evezh e oa ar glaskerien-aluzen ken niverus hag er bloavezhioù all hag an holl o devoa bet o skudelled soubenn al laezh : menel a rae c'hoazh eus houmañ er pod, zoken ! Tud Kervarzhin a voe souezhet-bras, hag ar paotr kozh war an oaled a vint'hoarzh en ur zebriñ.

Ne lavarjont grik, ken na voe sut an holl beorien ar-meez. Da ziwzehañ e savas ar rac'hoaner kozh hag e kimiades dioute :

- Mat ho pos gread an traoù, e gwir, emezhañ, hag ar geou a oa genit bremaik.

Minc'hoarzhin a reas adarre, ha ken dous e teuas ar minc'hoarzh war e vuzelloù ma voe fromet Loeiz hag e wreg. Monet a reas kuit ar c'hlasker-bara gant hent ar Viniç'hi an abardaez o tefvleat ha den biskoazh n'e adwales diwar neuze.

(Istor gwir bet kontet din d'an 10vat a viz Mae 1941, e Perroz)

(Arvor, niv. 28, 13 Gouere 1941.- Sell. Istor., p.176,197)

T R O L O M A N A R Z

Lom a gemeras hent menez Arre. Alanig a veve du-hont, e-kichen Brasparz, e Kastell-al-Laer, savet etre tuchenn Sant-Mikael hag ar Yeun-Élez. Hir oa an hent, pell oa mont di.

Lom a gerzhe, lorc'h ennañ ha laouen e galon.

Degouezhout a reas e-tal Kastell-al-Laer, ar c'hastell bravañ a oa e Breizh-Izel en amzer-se (foeltret eo bet absoe, ha ne gaver mui en deiz hiziv, e-tal ar Yeun-Élez, liv ebet eus an dismantrô). Serret ha prennet e oa an noz.

Lom a hopes :

- En ti emeoc'h, filhor ? Lom, an Arz, a zo deut d'ho kavout, a-bez'h hor rous.

Nobl a gemenn deoc'h dont hep dala d'e lez-varn, ha me a zo bet karget da zegas deoc'h ar c'helou. Deuit eta ganin betek ar palez evit rentañ kont eus ho torfedoù, pe evit difenn ho kwirioù. Ma ne zeuit ket, ne vezo nemet gwazh a se evidoc'h. Bazhedaù betek mervel a vezo roet deoc'h marteze ! Filhor, dont a rit ganin ?

Alanig an doa klevet prezegenn ar genaeueg, eus ar ger kentañ betek an hini diwezhañ. Ne respontas ket diouzhtu. Kredif a rae dezhañ oa deut tud all gant Lom, hag e dont kuzhet, marteze tost d'ar c'hastell, a-dreñv ar bodennoù laon. Pignat a reas eta war doenn e gastell, hag e taolas ur sell war ar parkier tro-war-dro. Ne oa den kuzhet ebet. Lom a oa deut e-unan. Alanig a ziskennas.

- Paeron, emezañ, salud ha prosperite ! N'em eus ket gallet dont da zigrañ deoc'h diouzhtu. Edon ar chapel e lavarout va chapeled. Mat hoc'h eus grest o kont. Deuit tre en ti, mar plij. Gwerc'hez Vari ! Na pagen tomm eo deoc'h ! N'eus ket ur vlevenn eoc'h warnoc'h, ha trouc'het eo hoc'h alan ! Trugarokait ar rous eus va ferc'h : jentil-kenañ eo but o tagas davedon va brasañ mignon. Enabourien douet an eus ar palez. Sewdez a vez lakaet war va c'houstiañs gant an sotrounez-se ur torfed bennak. Dre eurved evidon emeoc'h eno evit difenn va enor. Lavarit d'ar rous e tagouzhin warc'hoazh vintin, rak hiziv on re skuizh evit ebet zoken ur pennadig-hont. Da greisteiz an eus debret traoù hag o deus grest droug din.

- Petre hoc'h eus debret eta, filhor ?

- Sa ! deuit ha talvezout a re ar bean displegañ deoc'h perak em eus droug-houzañ ?... Absoe pell 'zo a ren pinijenn vras. Muioc'h a zellid en deus unan pe wek war e banioù hep lavarout ger da zan. Hogen peogwir hoc'h

eus c'hoent da c'houzout e lavarin deoc'h n'eo ket ur vuhez eurus hini ur paour kaezh den. Alanig n'eo ket ur markiz, ha, pe deu naon dezhañ, e tahr du-mañ, du-hont, un tammig mel, lipet er pengosioù derv. Ret eo din debrif ar pezh a gavan. Heugif a ran ouzh ar mel, nemet ur sac'h goullio ne chom ket en e sav, hag, evit chom bev, eo da din debrif un dra bennak. Koeñvet on gant va fredad. N'eo ket souezhus ne brofit ket din, pa ne garan ket anezhañ.

- Pennas, filhor ? Petra an eus klevet ? Ne garit ket ar mel, un dra ken mat all ? Ar mel a zo rous ar mouziou. O ! me n'oun ket ken figus ha c'hwi. Lavarit din eta pelec'h uz eus mel ha me a dalvezo an dra-se deoc'h, ha me a rento servij deoc'h e pep lec'h, kredit ac'hanon.

- Paeron, arabat ober goap ouzhin !

- O filhor, ne ran ket goap ouzhoc'h, arabat kredif.

- Mat ! eme Alanig. War hent Brasparz, en tu all d'ar menez, ez eus un den o chom, hag e anv Rustevel. Kement a vel en deus me n'hoc'h eus gwalet morse kemend-all an ho puhez.

Lom a reas al lamm skañvañ ma c'halle ober gant ar blijadur vras e oa ennañ.

- O filhor, emezañ, mont a reomp di diouzhtu ? Mell a zo warnon tafve ar mel, ken mat e kavan anezhañ.

- Deomp 'ta neuze, a lavaras Alanig. Koulekoude eo diaes din bale hiriv. Met gant karantez evidoc'h e tauin a-benn d'ober ar pennad-hant-se brav e-walc'h. Petra ne rafen ket evidoc'h ? C'hwi, d'ho tro, e palez ar rous, a vezo va ulvodat, ha va enor ha va brud a vezo difennet-kaer.

Alanig a gerzhe, ha Lom a heulis anezhañ laouen-ran.

- Mel c'hwero a vezo, a soñje al louarn.

Lom hag Alanig a oa degouezhet dirak ti Rustavel.

An arz, a vin savet d'al laez, a lavaras :

- O, Alanig ! C'hwez ur mel dispar a zo deut betek va fonelloù !

Hag an ur lavarout eo a c'hoarzhaz kreñv, gent ar blijadur.

- Peoc'h ! eme Alanig dezhañ, pe an sotrou Rustevel, koueket bremañ en e wale, a savo da zont dimp, ha ni a rafe un dra wann.

Lom a chomas sioul. Bale a reas zoken ar skañvañ ma c'hallas war hag a dreid.

Lammig a rejont er porzh kloc dreist ar gload serret. An noz a oa didrouz. Er porzh e oa ur mell pengos derv, faoutet en un tu, ha deou c'henn dir e zalc'ha ar faout digor-bras.

- Paeron, eme Alanig, er faout-se uz eus muioc'h a vel agat na grad deoc'h. Plantit ho min e-barzh ken daun ha me c'hallit. Nemet un all : arabat ober re gorfad. Droug a rafe deoc'h.

- O filhor, eme Lom, kredif e re deoc'h eo va genou brasoc'h eget va c'horf ? Nann, nann, n'ec ket. Me 'oar tailhañ va c'hoant hervez va ezhommoù.

Lom eta a gredas /lanig. Lakaat a reas ar faout e benn betek an dis-kouarn, hag e druid-araok betek an deou c'hlin. Alanig a grogas diouzh e du gant e labour, hag, hep gouzout dare d'ar c'hompaer, e tennas an deou c'henn ar-maez eus ar faout.

- Aïou ! eme Lom, o yudal gant ar boan en e benn hag en e dreid gwasket ha flastret gant ar faout o sarrif warno.

- Petra 'c'hoarvez ganeoc'h, paeron ? Grit peoc'h, pe an aotrou Rustevel a zegouezho dezhañ dihunif.

- O filhor, filhor karet, distardit ar faout, en anv Doue !

Komzoù flour ar geneoueg n'o dos ket ar galloud da denereat kelon vouzar Alanig.

Lom neuze, pa welas e oa bet gaset goap outañ, a grogas ennañ ur fulor ruz. Diskrapot a reas gant e dreid a-drañv, ha seul vui ma tiskrepe, seul vuioç'h en don droug, ha seul vuioç'h e kounnare, e c'harze hag e vallozhe. Kement a drouz a reas ma tihunas mestr an ti. Rustevel a lakaas e fri er prenestr :

- Piv 'zo arze ? anezhañ.

Don ne respontas anezhañ. Lom, avat, e gendelc'he da yudal ha da hopal.

Rustevel a grogas en e vouc'hal hag a ziskennas er porzh.

Lom, pa glevas mouezh an den, a ziskrapas ar pezh a c'hallas. E groc'henn a oa holl entenet hag e gorf e oa glebiet gant c'hwezenn an anken. Ne dalveza ket dezhañ ober bac'h. Kollat oa. Alanig ivez a grede dezhañ e oa gaset gant Lom. Setu eta, pa welas Rustevel o tont, ur vouc'hal lugernus en e zorn, e lavaras d'e gompaeur :

- He Lom ! penaos emañ ar bed ganeoc'h ? Livirit din 'ta ha mat eo ar mel. Goustadik, goustadik, s'rabat debriñ re. Setu an aotrou Rustevel o tont da zegas deoc'h ur bannac'hig gwin da lakaat ar pred da ziskenn. An dra-se a raio kalz a vad deoc'h. N'eo ket gwir, kompaer ?

Hag Alanig a gemeras hent Kastell-al-Laer.

Rustevel, pa zegouezhas, e chomas souezhet. Un arz en e barzh ?

Hep soñjal e oa ass dezhañ reif taol ar marv d'al loen, redek a reas d'an ostaleri da glask sikour.

- Holz, paotred ! deuit 'ta, ha buan ! un arz a zo paket a bevioù hag e benn e faout ar pengos ! Deuit ma vo lazhet.

Ar baotred a yess gant Rustevel. Unan a gemeras ur forc'h houarn, unan all ur rastall, un treds un trafich. Hemañ a gemeras un horzh, hennezh ur gontell-lazhañ noc'h, ar marichal ur varzann-houarn, ar c'here ur mineoued hir ha lemm, ha meur a blec'h ha c'hrog-yod.

Lom, en e spontadenn, e sachas kement ha kement, ma c'helles tannañ e bunn hag e dreid eus ar faout. Siwezh dezhañ ! Glac'harus a oa e stad. Blev ha kroc'henn e benn, un hanter eus ur skouarn, hag e holl ivinoù e oa chomet er pengos ! Un druez e oa gwelout anezhañ, gant ar gwad o redek puilh dreist e choug. A, nann, ne oa ket mat mel ar pengos derv ! C'hwerv-pud e oa. Evel ar vestl.

Lom a glaskas tec'hout. Mat kouezhañ a reas war e vin. E dreid a oa re gizidik avit reif sikour. Ar gouerien a zeuas d'ober dezhañ e stal. Tafus a reas fest ar vazh, fest ar forc'h, fest ar rastall hag an horzh. Paotredigoù a zerede gant keuneudenoù, mab ar marichal a zic'heloupe gant un durkek hag ar c'hemenar gant o vatr-koad pevarc'hornek, ken tev ha pevar biz-meud.

Lom a oa bloaset e benn, e zivakoaz ha livenn e gain. Goude ur c'hard- eur a verzhherinti e kouezhas war an douar, hag ec'h en em rentas da vervel.

- Graet eo gantañ ! a lavaras ar baotred.

Hag int kuit d'o zi gant o binvioù war o skoaz. Warc'hoazh d'ar beure a teujent d'e ziskroc'hennañ.

Lom ne oa ket marv. Ma oa kollat gantañ e holl anaoudegezh, e ohmu c'hoazh un tammig buhez en e gorf. Ma vije bet ur medisin er gêr, en dije sentet c'hoazh lammoùigoù dister en ur lakaat e skouarn war galon al loen.

Goude bezañ chomet un abadenn vat war leuzenn ar porzh, ar paour koezh loen mac'hagnet a teuas anoued dezhañ. Ur skrijadenn o yeas dra e holl frili gant ar boan o tont en-dro. Lom a zigoras e zsaoulagad d'ar koezhvat, hag en em ruzas, da vare ar pellgent, pell diouzh an dechem villiget.

Alanig ne oa mui nac'het gant ar geneoueg. Mont a reas da epieñ ar yer war o c'hilud. Gant a reas a-benn da vezviñ gant e gomzoù flour ur baotred hantec' gousket war bod ur wezenn ivin, hag ar yarig dievezh a gouezhas etre epieñ ur treitour. Mont a reas diouzhtu da zebriñ ar c'horfig tenar a-drañv klouz ur waremm. Edo da vat o lipat an nskell diwezhañ, pa glevas trouz ar for. Salsou a reas. An trouz a dostas. Alanig a oa prest c'ober ul lemm dreist ar c'hleuz pa anavezas ar paour koezh Lom.

- A, c'hwi an hini eo ? Penaos eo tremenet en trabù du-hont ? N'oc'h ket avit an em stlejañ ken ? He korfad mel eo a vir ouzhoc'h, ma 'zo sur. Gouet ha paotred hoc'h eus ar mel laeret digant an aotrou Rustevel ? O, paeron, e peseurt urzh oc'h nevez antrest, pa welan war ha penn ur galotenn ruz ? 'M eus son, ar parukennet, en ur douzhañ deoc'h ha plav an deus trouc'het ivez ha tivskouarn, hag un den didruez bennsk en deus laeret kroc'henn ha tal hag ho tivjed avit ober ganto manegoù.

Lom a gave blaz fall gant ar gouezh-er. Hogen re simpl e oa he re e c'houzave, e kement korn eus e gorf, avit reif d'en traitour ar predal an deo

gounezet. Gwelloc'h e kavas treiñ kein, hep lavarout ger. Diskenn a reas betek ar Yeun, hag eno e kouezhas, hanter-varv gant an droug, ar boan hag an dizesper, en ur foz leun a zour-mergl.

- Gwelloc'h e vije bet din bezañ lazhet gant Rustevel, a soñje ar paour kaezh. - Ur veaj hir an eus c'hoazh d'ober, ha n'on ket evit chom war va zread. Pa zegouezhin e palez ar roue, en holl a raio goep ouzhin. Ul louarn a zo bet re bar din ! O ! mil mallozh ! Ma teuan c'hoazh da vezañ pere ur wech bennak, e savo keuz a kalon al loen fall. Touiñ a ren.

Pa zeus ar goulou-deiz da sklerijennañ ar Yeun-Elez, Lom a savas hag a gemaras, en ur jilgemmañ, hent Kemper-Kourintin. Goude pevar devezh-bale e welas o tarzhañ er pallder tourioù uhel an iliz-veur.

- A ! eme Lom, echu eo va hent ppenius, met n'eo ket echu va foanioù, ha mezh ha goaperezh am eus c'hoazh da c'houzañv.

Degouezhet oa er palez. Nobl, ar roue, o welout anezhañ en un doare ken iskis, a lavaras :

- Va Doue, dacoust hag an arz feal, va gwellañ servijer, eo an hini a zo dirazomp ?

Lom a respontas :

- Ya, roue meur, Lom eo an hini a zo direzoc'h. Gwelit e peseurt stad truzus eo bet iskeet gant Alanig al Louarn, gwashañ judaz o zo er vro.

Nobl a yeas droug ennañ. Lavarout a reas :

- A ! A ! Alanig en deus klasket ! Kavout a raio, ha pæet e vezo an trubard hervez al labour en deus graet, pa ne vezin arvat ken roue al loened e Breizh-Izel.

Ha setu Nobl a gemenn d'e guzulierien, d'an archerien ha da vistri ar soudarded dont d'e balez. Displegeñ a ra dezho trubarderezh du Alanig al Louarn.

- Petra a vezo graet ? eme Nobl. Pep hini a raio e ali, ha me, ar roue, a sento. Konzit.

Pep hini a savas hag a gomzas d'e dro. Hervez an holl e oa ret lavarout adarre da Alanig dont d'ar palez evit bezañ barnet pe kaout ar peron eus e dorfed. Lom a oa bet kaset hag en doa graet un dro wenn... Piv oar ?... Marteze Lom hag Alanig a oa enebourien doust, ha daou enebour eo diaes a-walc'h dezho en em glevout. Gouzout a reomp ouzhpenn n'eo ket an arz ul loen speredek ha dilu. Met a oa eta kas an teol-mañ ar finañ loen eus ar rouantelezh.

Lip-e-Bov, ar c'hazh finañ a oa e Kerfeunteun, ar skafvañ eus kizhies ar rouantelezh, hag an hini gwellañ marteze er bed holl da bakañ loged er solieroù ha laboused al liorzhoù, a oa bet karget da gas lizher ar roue da Kastell-al-Laer.

Nobl a c'helvas Lip-e-Bov hag a lavaras dezhañ :

- Deoc'h da vont. Mar deo ur veaj risklus evit meur a hini, evidoc'h n'eo ket. C'hwi 'zo desket bras ha teodet-kaer. Gouzout a rit an tu da livañ ar wirionez hag ar gevier, hervez ma vez azhomm. Laverit da Alanig dont diouzh-tu d'am palez. Ma teu, gwell a se evitañ. Ma ne zeu ket, gwazh a se ! Gouzout a ran ervat e solaoù hoc'h alioù, hag a teuo d'al lezvarn.

Ar c'hazh a respontas :

- O roue, n'on ket ken sur-se da zegas anezhañ d'ho palez. Pennos en em gemerin, ur wech degouezhet e Kastell-al-Laer ? N'ouzon ket moarvat va-unan. Alanig a zo ken fin all ! Lom, an arz, a zo bras ha kreñv, hag en deus graet un dro wenn, un dro ruz a vefe gwiroc'h. Pennos eta, me, ur c'hazh bihan ha distez, e c'hellin ober ar pezh na reas ket pæetred ampart ? O roue, krediañ a ran e vefe gwelloc'h kes unan all.

- Nann, nann, eme ar roue, c'hwi an hini a yeo, rak an ho korf bihan e kavan ar vrasañ furnezh.

Ar c'hazh a lavaras :

- Ho polontez bezet graet !

Hag e kameras hent Menez Sant Mikael.

SKRAPADEG AVALOU TROUGI

War an abardaez : emañ taolioù an enjalus o paouez kouezhañ diouzh tour an iliz. Ar maged a droidell goustad a-us d'an taennoù mein glaz. Mare koan eo.

Paotredigoù ha kreñn-baotred Rozig-ar-mager a zo azezet, evel kustum, war an tirienn dindan boc'hadig gwaz evlec'h an Dourig-kozh, en tu all d'ar foenneg.

Fep hini a zo gantaf, stre pennoù a zaoulin, ur mell skudellad soubenn ar rouz. C'hwez'h, nav, unnek, trizek vicaz, barr hag hir, tev ha treut evel an'amsaint, frioù mec'hi ar Rozig a zo tammoù gwazed bihan anezho. Toull eo alies o bragoù war o fenn a-dreñv, sec'hañ a reont stev o fri gant o mafch, met gwazed bihan int. N'o deus ket eon rak o skeud ha kalonek ez a o soubenn ganto war droañ, oqnon hag all.

Diskennet eo an heol, n'aus ket ur goabrenn en oabl ruz-roz; c'hwez vat, ne lavaren ket, e-giz c'hwez mel, ur frond flour d'ar fronnell, hag a laka dour da zont a-barzh ar genou.

- Me 'glav c'hwez avaloù.
- Me ivez. Diouzh Trougi a teu...
- Gid ! Me 'z afe ganin meur a hini war-lerc'h ur banne soubenn vat evel boumañ.
- Na ganin 'ta ! Ha ma'z afemp da Dreougi !...

*

Tudoù kaezh ! Ne voe ket esizhdaletoc'h ar soubennoù o tiskenn. Tapet a voe ar paz gant daou pe dri, ken bras o doa lakaet el loaledoù en o dremmoù. Prim ar skudilli d'ar ger, prim ar sec'h diouzh an armel, pe ur mouchouer bras, pe ur pennad kordennig voan da dreñv en dro d'an dargreiz. N'eo ket avit mirout ouzh ar bragsier da gouezhañ; avit diwall an avaloù a-barzh ar grubuilhoù, ne lavaren ket.

.... Ha prim ha prim emañ arzu ar baotred adarre dindan evlec'hennoù bras an Dourig kozh.

O anvioù ?... Elav-Gwenn, bressañ galouper noz a enevreiz marse, set da vertolod abaoe ha bet a-pad blovezhioù o kantren a broioù ar C'hinoaed; Morvan-Togn; C'hwez-Vat ha Lili Tal-brizhoù, lesenvioù anat deoc'h; ar Brenn, ur masiked, ur vouzhañ dezhañ e-giz d'un sostig, hegen laer e-giz ur c'hazh; Per Lallac'h.

merket doun e jod gant ur gleizenn, abaoe ma oa kouzhet en traoñ diouzh ur wezenn bin; Al Lubi, Kefaleg, va c'hendarv, ha me; ar Garz, paotr ar "vilc'hoù"; Bolzer, ar c'hakouz; ar fiouig, enebour ar re binvidik a viskoszh, namet lezirek touet; ha neuze an Dag, an Dag paotr a vrec'h fall, an Dag "brec'h-yod" evel ma lavaremp. Ur vandennad ac'hanomp, peadra da skarzhañ kement liorzhad avaloù a vleunie e bro venniget ar Vigoudennad.

Ar C'holomb kozh n'oa ket muioc'h a vall war e vertolodet da dizhout an Inizi, eget warnomp da vont d'an arigrap da Dreougi. Gortoz a rejomp an defvalijenn e-pad ur reuziad amzer. Dizañjerusoc'h eo mont dezhi dindan askell an noz. Pedal loargenn e oa an nozvezh-se. Sklaer ar maeziou evel e-kreiz an deiz !

Met evelato ! hag ar baotred an hentoù, ur safar d'o heul, gouset da zi-vouzrañ ur c'hloc'h, penn-da-benn hent bras Pornaleg.

Lavaret em eus deoc'h n'o doa ket eon rak o skeud. Mont a reont a-hio da barkeier moradet e sklaer al loar, da bannoù-tiez sekret kloc, da zodu gned doun, ma ne gredent ket re sellout a-barzh, ken tefval e oant. Ha setu Trougi. Peoc'h raktañ. Ar maner a zo ouzh a godoù, shont, evel ur vogez du uhel, sovet a-dreuz an hent. Sioul eo pep tra an-dro dimp.

Ar grilh-douar, ar reden sec'h, ar mouar du war an drez hag ar gwaz pin a zo kousket d'enc'h e c'houstieñs, evel m'eo kousket kement den onest, set skuizh gant e labour pemdezisk. Hegen ni n'omp ket skuizh; hag onest !... Feiz ! Va Doue !... Sevel e viz an neb ne reas ket ar pec'hed !...

Prennet e veg gant pep hini; trouz abet war ar maez, namet, a-wechoù du-hont, ur c'hi bennak o harzhal ouzh al loar.

Lammat e re ar baotred d'ar c'hleuz; treuzif a reont ur c'houblad parkaier, ha goude ur c'hoed gwaz pin. E traoñ ar c'hoed ha gwekedet gantañ, ur stivell hag ur faunteun gozh. Ur stivell, gant melloù mein korrezek tro-dro, ma teu ar merc'hed da bradañ o c'houz en deiz; ur faunteun d'armpredet a-v. a-koazh gant ar c'halouperien a oa ac'hanomp. Meur a wech hor boe kevot gwañt da d'errif hor sec'hed en he dour sklaer, p'edomp ar skul louzin.

Al loar a lintre ha c'hann, e-kreiz ar stivell, kar spienn hag en ur malezour.

En em vadañ 'reus ar baotred en-dro d'ar Morvan-Togn, ur akrifellek hir war e zivesker, c'ajet a benzak vloaz. Dibabet e oa bet da veatr genimp, ha reif a rau e urzhioù evel ur gwi rener. Komz a reas war e bouz hag a vouzhañ izel, en ur dreñv e benn a-zehou hag a-glaiz.

- Tri c'hant metr ac'haleñ emañ al liorzhañ avaloù, paotred ! N'eo ket dav en em lakaat droch avit diskouez n'hon aus ket eon. Teolomp avizhañ eta paotred !

Gwall dud eo re ar maner. An hini a chomo da stlejeñ a bako un tenn fuzul ker buan ha tra. Gant grouen holen ouzhpenn... Laerezh avaloù Treougi ? Koulz laerezh ul leue diouzhtu e kraou va moereb Chann.

- De voereb Chann n'he deus leus abet !

- Na lavaran ket ivez..., leue da-unan ! Met poutred ma n'hoc'h eus ket c'hoant knout dent ar chas e strad ho pragoù hag e kig ho feskennoù, evel just; ma ne blij ket daoc'h ar skourjez war ho tivskoaz; ma ne fall ket daoc'h chom stag ouzh ur wezenn e-pad an noz, serrit ho kenou, lakait voulouz en-dro d'ho troid, hag hastit buan.

- Sell 'ta ! 'm eus aon en deus hemañ aon ! Kerzh d'ar gêr neuze, Togn !

- Aon ! ro peoc'h d'am penn. Me 'm eus skiant-prenañ, me, ma ne fogasan ket eveladout. Hag un ali mat a zo mat da goût, dreist-holl evit ur genoqueg ugizdout. C'hoant avaloù am eus kement ha te, ha c'hoant mont da gouket em gwela 'm eus ivez, hep tannoù holen pe skilfoù chas e-barzh va feskennoù... Hag evit se eo e levarin dit serrif da veg ha sentif ouzhin. Me eo ar mestr ha me 'lavar eo poent bras stagañ ouzh al labour...

Ha kuit hon ebestel, astennet gante o gouzoug, koutig-koutig, a-dreuz ar c'hoad pin, penn-da-benn ar c'hlouzidoù strouezh. Ul lamm a-dreuz hent bras Porneleg, un hed kleuzioù adarre. Setu liorz ar maner.

Ur c'hoarzh uhal tro-war-dro, gant radenn hir, ha spenn ha strouezh ha ternoù darv. Ha ni o tic'houzougeñ dre ar riboulioù, diwar gorre ar c'hleuz, e-barzh al liorz. Dififv an noz, maredet ar gwezhioù, diwar gorre ar c'hleuz, evel en oabl. Ar gwez, sklerijennet klok gant al loar, a zo stouet o skourroù betek an dour. Pet ez eus snezho ? Dak, ugent, tri-ugent, ouzhpenn kant, e renkennadoù ingal. Kristenien gaizh ! nag o avaloù, nag a avaloù, skoachet flourik e-touez an delioù !.. Keuz am eus da vezañ degaset ganin ur sec'h re vihan.

- Ac'hanta ! mont a reomp ? a c'houlenn ar Bleu-Gwenn, a zindin ur vndenn lann.

- Ye ! Ye ! a dacle ar Morven Togn. Te, Bolzer, kerzh da ober ged, du-hant, a-dreuz puñs ar vereuzi. Ha klevaz trouz, ur c'hwitelladenn !... Kompron e rimp. Ni en em denno pep hini diouz e du, d'an em gavout en-dro d'ar stivell evit lodeñ an avaloù. Kompronet eo, poutred ?

Glab glizh eo ar goût; petre vezn ? C'hoarzh ha pijs gant invagnoned Ruzig-ar-Roger, o vont a-dreuz al liorz e-giz kizhier, war balvoù o dnoarn ha war o fennoù daoulin. Dapu du-enn, tri du-ze, an em silañ 'reont e-barzh tafvelijenn du-pod ar gwez. Dizale e voe al liorz adarre evel ma ne vije ket bet un ens erri.

Aet e oa ar Gerc'heiz - me, mar kavit gwalloc'h, - gant ar C'hoaleg. *

geñderv d'ur wezennad avaloù ekildrenk, anavezet mat gante. Kinnig e zos ar skourroù tarrif gant samm ar frouezh, melloù avaloù mizrin ha malenek, tud paour ! azv, ur c'hwez vat d'o heul, peadra da lakaat dour daoc'h en ho kenou e-pad pevar bloaz. Kement a oa, ma ne ouien dre be du stagañ ganti. Sankañ 'ris va dent en unan, ha bec'h dezhi ! Ur sac'hig bihan divelav en bon degaset ganin, avat ! Leue e voe kercent. Hag amez em eus ivez da gargañ va grubuilh ? Ur sell arak e-barzh al liorz : goull eo stav e-giz ur vered. 'M eus aon e tarnij huanedoù zoken. Anaoñ ? Avel ? Ye-da ! C'hoarzhadennoù mouget, na lavaran ket.

- Tarzhañ a ray poutred ar Rozig gant an avi ! e voe klevet. Skafvaet a rae ar skourroù. Laouen e oa hol lakspad, Fedal, evel un taol kurun e-kreiz bodadeg konikled ar waremm, e skiltr ur c'harm :

- Kas warnomp ! hou ! hou ! hou !...

Dispourballet e zoulagad, dilamet a oa ar gedour al liorz an ur hopal, hag e tifrete, hag e fuste, treuzif a rae al liorz evel un tenn. E-giz ul leen sot. Strafuilh ! ha youc'h ! ha tec'h timat war-du ar c'hoad pin. Bras ha bihan, tev ha treut, sachañ a rae pep hini e gilhoroù, ha dillo !

Amzer dastum va sac'hedig avaloù, ha me ha sankañ tizh seun douet ar c'hoarzh dostañ. Ne santis ket allazig an drain-spenn, me respont daoc'h. Trouc'het e oa va anal.

Edo ar gward al liorz, ur penn-bazh spontus en e zorn. Aicu ! kein unan bennak. Gant ma ne vo ket va hini. Ha ne vo ket ! Diwar ar c'hleuz, haup ! ul lamm... e-barzh an dour ! Gwashoc'h c'hoarzh ! Stagañ a rae al lec'hid, lamm a oa an alestr. Bourboulhet a rae an dour-chagi ha me e oa kargat va betoù ha glebiet va bragoù...

Emon ar-maez, avat. Un toull an avel, ha me redak, ha redak, ma ouien ober. A-henn ez is ar gwez pin hag ur nean bannak. Hogen n'em bija ket radet buanoc'h ma vije bet an tan em forn-adreuz.

Setu ar stivell. Den abet ! Trouz abet ! Sell ! Me 'zo ar c'hontañ. Eo ! amez erri ar gedour. Sakre Bolzer ! A-bann an c'hell kaout e anal, hañ ivez ! N'eo ket diskoulet c'hoarzh.

Diouzhtu war e lerc'h a tegouezh ar Macutig, ur roued de vont d'ar maez'had gantañ war e skoaz, ha goude ar Bleu-Gwenn. Hemañ, evit buzañ skouroc'h, e oa bet stlspet e avaloù gantañ war an hent. Kavout a rae an narzh, eveladout, da folliñ :

- Cheulk ma'z out ! wezañ d'ar Bolzer. Hag e oa dav dit hopal e-giz-se ? Diblasat eo va c'halon...

Ar C'hoaleg, al ludi, al leuc-roue, Morven-Togn a rized, an ail war-lerc'h galle, o c'hoarzhin glis an dornañ maez; pep hini, avat, o tiaskragn.

ur barn, samm e avaloù, ur blijadur. Evit ober al lodoù, ne c'hortozer mui nemet an Dag.

- Pelec'h eo chomet adarre an Hini-Brec'h-Yod ? a c'houlennas ar mestr.

- Ar strolleg-se a vo bet tapet gent an den, eme ar Brenn, peotr an iliz.

- Tapet ? Houmañ e vefe unan neuze. Deucamp da welout.

Ur gwiskad raden da guzhat ar bern avaloù, ha kuit ar bootred, dre ar c'hoad tafvol adarre, da welout pelec'h e oa chomet an Dag.

Allas ! Deuet oa ar wirionez gent ar c'hurust. Ret anavez edo ar Brenn finoc'h eget knoc'h louarn. An hini finañ...

Poket e oa bet an Dag. Ha fest ar vazh en e enor ! Tamolodet a-drañv ar c'hlaunied strouezh, ni a wal, ni a glev.

Gward maner Treougi, imor ruz en e gof, a heje e benn-bazh, ur pikol penn-bazh, gent un dozn; gent an dozn all e sache war skouarn an Dag, hag e vafe ar peotr paour :

- Ha ! Tres-kroug ! Ha ! Laer ha mab laer ! Me da bako-me, koll-boued, fall-tra, lor-frañs, penn-tech !... Dont da laerezh va avaloù-me ? Evit da c'hopr, un teol fuzul e-kreiz da zapulagad, mab an diaoul, un teol fuzul, bremaik... Alo ! d'ar maner !...

Ar paour-kaezh Dag a oa gwisket liv ar mazv war e zromm, nemet ur skouarn ruz-tan an tamm anezhi... Ken sabadec'het, avat, ken korilh e oa e dres, ma tadles unan :

- Dag, na gac'h ket ez pragoù, Dag !

Ma tirolles an holl gleuziad da c'hoarzhin krefv.

Subez krenn ar gward. Diskregiñ a re diouzh brec'h e brizonied; sailhañ 're davot ar c'hleuz; sellout e ra. N'oa tro-dro, na ki na kristen. Ewel just. Rek difrotet e oa kuit hol lamponed, ha buan, ha didrouz, dinden goudor du-dall ar gwaz-pin.

Kounnar bras er gward. Ewel just ivez. Aes an dra da gompren. Diskann e roas diwar e gleuz, o krozel :

- Paesñ a ray egile an holl...met i...met i !

Egile, ewel just stav, n'oa ket chomet da c'hortoz. Amzer dastum pemp pe c'hwec'h aval war al leton, kement-se stav, tac'het e oa kuit an Dag.

Setu n'eo degouezhet e-tal ar founteun. a-benn ar fin, glas e veg, trouc'het e enal. Gomp a reer outañ :

- Plijedus ac'h oue bet, Dag ? Pelec'h out abaoe, Dag ?

- Va brec'h an hini so.

- Redek a rez gent da vrec'h, te ?

- Nann ! Nemet krog e oa an dun an brec'h, N'oa ket evit tac'hout !

Holl emacomp bremañ gwitibunan, an-dro d'ar bern avaloù, re zous anezho, re drenk, pe skildrenk, re c'hwerv, azv ha glas mesk-ha-mesk, - an avaloù, n'eo ket ni !

Rannet eo ar bern, kement-ha-kement da bep hini. An Dag - o gounezat en doa - a voe roet dezhañ, evit a lod, ar brevañ avaloù hag ar re wakeñ.

Mont a reomp, goude-se, da dapout an hent bras. Ha dre ar gazel e tistroomp da Bont-'n-Abad, en ur vale d'ar paz, evel soudarded. en ur youc'hal son avaloù Treougi.

Ez an d'e ganañ deoc'h.

- Ha krediñ a ra dit eo dav-dav ?

- Mat-tre ! Mat-tre !... Neuze, noz eo anezhi; paent ac mont da gouezet. Kenavo ur wech all.

Un nebaut devezhioù war-lerc'h ez eas Madalen hag he zud kuit evit distreiñ d'o bro. Daoust d'ar c'hoant krefv en doa da gevout arre tancarded ur vignonizh gronnet e-werso gant kement a huffvre, a c'hellas Harri chom hap lavaret kenavo dezhi, direk en tref o vonet kuit...

Droukrafis didalvez, peogwir na oa roget gant an disparti nemet kalon en hini mut !

(Dihunamb, Eost 1943. - Sall. Istor..., p.169)

URIEN AR REDER

Ar pezh a c'hoarvezas da Urien ar reder, un dra souszhus ha dises da gontañ :

Beura e oa. Gwenn ar bed en brunnenn denev en diakar-amzer, pe'z eas Urien ar-mezz eus e di. Chom a roas ur pennad oc'h arvestiñ an draonienn gwisket kann. C'hwese 'ress glebor fresk ar mintin; hag e-kreiz e vruched, betek deon e galon, e sentas en un doare iskis evel askall d'e ene. Ha neuze a glaquier biroù harpet ouzh e zargreiz, e wareg en e zorn dehou e redas Urien a lammañ, evel un demm, betek lein an dorgenn, da c'houzout war pe du e trofe en daiz-se kantren e gammedoù...

Nemet neuze a weles e sevel betek ennañ en un tuz mibin, un den. Un den dianev !

Tostaat a ras hag e weles sklaeroc'h anezhañ : blavet hir ha melen a oa, gwisket en un doneg verr o tiakenn betek a-us d'e zaoulin. Klacquier ebet ouzh e c'houriz, na gwereg ebet en e zorn.

Pignat a reas war ar griball, ha chom e-gev :

- Ha n'eo ket te, Urien ar Chasser, amezañ, gwellañ reder ar vro ? Setu ma taolan hiziv klacouste dit : n'out ket evidon-ee.

- Gouzout a rez moarvat, eme Urien, n'hellan ket nac'hañ klacouste taolat din. Daoust n'ouzon ket piv out-te, desomp eta war reok.

Kerkent e oa tec'het an den dianev e-herr, o skeif war-du ar warrenn vras. Urien war e heul a glasko tostaat, met seul primoc'h na rede, seul aasoc'h a seblante egile lammat ha pellaet, evel pa vijs bot ar redek ur c'hoari eviteñ. Goude strivañ ne c'houenze temm. Keit-all e chome bepred.

An den dianev n'en devoe na gwereg na biroù. Urien a soñjas a oa se marteze a samme anezhañ. O disteural a reas dioutañ. Met an aner e voe. Keit-all e oa bepred egile...

Ha setu un survezh, diw eurvezh na redent. Ne skuizhe ket an den.

Sevet e oa an heol, un heol warlivet a ziskar-amzer, a sklerie bremañ d'e zaoulagad ar vro doanuseñ en dija gwelut biskoezh. Ur vro mainek ha trist-divi. An dud enni, evel ralegoù kroc'hetet; spontus ar skleur a luc'he en taoullou klouz o daoulegad. Met ar spontuseñ hall en o doare e oa o c'hoarzhadoù : pa

zigorant o genou ledan-ledan, gant etlakedeg o dent, e oa goap da dreantañ ur galon lommoc'h ha donoc'h eget ur bir, e oa goap da zisec'haf un den. Kentoc'h eget c'hoazh e oa harzhadennoù chas prest da zantañ. Urien en em sante o koll keiton. Hogen, zet e oa mont, mont betek ar penn, lec'h ma plijfe d'egile e vleinañ. Palec'h ? N'ouie ket. Ret e oa mont, peogwir en davoa degemeret ar c'hlaouestre.

Diakann a reas an heol, ha redek a reent bepred. Didud e oa bremañ ar vro vainoc, met sersoc'h ar menezioù. Skuizh e toue Urien da vezañ, berr e anal; hag egile pelloc'h-pellañ a oa bepred ken skañv e droad. A-vec'h ma c'helle bremañ Urien gwelout anezhañ eus a-bell, pe droe an den un ur c'hoazh pe gorn eus an odo da vont da guzhat adarre a-drañv ar c'harreg. Nemet evit e vroudeñ a taole dezhañ hopadennoù, hopadennoù, hopadennoù fromus, a zregerne iekis ar menezioù.

Hag e santas Urien en e galon evel ur pouez, evel pouez a garanteziou-en, ar soñj d'e di, an demant d'e vrud, ar c'hoant d'an douaral. Marteze e oa se e harz outañ a skañvaat. Ha kemer a reas kement a oa eus soñjoù e galon den d'o skarzhañ kuit er-mez, d'o zeurel pell dicutañ. Ya, distrobec'h e oa bramañ adnerzhusaet.

Noziñ a reo. Hag al loar a save an oabl, o sklaeraat an hent. Kompesoc'h e teus ar vro da vezañ...

Met etav an den dianav a rude, etav ken tser e droad, etav ken skiltrus e hopadennoù en noz sioul na glava ken Urien nemet ha trouz e anal-ef,skuizh evel trouz baginoù ur c'hoval.

E benn a oa deut da vezañ ponnar, evel pe vije bet plomm anezhañ : preder ha preder e save ennañ, diassoc'h diassoc'h o dougen. Parak en devoa evelse degemeret ar c'hlaouestre ? N'en divije kollit natra eus e vrud o chom en e veuriad, ha goude bezañ nac'het mont, peogwir nu oa ket an den eus ar vro ! Betek palec'h e vefe tleniet brumañ gent an estren-se ? Santout a reo e save tamm-ha-tamm an arvar d'e vouziñ ha da wenaat kement rozhañ a vane c'hoazh ennañ... Pe vennes a-benn ar fin stlepal kuit diouzh e soñj an hall bradar-se, kement a oa eus pouez e apared, betek ar pep karatañ, betek ar "ma" moumounet-se ken stag outañ ha sel an sakern. E ziskergañ a reas gent ar peurrest.

Ha setu ef skañvaat adarre da adkrupiñ gent an houliadenn. An noz a dramene, al loar a oa set da guzh, pep tra en em golle an am-c'houlou. Moarvat prestik e tefis tarzhañ an daiz... Met trouz abet ken, na flapadenn troad abet ken, naq hopadenn abet ken.

Mut an den, mut an noz, mut...

Kollet en devoa; tec'het e oa egile da ball. Urien a gouzhas divi, hant ar varv.

Frusket ar beure e zihunas : an deiz a zigoro sioul, tenar ha bresk ovel ur rozenn arwenn.

He kentañ tra a welas Urien eo kement-mañ : an den dianav a oa an e gichen. Aze oa decoulinet war al leton, ha gant bag e vizied e floure skañv e vlev dezhañ harpet e benn ouzh e varlenn.

- Ha kousket mat ec'h rus, kensil, eme an den. Diskuizh out brumañ ?
Ur reder kalonek out-te.

Ha war an taol e komprenas Urien an davoa kollet ha gonzset war un dro, kollet ar redadenn, met gonzset ur mignon. Ha, fromet-hall, e saves a kanndar ar beure hag e kanas :

Goude glac'har an noz
Pegen c'hwec ar beure;
War vrennid ur c'hensil
Eo frond ur rozenn vlin.

Gouzout a reas ervat
Ne oss ket toulliar
Ha pe seblenten koll
E oa din da c'honit.

Kunsil, hiviriken
Digor din da galon :
Goude striv ar redek,
Burzhusaet diskuizh !

Hag an den da c'houlenn :

- Anevezout a rez c'hoazh ar vro-mañ ?
- Ya, emezañ, va bro-me ar eo, ha koulskoude ha gwelout a ren 'vel na vefe pep tra nevez enni. Adneuziet e hoñval din kement a zo eus ar bud e-wechall.
- Diwar da redek hir eo deut an dra-se dit. Rak n'eo ket hepken kement a zo eus ar gorre e weli brumañ, met gallout a ri lenn an uns pep tra, ha klev-out ken diabarzh pep tra, pe vat pe fall, pe driet pe leuen, ha gouzout dibab en o zouez kement a zo c'hwekter gwirion ha lavenez. Su eo da c'hoazh evit da redadenn.

Aet e oant war-raok, hag a-dreuz ur c'hoed e pignont bremañ. Hiboud un eozenn ar gwez a sourre avel son violoñsoù sklintin o c'herdin. An deil dindan o zreid, delioù rous an diskar-amzer a lavare da galon Urien eplann-derioù al labour kaset da benn hag himenezh ar c'huzh-heol davet an inizi.

Goude ar c'hoed an em ziguzhas penn ur menez, ha warnañ ur c'hastell avel kollet e lein an oadloc.

- Ar menez-se a anavezan knez, eme Urien, met penaos ar c'hastell a verzan bremañ war e gribann ?

- Va zi eo, eme an den. Eno edon a-viskoazh ha ne weles ket ac'hanon. Me 'ziskenns da dremen ouzh da dor, ha n'am gwelae ket. Da c'hervel a raon, ha ne glavae ket. Me eo an den dinnavez.

- A kensil ! Hag an 'vin c'hoazh digar a-walc'h e vit chom hep da welout pa dremen, hep da glevout pa c'halvi, hep da gompren pa gomzi ? Goude da gavout em eus son d'az koll.

- N'az pezh ket son. En em lez hepken da vazañ bleniet gonin lec'h a garin. Deus ha gwel !

Antron a rejent ar c'hastell. Hag e tiskouezae an den e doñorioù dezhañ : kuzunenoù, mantilli, perloz, skrinioù leun a vein prizius.

- Ha ne weles netra souezhus enno, emezañ da Urien ?

- Gwelan, a respontas hemañ. Kement em eus diskaret diouzhin war hent ar redok a zo amañ en-dro. Maen-rubis va c'hoantadoù, maen-topazo va frederioù, ha va "es", diannet treluc'hus.

- Ha kollet e vefe tra pe dra eus ar pezh ac'h eus dilezet evidon ?

- Netra !

- Evolvea, kement striv a ri d'am servijout, Urien, ne vo kollet nag evidon nag evidout.

- O keneil, eme Urien, n'em eus ken c'hoant nemet d'ober eus da soñj va soñj-ma, eus da breder va freder-ma. Ha chom ez ti hiviziken e voto din rii lavenez.

- Siwazh, Urien, mez an c'harez a tistroi davet an dud adarre. Hag em anv a lavari dezho pezh a ouzout. Kontañ e ri dezho da redadann vuzhodus ha sallet e vi ganto avel un den kollet gentañ e skiant-vat. Dougen a ri diweskall kuzh, diweskall ledon d'az enu ha n'o gwelint ket, da c'houliñ e reint o stekiñ ouzhit gant o c'hrebanoù ha ne cuezint ket. Poanias a vo dit, met frealzus war un dro, rak ac'h ober evelas e eplanno annout karantaz ar Vuhez. Genit e vin, hag e vit da gorf bazañ pell diouzh ar c'hastell e vo hepred da galon o chom amañ betek an deiz ma savi an-dro betek amañ da deñva leundar ar peoc'h.

Urien a ziskennas eus ar menez. Ha c'hoervezout a reas gentañ avel m'en devoa lavaret ar C'heneil. Kontañ 'rae burzhud e redadann, ha nebut a dud a grede. Skilfet e oa gant o diskredoni. Met diwar karantaz evit ar C'heneil a c'houzave gant lavenez, o c'houzout mat e tustume Mestr ar C'hastell an e zefzorioù kement strivad a rao.

Ha d'an noz e kene :

Eus kraban al leon, va disub,
A keneil ar C'hastell lugarnus !
Menel ez ti, c'hoantad dreist-hini.

Rak esmea ve c'halon eo kounast
Kevrinoù ar redok burzhodus :
Lavenez, anavout da vazañs.

Ha trivli va c'halon eo c'hwasa
Da frondoù an kraizon va ens
Ha klevout da lavar dishaglev.

Deus buan, o serr-noz diwazhañ,
War labour va buhez sevenat,
Ra gano delioù rous ar c'hoadoù.

Hag ar gwez a sourro un hiboud
Evel mouezh esmeas ur rebod
A vije lugarnus a sonioù.

Pentakoet 1945

(Kevrinoù Kristan, niv. 5-6, 1948)

E GWERZH E TI " SKOL ".

Merc'hig ar Rozenn	1,50 LN	Kabellig Ruz	1,50
Paotr e Varv Glas	1,50	Gwenn-Erc'h	1,50
Robino Kruzo	1,80	Kistinenn	2,00
Ar C'hemener Bihan	1,80	Gwennig ha Gwenola	2,00
Ar C'hazh gant Heuzoù	1,50	Mojennoù de la Fontaine	2,00
Istor Meudig	1,50	Kroc'hen Azen	2,00
Ar Goantenn e Koad	1,50	Ar C'havr hag he Givri	2,00
Luduennig	1,50		
An Ti Satanazet	3,50	Labous ar Wirionez	4,00
Alanig an Tri Roue	4,00	Marvailhoù ar Vretoned	2,50
Lomnig	3,50	Bisousig	1,50
Tour ar Bleiz	1,00	Ali-Baba	1,80
C'hoariva Brezhonek	3,00	Notennoù d.w.b.ar Geltad	8,00
La langue bretonne et ses combats	3,50	L'Abbé P.M. LEO'HVIEN	5,00
La Roche-Derrien et ses environs, gant Ernest le Barzic		L'Abbé J.M.PERROT	5,00

Lakaat 10 % ouzhpenn evit ar mizoù.

Distaoù evit ar skolioù hag ar strolladoù.

Kont-Red Post : Revue SKOL, 1911 06 RENNES.

LENNIT E BREZHONEG KAERAN LEVR AR BED

A R B I B L .

Aviel Sant Mazhe	4,50	Levr ar Furnez	3,00
Aviel Sant Mark	4,00	Koheleth	2,00
Aviel Sant Yann	4,00	Habakouk, Hobdia	3,00
Diskuliadur St Yann	3,00	Prizioù franko.	

Da vezañ embannet hep dale : Aviel Sant Lukaz.

Kas an arc'hant d'an DII Saint Gall de Pons, LOUANNEC, Côtes d'Armor.
K.R.P. Roazhon, 519 40.

= o = o = o = o = o = o = o = o

LEVRAOUEG vBARR-HEOL

Seurez Kerwenan, gant Dom Duchauchix	2,50
Mervel da Vevañ, gant Y.F. Ar Gow	4,50
Otello, gant Shakespeare, lakaet e Brezhoneg gant Klerg	5,00

K.R.P. Abbé Le Clerc, Bulien, 91 764 Rennes.

LENNIT BEP WIZ

A R B E D K E L T I E K

Koumanant-bloaz : 10 LN da gas da AR BED KELTIEK, BREST,
E.R.P. Rennes 1907 07.

directeur - imprimeur - gérant : Armand LE CALVEZ, PLOUZEVOC, Côtes d'Armor
RENER - MOULIER - MEROUR :

Périodique inscrit à la C.P.P.P. sous le numéro 35 323.

DISKLERIET HERVEZ LEZENN : 2¹ Trimiad 1962.
Dépôt légal : 2e trimestre 1962.

